

Youenn OLIER

**ISTOR
AN
EMSAV**

II

**Roazhon
imbourc'h
1972**

I M B O U R C ' H , K E L A O U E N N B O L I T I K E L

Niverenn 31-32/1

31 Eost 1972

Stagadenn d'an niverenn 31-32

T a o l e n n

Y O U E N N O L I E R : I s t o r a n E m s a v
(1 e v r e n n 2)

Koumanant-bloaz : ugent lur (20 lur). K.R.P. Y. Ollivier
1 534 25 Roazhon. Deraouiñ a ra ar c'houmanant-bloaz e miz
Genver. Ar pennadoù hag al lizhiri a zo da gas da Y. Ollivier,
7 bd. A.-Burloud, 35 - RENNES.

Priz ar stagadenn-mañ : 13 lur.

CPPP : 50 0 15

Youenn OLIER

**ISTOR
AN
EMSAV**

II

**Roazhon
imbourc'h
1972**

P e n n a d 7

R a k k e r z h e r i o n

h a s t o u r m e r i o n d i g e n v e z

Dav eo menegiñ stourmerion digenvez o deus embannet o mennoziou brogar e deroù ar c'hantved. Unan eus ar re-se e oa ar c'homandant Guillemain eus Kestemberzh a c'houlenne diskar renad mac'hon Paris e Breizh ; Gayraud, kannad gall eus Kernev, de Languinais, kannad ivez a-du gant an digreizemañ, Ernest Lamy, kannad eus an Oriant, Paul Guieysse, kannad ivez eus an Oriant, a voe unan eus ar re gentañ o c'houlenn ar brezhoneg er skol e kambr ar Gannaded e Paris (dezhañ e reas Doumergue ar respont brudet : n' oa ket tu da gelenn ar brezhoneg er skolioù gall rak kement-se a vefe atizañ an disrannouriezh e Breizh) ; tad e voe d'ar broadelour Marcel Guieysse, aozer al levr "La langue bretonne" embannet e 1936 hag unan eus renerion ar Strollad broadel e 1940 hag an hini a voe savet e 1943-44 da harpañ obererezh ar "Bezen Perrot" e 1944 (eus ar gostezenn "radikal", a gleiz eta, e oa Paul Guieysse, protestant a-hend-all, un degouezh dibar e Breizh, e pep keñver eta.) Anatol ar Bras a sikouras meur a luskad brezhon en amzer-se hep dont tre da vat ebarzh hini ebet anezho ; broadelour a-walc'h e vije bet hogen paotr ar Skol-Veur c'hall e chome da gentañ ; daoust da se, en abeg d'al levrioù en devoa savet diwar-benn Breizh henvoazel, e oa sellet evel un aotrouniezh gant kalz stourmerion vrezhon, zoken gant Olier Mordrel en eil Emsav a yeas ur wech bennak d'e gavout goude 1918 ; de Lamarzelle, mouler e Gwened a c'houlenne ensavioù arbennik evit Breizh ; de Laigue, de Calan a oa a-du gant emvelestrezezh Breizh, koulz ha A. Desmas, "labourer-douar" ha G. Loire, rener ar Morbihannais a yae betek aliañ d'ar Vrezhoned chom hep paeañ o zailhoù evit tizhout o falioù ; Riou, senedour eus ar Morbihan a hete ivez

ur "Bretagne libre et organisée" ha Ficot de Flediau a oa prest da arverañ ar feulster evit lakaat ar gouarnamant gall da blegañ.

Unan eus ar rakkerzherion-se an dudiusañ ez eo bet moarvat Lionel O Dogherty de Radiguet a voe ganet. Bro-Leon war-dro 1870 (1). Darn eus e c'hourdadoù a oa Iwerzhoniz hag en abeg d'an orin-se eo e teuas da vezañ broadelour breizhat. Ken abred ha 1894 en devoa kavet tro da embann e vennoziou dirak an holl o vont da zanvez kannad e kelc'hparzh Dinan ; neuze en devoa kinniget d'e zanvez dilemerion mouezhiañ a-du gant frankiz Vreizh. An intrudu-se, avat, en amzer-se, a oa romantel a-walc'h o vezañ má n'en devoa Radiguet strollad ebet d'e harpañ ; c'hwitañ a reas gant e vennad hogen e arnod a dalv ar boan bezañ kounet.

Daoust ma emezelas abred a-walc'h er Gorsedd dindan an anv a vBarzh Enez Eusa ne dizhas ket Radiguet kavout e lec'h e nep aozadur brezhon : ur stourmer digenvez e chomas atav. Evelkent ne vanas ket dizoberiant evit keloù-se rak skrivañ a rae stank er c'helaouennoù. E 1904, da skouer, ez enebas taer ouzh ar "vorianataerion" a glaske tuta dormwezhourion varc'had-mat e Breizh evit embregourion kanol-vor Panama, en ur douellañ kouerion Vreizh paour ha dizek, gant aotre ha bennoz ar gouarnamant gall a neuze (ebarzh AR VRC, pergen, en devoa embannet Radiguet ur pennad a-zivout an afer-se). D'ar c'houlz-se e oa deuet Radiguet da chom en Naoned. Pa oa o vevañ er gêr-se, e 1905, en devoa skrivet ur "Constitution pour une Bretagne indépendante". Er skrid-se ez empenne ar stourmer-mañ eta ur Stad Vrezhon dishual leviet gant "gouarnamant an Dag" dilennet evit pemp bloaz gant "Bredoù Breizh" (ur renad arlevierezhel, diouzh patrom U.S.A., e tlee bezañ hini Breizh neuze) ; ar gouarnamant-se a-hend-all a c'hoarveze eus ur poellgor-erounit, ennañ pemp sekretour-stad. Fellout a rae ivez da Lionel de Radiguet ensevel ar poblvouezhiañ, evel en Helvetia. Evit kempouezañ an atebegzhioù etre kêrioù Breizh e tasparzhe o c'hefidiezhoù evel-henn : al lez-varn en Naoned, al lez-galv e Roazhon hag ar gouarnamant e Sant-Erieg.

E gwirionez e kemere Lionel de Radiguet da batrom ar Stad helvetiat. Erbediñ a rae ar gevreadelezh evel reizhiad politikel

(1) N'em eus ket gallet gwiriañ ar bloaziad-se.

ar Stad Vrezhon. Se oa natur a-walc'h goude holl rak a-du e oa ar brogarour-mañ gant Breizh Nevenoe, Breizh Arvorig; stagañ a rae ouzh Breizh rambarzhioù an harzoù : Maen ha Liger, Vande, Mañch ha Mayen.

Betek ar brezel bed kentañ e kendalc'has Radiguet da skrivañ ebarzh kelaouennoù ar Wask Vrezhon, dreist-holl avat war ar PAYS BRETON. D'ar mare-se avat e oa dalc'het ar speredoù gant ar stourm broadel en Iwerzhon, da heul mouezhiadur al lezenn diwarbenn an "Home Rule" e Lunden ha kilstourm an drevadennerion saoz en hanternoz an enezenn. Ar pezh a zo heverk avat er pennoù a embarnas Radiguet neuze ez eo ar spered enep-alamana awene anezho: Radiguet a oa krenn a-enep da bep kenlabour gant an Alamaned koulz e Breizh hag en Iwerzhon.

Kentoc'h eget chom en ur Vreizh c'hall e kavas gwel Lionel de Radiguet kuitaat tiriegezh ar Stad c'hall. En em denañ a reas da Vro-Suiz end-eeun, ma teuas da vezañ keodedour anezhi.

Un den desket ha barrek e pep keñver e oa Lionel de Radiguet. Aczet en doa ur yezhadur sinaek ; savet en doa oberennoù lennegel, en o zouez ur romant "Bayadère" a gont istor un Iwerzhonad rannet e galon etre div garantez, an hini en deus evit ur genvroadez iwerzhonat hag an hini en deus evit un indezadez hogen - hag eñ diouganer kentoc'h eget oberour gwirion - e kavas Radiguet en harlu en diwezh un diskoulm d'ar c'hudennoù ha n'oa ket evit diskoulmañ e unan.

Ouzh ar roll-mañ e c'hellfed stagañ anv ar c'hont de Lantivy-Tredion, meneget e pennoù arall eus al levr-mañ. Hemañ a oa ur gwenedour, ezel eus an "Action française" moarvat. Kemer a rae da ziazez damkaniezhoù Maurras el levr a embannas e 1911 hag a oa e dalbenn "Vers une Bretagne organisée : enquête sur les libertés régionales et la formation d'Etats provinciaux en Bretagne". Mirelour ha hengounelour e oa savboent de Lantivy-Tredion, kempennelour rik, hogen seurt savboent a oa boutin tre en Emsav d'ar mare-se.

Hiniennoù digevre e chomas an holl stourmerion-se. Ne gemerjont ket perzh da vat e labour an Emsav hogen o freder a ziskouez e oa pobl Vreizh krog da zihuniñ ha da emouezañ ouzh he broadelezh e deroù ar c'hantved.

=====

P e n n a d 8

A r g e l a o u e n n " S P E R E D A R V R O "

Krouet e voe ar gelaouenn-mañ gant Tangi Malmanche e miz Eost 1903, da lavarout eo pemp bloaz war-lerc'h deroù an Emsav kentañ. An talbenn resis a oa "Spered ar vro, gelaouenn a lizheradur brezhonek" a zlee dont er-maez bep miz, a-hervez ; a-benn ar fin ne voe moulet nemet peder niverenn etre miz Eost ha miz Here 1903. Berrhoal kenañ e voe eta ar gelaouenn.

Graet ez eus bet un diouganer eus Tangi Malmanche, war zigarez en deus embannet ar gelaouenn-mañ e-pad un nebeut mizioù (gant tud ha n'o deus biskoaz moarvat lennet linenn ebet eus SPERED AR VRO na gwelet zoken al liv anezhi!)

Pa studier ar gelaouenn-mañ avat ne verzer ket mat e ve anezhi e nep doare ur gelaouenn bolitikel dispac'hel. Ur gelaouenn a lennegezh hag a zo chomet war dachenn ar yezh betek ar penn ez eo bet. Ar skridoù lennegel a zo bet moulet enni n'int ket dishoñvel diouzh ar re a veze embannet peurlvuiañ d'ar marc-oc (ma lakaer a-ziforc'h oberennoù Tangi Malmanche a oa muioc'h personel, dreist-holl ar barzhonegoù, lakaomp : MERC'H AR C'HLOC'HER, a laka da soñjal e GURVAN :

Ha me marv, te eo a garan ;
Emberr en em gavimp e joausted Doue...

Dre vras avat e kamsul skrivagnerion ar gelaouenn ar vuhez war ar maez, kaerder ha santelezh buhezegezh ar gouerion. Er c'heñver-se ez eo mat an danevell hir embannet gant Frañsez Kamm : "Ur re dud kozh".

Evelato e par er gelaouenn un nebeut mennozioù nevez. Er pennad digorifi embannet war an niverenn gentañ hag a zo e dalbenn : "Bezomp ni hon unan" (notit, diwar dremen, kounadur al lugan onat a neuze) e roer d'ar yezh ha d'al lennegezh un dalvoudgezh

politikel resis. E gwirionez e oa ceunet pennad Tangi Malmanche a-enep d'ar vrizh-ouizieion a felle dezho ober eus ar yezh un danvez studi hepken kentoc'h eget a-enep d'ar skrivagnerion a save o skridoù diwar-benn ar bobl hag evit ar bobl. Er pennad-mañ eta e roe Tangi Malmanche da gefridi d'ar yezh krouiñ ha dero'hel ar spered broadel : ne c'helle "spered ar vro" en em ziskouez e Breizh nemet dre ar brezhoneg. O skrivañ kement-se e tistaole Tangi Malmanche memnad ar Vrezhoneg a neuze o dije klasket ken buan all reiñ da Vreizh ul lennegezh vroadel e galleg. E deroù ar c'hantved e veze embannet meur a gelaouenn lennegezh c'hallek gant brogarourion o devoa klevet marteze anv eus al lennegezh saoz- iwerzhonat hag a roe pouez dezhi (1) (Roparz Hemon e unan a daolas evezh outi).

Ur mennoz talvoudus all a voe estaolet ivez evit ar wech kentañ gant Tangi Malmanche : penaos al lennegezh poblek - hag a oa ken stank d'an ampoent - n'he doa talvoudegezh ebet evit pezh a sell ouzh miridigezh ar yezh ; ne c'helled ket kontañ war ar bobl evit difenn ar yezh :

"Ar bobl" eme dTangi Malmanche - "ne ra forzh eus he giz-prezeg ; homm mirout a ra moarvat dre voaz ; n'henn difenna ket dre gefridi avat pa ouezo ur c'hiz all. Rak ar bobl ne oar ket petra eo ar "superflu"..."

Ha klozañ a ra Tangi Malmanche ar pennad-mañ evel henn :

"Neb a fell dezhañ labourat evit ar bobl a rank bremañ labourat evit an dud desket..."

Savboent GWALARN 23 bloaz diwezhatoc'h a gaver amañ moarvat, evit darn. Evezhiañ a ranker evelkent al lavarenn diwezhañ rak drezi e veizer e felle d'ar skrivagner harpañ ar stourm war frammoù ar gevredigezh henvoazel kentoc'h eget war un danvez framm stadel. Tangi Malmanche en dije kredet a-walc'h - evel Meven Mordiern e unan a veneg anezhañ meur a wech a-hend-all - e oa a-walc'h levezon ur gouvrriad bennak, perc'henn ur c'hastell pe un noter pe un den a zoare bennak evit kemm tro-soñjal an dud diwar-benn ar yezh. Bepred eta en em lakae Tangi Malmanche e par ar gevredigezh henvoazel evel ma oa neuze evit diogeliñ dazont ar yezh hag ar vroadelezh. Ne hañval

(1) E barr o brud e oa skrivagnerion evel Anatol ar Bras, charlez ar Goffig, Tiercelin h.a. ha kelaouennoù evel "L'hermine", "Le clocher breton" h.a.

ket Tangi Malmanche bezañ merzet e oa ar gevredigezh henvoazel-se war he diskar a-benn neuze ha prest da zispenn abarzh pell. Savboent Tangi Malmanche eta a zo pell diouzh hini an trede Emsav.

Pezh a zo arnevez ha diseurt e mennozioù ar skrivagner koulskoude ez eo meizadur an emgann evit ar yezh, ivez ar preder diwar-benn he dazont a zamweler er pennad emaoamp o paouez menegiñ hogen ivez er varzhoneg "Ar Sant" a oa moulet en niverenn gentañ end-eeun, er gwerzennoù-mañ, lakaomp :

"Gwa da neb a zegas ar gouloù en hon touez!
Gwa da neb en deus hon dihunet! D'ar marv!"

maz eo ar c'hwervoni anezho heñvel ouzh hini "Pirc'hirin ar Mor" tregont vloaz war-lerc'h : ar bobl a argarzh an darlavariad a gemenn ar stourm hag ar brezel. An dro-spered-se, spiswel hogen digalon a-walc'h, ne oa ket hini Taldir nag hini ebet eus skrivagnerion ar grez-se ha n'oant ket chalet nemeur gant ar wall blanedenn a c'hortoze ar yezh ; tonkadur houmañ, moarvat, a hañvale dezho-int bezañ divrall, komzet ha ma oa, hervez enklask Sébillot, gant ouzhpenn ur milion a yezherion.

En ur c'heñver all avat he deus bet ar gelaouenn-mañ pouez en endroadur an Emsav. Enni - en niverenn eus miz Gwengolo 1903 - en dous kroget Frañsez Vallee da vrudañ uhelvennad ar yezh unvan, daoust ma oa e c'houlennoù evit tizhout ar pal-se lent a-walc'h en o stumm e gwirionez. Frañsez Vallee eta a erbede neuze un unvaniezh damstrizh , peuzheñvel ouzh hini ar gresianeg, evel ma skrive (gresianegour e oa F. Vallee). Eveljust ne oa anv, n'eus forzh penaos, nemet eus ar brezhoneg skrivet.

Stourm a rae Frañsez Vallee er pennad-se ouzh ar gwallvoaz a arverañ gerioù rannyezhel distreset ha dianavezadus e-lec'h ar stummoù klasel anezho. D'ar c'houlz-se e oa techet an holl skrivagnerion da zislaberañ ar yezh evit bezañ intentet gwell - a-hervez - gant kelo'hiad strizh lenneion o c'horn-bro (1). Taldir e unan,

(1) Lemm er c'heñver-se "Eñvorennoù ur brezhonegour" gant F. Vallee Evel skouer eus ar gwallvoaz-se e c'heller reiñ skrid ur brezegenn distaget gant Taldir e Kallag d'an ampoent. Ober a rae gant stummoù a seurt gant "glefe", "klefe", war un dro gant gerioù lennegezh evel "broadelezh" ha "treuzlavar" ("hengoun").

diskibl Vallee koulskoude, a blegas meur a wech d'ar gwall dech-se, hag er gelaouenn-mañ end-eeun. Aliañ a rae F. Vallee d'ar skrivagnerion ober o mad eus labourioù Ermod evit skrivañ en ur yezh reizh hag, eveljust, deskiñ ar c'hembraeg a c'helle reiñ dezho patrom ur yezh klasel hag unvan.

F. Vallee ivez en doa meizet diouzhtu e oa unanet start silvidigezh ar yezh ha diorreadur ar spered broadel. Unan eus ar re gentañ ez eo bet eta o c'houlenn digant an Emsaverion deskiñ istor Breizh war un dro gant ar yezh vroadel. Ha Vallee da embann neuze e gredenn vroadel e unan :

"Ni Brezhoned, a zo ur bobl, gant he gouenn, he gizioù, he spered, he yezh, he galvedigezh digant Doue. Pa glasker hon diroudennañ diouzh hon hent, d'ar Varzhed eo diskouez dimp kentelioù an Istor ha skouerioù ar pobloù keltiek all..." (1)

En ur c'heñver all he deus ar gelaouenn-mañ heñchet an Emsav rak hi an hini eo moarvat a voulas ar pennad kentañ diwar-benn prederouriezh e brezhoneg. En niverenn 4 e teuas er-maez un doare studiadem diwar-benn "Divarventez an ensoù" a zo anezhi dreist-holl un heklever eus damkaniezhoù ha tezennoù ar Varzhed kembreat awenet gant skridoù Iolo Morgannwg hag a zifenne ivez un doare mesiazelezh keltiek. Ar pezh a c'heller notañ amañ avat eo hepken e oa yezh ar pennad-mañ pell a-walc'h diouzh hini ar bobl, enni gerioù hir a seurt gant "peuranaoudegezh", "peurvirionez" ha gerioù all amprestet digant ar c'hembraeg.

Peseurt pouez ha peseurt lec'h reiñ da SPERED AR VRO en Istor an Emsav ? Kavout a ra deomp he deus bet ar gelaouenn-mañ un dalvoudegezh arouezennel kentoc'h eget ul levezon gwirion. Dleet eo he brud d'ar pezh o deus skrivet diwar he fenn Meven Mordiern ha Roparz Hemon, hag ivez, a-benn ar fin, da anv-mat ar rener anezhi, Tangi Malmanche. Moarvat e voe broudet preder Meven Mordiern - a oa o paouez dont d'an Emsav war-dro ar bloavezhioù-se - gant tezenn ar brezhoneg miret d'an dud desket a oa difennet gant Tangi Malmanche en e gelaouenn. Hogen re verzhoc'h e voe SPERED AR VRO evit ma c'hellje an hini a voe kiriek d'an dezenn-se tennañ e unan an holl heuliadoù anezhi.

(1) F. Vallee a oa barzh, pezh na voe biskoazh Tangi Malmanche.

E ser-se e c'heller en em c'houlenn perak ne dizhas ket Tangi Malmanche asteñn pelloc'h buhez e dammig gelaouenn. Daoust d'ar pezh a gred hag a lavar darn ne voe ket an diouer a lennerion kiriek d'an drouziwezh-se. Gwirheñvel eo avat ne voe ket Tangi Malmanche hag eñ o rankout gounit e damm greun e Paris evit plediñ ervat ganti evel ma vije bet ret. Marteze e voe un abeg all d'ar c'hwitadenn rak gallus eo en dije Tangi Malmanche feuket e genlabourer Taldir da heul ar burutelladur un tammig flemmus en doa graet eus oberenn hemañ "Pontkalleg". Bezet pe vezet, Taldir e unan a gemeras war e gont mennad Tangi Malmanche er bloaz war-lerc'h pa stagas da voulañ AR VRO evel ur stagadenn lennegel d'AR BOBL. Ouzhpennomp evit echuiñ ne oa ket Tangi Malmanche nag ur stourmer nag un oberour - ne gemeras perzh e labour aozadur brezhon ebet - , skrivagner hag arzour, ne lavaran ket. Ha daoust m'he devoe e gelaouenn un tamm pouez bennak ez eo arabat kreskiñ ar pouez-se en tu-hont d'ar wirionez.

Pennad 9

An darempredoù atrekeltiek
e deroù ar c'hantved

N'eo ket bet sklaeraet betek hiziv dre benaos e voe adskoulmet an darempredoù etrekeltiek e deroù ar c'hantved. Moarvat, adal 1895-1896 e oa kroget "Breurizh Breizh" da blediñ a-zevri gant ar yezh (kv. kendalc'h Landerneve e 1896 ha labour F. Vallee, ar brour Constantius, Emil Ernod h.a.) En un doare strishoc'h o devoa beajoù Yarn ar Fusteg e Kembre hag hini Edmond Fournier d'Albe e Breizh prientet an adskoulmadur-se hogen n'anavezomp ket arbennoù resis ar beajoù-se nag an amlegadoù anezho.

Bezef pe vezef, e kendalc'h diazezañ K.B.B. e oa en am gavet un Iwerzhonad, Edmond Fournier d'Albe - a oa darn eus e c'hourdadoù Breizhiz divroet da Vro-Saoz dre ma oa protestanted anezho. An dra-se a c'hoarvezas e 1898. Deuet e oa Fournier d'Albe da Vreizh evit prientif ur c'hendalc'h etrekeltiek a zlee kemer lec'h e Kêrdiz, er bloaz war-lerc'h.

E-pad hañv 1899 eta ez eas ugent Breizhad da Vro-Gembre, en o zouez maer Gwengamp. Sur mat ne oa ket eus an holl re-se brogarourion daer ; un toullad anezho, koulskoude, a oa broadelourion hag en o mesk e c'heller menegiñ Lionel de Radiguet, ur romantelour a estlamme ouzh gwerinveliezh Helvetiz hag a huñvree en un impalaeriezh keltiek. E gwirionez, ur stumm folklorel, evel ma oa ar c'hiz neuze, a oa d'ar c'hendalc'h e unan hag an holl Vrezhoned" a oa erruet e Kerdiz gant "tokoù breizhat" war o fenn. Hogen, adarre, estreget

folklorourion a oa en em gavet du-se ; e-mesk Iwerzhoniz, da skouer, e c'heller menegiñ O Donnell ha dreist-holl Padraig Mac Piarais, diazezer Skol Sant-Ennda, unan eus renerion ar C'hevre gouezelek hag emsavadenn Lun Fask 1916. Yaouank flamm e oa d'an ampoent a-hend-all.

Ar "wir Vreizhiz" - hervez Taldir - a oa bet pedet da gremen un nebeut devezhioù e kastell Llanover gant ur vrogarourez kembreat : A. ar Bras, Charlez ar Goffic, F. Vallee, de Radiguet, an Estourbeillon, Bougault-Ducoudray, ar sonaozour, Taldir. Ne oant ket niverus, evel ma weler.

D'an 22 a viz Mae 1901 e oa distroet Edmond Fournier d'Albe da Roazhon evit prientiñ kendalc'h Dulem ar wech-mañ. Degemeret e oa bet gant Frañsez Vallee ha Yann ar Mem. Goude-se e oa aet ar c'hammad iwerzhonat betek an Oriant e-lec'h en doa kejet gant renerion "Kloc'hdi Breiz", René Saïb ha Madeleine Desroseaux. E pep lec'h en doa kouviat Breizhiz da gemer perzh er c'hendalc'h "hollgeltiek" (1) a oa da c'hoarvezout e Dulem un nebeut reizhioù war-lerc'h.

En hañv-se eta e oa aet pemp dileurid eus Breizh betek Dulem. Bez e oa anezho F. Vallee, Alfred Lajat, hag e wreg, Yann ar Fusteg, Abalor ha Taldir. Kavet o doa du-se biniaouerion a Alba, Iwerzhoniz, hep kontañ yezhoniourion sirius meurbet : daou Alaman hag ur Poloniañ. Enoret e voe ar folklor en dro-mañ evel da geñver ar c'hendalc'h kentañ. Iwerzhoniz, da skouer, a glaske azbevaat o gwiskamantoù kozh paotred ha merc'hed (2). Un dibunadeg vras a oa bet graet e kêr Dulem, enni gwazed harnezet diouzh giz o bro, gant dilhad sklaer hag alaouret hag int o tougen a-gevret ur "maen-hir" rannet e pemp lodenn (3).

(1) Lavarout a raed "hollgeltiek" kentoc'h eget "etrekeltiek".
(2) Gwiskamantoù diwar ar gremmazer, c'hoarivael a-gremm a-benn neuze. N'eo nemet e Kembre n'oad ket re chalet gant ar gwiskamantoù daoust ma klasked lakaat diouzh ar c'hiz togou fons uhel ar merc'hed.
(3) Hervez Erwan Berthou, ebarzh "Lemenik". Ar peulvan a oa un arouezenn keltiek ha drouizel rik (kv."Ar Roc'h-toull" gant Jakez Kerrien).

Evelato e klaskjed kas da benn ul labour sirius da geñver ar c'hendalc'h-se ha pergen ez arnodjed lakaat en e blomm ur gwir strollad etrekeltiek. Savet e oa bet ivez ur gelaouenn viziek a zlee bezañ un ere etre Kelted an hollved. Harpet e oa ar gelaouenn-mañ gant Lord Castletown a oa a-hend-all madoberour (1) "Conradh na nGaeilge". Hemañ en devoa da eiler en-fer-mañ Joseph Flunkett (2).

Diazezet e oa bet ivez un doare "kevre etrekeltiek" a oa e dalbenn e saozneg "The Celtic Association" ma voe Abalor an dileurid breizhat anezhañ (3). Pep a skourr er c'hwec'h bro galtiek he devoa ar gevarzhe-se ; embarn a rae ar c'huzul-meur anezhi e oa e bal gounit an emrenezh d'ar broioù keltiek sujet d'ar gurunern saoz (Iwerzhon, Alba, Manav, Kernev, Kembre) ; memmet e oa da waskañ war c'hoarnamant Paris evit ma vije aotreet kemendall da Vreizh.

Un tamm bennak broadelour e oa eta ar c'hevre "hollgeltiek"-se. E-pad ur pennad e klaskas skoazellañ ar Vrezhoneg en o stourm. Da skouer, e 1902, e kasas ul lizher d'ar maodiern gall Combes pa felle da hemañ berzañ ar brezhoneg en ilizoù ; ivez, e 1903, ez aozas ur c'hest evit sikour martoloded Vreizh rivinet gant an ol-werzh war ar pesked er bloaz-se (an arc'hant dastumet a voe kaset d'ar Estourbeillon)

Kemer a rae ar c'hevre-mañ zoken da uhelpal politikel kompezañ ar skollhoù a c'helle lakaat ar Stad c'hall hag ar Stad saoz da enebiñ an eil ouzh eben (4) : dres edo an div Stad-se o kevezañ d'ar c'houlz-se war dachenn Afrika ha darbet e oa bet d'ar brezel tarzhañ etrezo da geñver afor Fachoda (en abeg da se e selle ar C'hallaoued gant ar brasañ disfiz ouzh ar "Celtic Association" a ziskredent warni bezañ gopret ha tarvet gant ar Saizon).

(1) Hemañ a zegemeras an dileuridi breizhat en e gastell e Doneraile, er "Gaeltacht" ; un degemer cheurc'h a oa bet graet da ostizion al Lord a veze servijator gant lakizien e livrez. (2) Uhelc'hoant hemañ a oa dont da vezañ "Bezroue" Iwerzhon. E vab avat a oa broadelour.
(3) Chom a reas Abalor daou vloaz e Dulem evel kelenner galleg.
(4) Na disoñjomp ket e lakae Yann ar Fusteg ar "Gorsedd" kiriec da sinadur an "Gwalev Kalonek".

Padal ne c'hellas ket ar C'hevren-mañ ober kalz berzh dre ma ne dizhas ket ar bobl e nep doare. Dre ma oa bet savet gant ur gouvriad ne zeuas biskoazh ennañ nemet gouvriaded end-eeun, a seurt gant Lord Castletown (an hevelep si a oa d'an "Association bretonne" daoust m'he doa houmañ dedennet un nebeut tud eus ar bobl pe ar renkadoù etre araok bezañ amsavet gant K.B.B.). Petra bennak ma oa deuet brogarourion iwerzhonat a seurt gant Padraig MacPiarais d'ar c'hentañ kendalc'h etrekeltiek e Kêrdiz ez eo reizh notañ o devoa ar vrogarourion iwerzhonat dre vras disfiz a-walc'h ouzh al luskad "hollgeltiek" renet gant Lord Castletown. Meur a vammenn a oa d'an disfiz-se. Unan anezho a oa protestantiezh Edmond Fournier d'Albe (1) ; rak an darn-vuiañ eus kengravozidi hemañ en Iwerzhon a oa a-du gant ar Saozon (frankveizour e oa e gwirionez Fournier d'Albe hogen e diegezh a oa protestant ha n'eus forzh penaos e frankveizouriezh n'oa ket evit aesaat e zarempredoù gant Iwerzhoniz katolik en un amzer ma ne oa ket mat an darempredoù etre an Iliz katolik hag ar frankveizourion).

Castletown e unana oa ur mondan, bet koronal el lu saoz ha graet brezel gantañ a-enep dar vBoered. Hemañ, eveljust, a oa aesoc'h dezhañ tuta e salioù-degemer saoznekaet Dulenn eget e-touez ar ouzelegerion eus ar bobl, lakaomp.

War ar marc'had e kollas ar "Celtic Association" he brud-vat o pleustriñ ar folklor c'hoarivael ha lu hon eus meneget : Iwerzhoniz a yae da glask dilhad broadel en ur gremmazer steuziet abaoe 900 vloaz (2). Netra souezhus eta ma pellaas ar vroadelourion iwerzhonat buan a-walc'h diouzh ar "Celtic Association". Ne zeujont na da gendalc'h Kêrmarvon e 1904 na da hini Dinedin e 1907 na da hini Brest e 1908. Ar Vrezhoned en em gavas eta o unan penn gant Kembreiz e kendalc'hoù ar "Gorsedd". Ha kement-se a zislañsas an Emsav dre ma forc'has hemañ diouzh un Emsav all a oa aet pelloc'h war hent an dispac'h hag an emzieubiñ eget hini Kembreiz a chome seizet ha

(1) A-walc'h a spered keltiek en devoa Fournier d'Albe evelato evit deskif yezhoù keltiek all, ar c'hembraeg, da skouer. (2) Soñj am eus bezañ gwelet merc'hed gwisket gant seurt dilhad c'hoazh e kendalc'h etrekeltiek Dulenn e 1947.

sonnet er par lennegel ha sevenadurel, ken e rankjed gortoz dek vloaz abarzh ma voe soñjet a-zevri sevel ur Strollad broadel e Breizh.

(1)

(1) E ser ar c'hendalc'hoù ez eus bet anv anezho e komzan eveljust eus an emsaverion rak hervez kelaouenn d'Taldir AR VRO e oa deuet da Kêrmarvon "milieroù Kembreiz, Skosiz, Iwerzhoniz..." en holl "dek mil kelt". E Kêrmarvon e oa en em gavet an Estourbeillon, an ab. Herri, Frañsez Even, an Tad Goulven Trebaol, misioner katolik e Kembre, Taldir, Teodor Botrel. Un "trec'h evit gouenn ar Gelted" evel ma skrive ar gelaouenn AR VRO.

Padal ne c'hellas ket ar C'hevren-mañ ober kalz berzh dre ma ne dizhas ket ar bobl e nep doare. Dre ma oa bet savet gant ur gouvriad ne zeuas biskoazh ennañ nemet gouvriaded end-eeun, a seurt gant Lord Castletown (an hevelep si a oa d'an "Association bretonne" daoust m'he doa houmañ dedennet un nebeut tud eus ar bobl pe ar renkadoù etre arak bezañ amsavet gant K.B.B.). Petra bennak ma oa deuet brogarourion iwerzhonat a seurt gant Padraig MacFiarais d'ar c'hentañ kendalc'h etrekeltiek e Kêrdiz ez eo reizh notañ o devoa ar vrogarourion iwerzhonat dre vras disfiz a-walc'h ouzh al luskad "hollgeltiek" renet gant Lord Castletown. Meur a vammenn a oa d'an disfiz-se. Unan anezho a oa protestantiezh Edmond Fournier d'Albe (1); rak an darn-vuiañ eus kengravezidi hemañ en Iwerzhon a oa a-du gant ar Saozon (frankveizour e oa e gwirionez Fournier d'Albe hogen e diegezh a oa protestant ha n'eus forzh penaos e frankveizouriezh n'oa ket evit aasaat e zarempredoù gant Iwerzhoniz katolik en un amzer ma ne oa ket mat an darempredoù etre an Iliz katolik hag ar frankveizourion).

Castletown e unna oa ur mondan, bet koronal el lu saoz ha graet brezel gantañ a-enep dar vBoered. Hemañ, eveljust, a oa aesoc'h dezhañ tuta e salioù-degemer saoznekaet Dulem eget e-touez ar ouzelegerion eus ar bobl, lakaomp.

War ar marc'had e kollas ar "Celtic Association" he brud-vat o pleustriñ ar folklor c'hoarivael ha lu hon eus meneget: Iwerzhoniz a yae da glask dilhad broadel en ur grennamzer steuziet abaoe 900 vloaz (2). Netra souezhus eta ma pellaas ar vroadelourion iwerzhonat buan a-walc'h diouzh ar "Celtic Association". Ne zeujont na da gendalc'h Kêrnarvon e 1904 na da hini Dinedin e 1907 na da hini Brest e 1908. Ar Vrezhoned en em gavas eta o unan penn gant Kembreiz e kendalc'hoù ar "Gorsedd". Ha kement-se a zislañsas an Emsav dre ma forc'has hemañ diouzh un Emsav all a oa aet pelloc'h war hent an dispac'h hag an emzieubiñ eget hini Kembreiz a chome seizet ha

(1) A-walc'h a spered keltiek en devoa Fournier d'Albe evelate evit deskiñ yezhoù keltiek all, ar c'hembraeg, da skouer. (2) Soñj am eus bezañ gwelet merc'had gwisket gant seurt dilhad c'hoazh e kendalc'h etrekeltiek Dulem e 1947.

sonnet er par lennegel ha sevenadurel, ken e rankjod gortoz dek vloaz abarzh ma voe soñjet a-zevri sevel ur Strollad broadel e Breizh.

(1)

(1) E ser ar c'hendalc'hoù ez eus bet anv anezho e komzan eveljust eus an emsaverion rak hervez kelaouenn d'Taldir AR VRO e oa deuet da Gêrnarvon "milieroù Kembreiz, Skosiz, Iwerzhoniz..." en holl "dek mil kelt". E Kêrnarvon e oa en em gavet an Estourbeillon, an ab. Herri, Frañsez Even, an Tad Goulven Trebaol, misioner katolik e Kembre, Taldir, Teodor Botrel. Un "trec'h evit gouern ar Gelted" evel ma skrive ar gelaouenn AR VRO.

Pennad 10

"Kevredigezh broadel Breizh"
("Union régionaliste bretonne")

E dibenn ar c'hantved tremenet e voe savet ar Strollad breizhat kentañ a gemere da amkan difenn korvoderioù Breizh. Bez e voe anezhañ "Kevredigezh Broadel Breizh" a voe savet d'an 13 a viz Eost 1898 e Montroulez (1).

Ret eo lavarout, da gentañ, ne gaved emañ nemet Breizhiz diazezet er gevredigezh c'hall hag an dra-se a oa natur o vezañ ma ne oa ket an disterañ had a gevredigezh vrezhon d'an ampoent. E-touez an diazezerion, da skouer, en em gave Anatol ar Bras a oa kelemer war al lennegezh e Skol-veur Roazhon ; ne oa ket degouezhet c'hoazh e barr e vrud hogen ne oa mui dija un den dianav ; Charlez ar Goffig a oa ur skrivagner gallek, danvez ezel an "Académie Française" (disoñjet a-gremm hiziv en devoa c'hoazh un tammig anv etre an dacu vrezel) ; René Saïb ha Madeleine Desroseaux, renerion ar gelaouenn "Kloc'hdi Breiz" ("Le clocher breton") embannet en Oriant ; Loeiz Tiercelin eus Dinarzh, a embanne e Dinarzh ar gelaouenn "L'hermine". Ebarzh pennadoù all e vo kavet un nebeut munudoù diwar-benn al lennegourion-mañ.

Izili all eus K.B.B. a oa muioc'h divrud. Menegomp René de Herviler a skrivas a-c'houdevezh ebarzh "reiz Dishual" ; René Grevart de Kerstrat (war a cuzomp n'en devoe obererezh brezhon ebet a-c'houdevezh). C'hoazh e c'helle ar re-mañ bezañ brogarourion. Un den

(1) Skrid resis an talbenn a oa : "Kevredigezh broadus Breiz". Reizhet e voe ar yezh a-c'houdevezh diwar alioù Frañsez Vallee. E galleg e e tiwalled da c'hom hep feukiñ ar pennadurezhioù gall.

evel Léon Durocher avat, rener ar "Cabaret breton" e Paris ne oa ket gwall chalet moarvat gant tonkadur Breizh. Hemañ koulskoude en em gave e-touez renerion ar gevredigezh nevez.

Evelato e oa deuet tre ennañ ivez un nebeut gwir vrogarourion. Frañsez Vallee en o zouez, ha Frañsez Even, noter e Landreger a voe oberiant en "emsav betek dibenn an eil brezel bed... Charles Rolland a droas an "Internationale" e brezhoneg hag a oa ivez un tamm emsaver. Ar re-se holl o devoa krouet e diabarzh "Kevredigezh Broadel Breizh" ur gevrenn evit ar brezhoneg ha na oa ket rakwelet er penn-kentañ, hag a oa mennet a-hend-all - e soñj an diazezerion anezhi - da gemer lec'h ar c'hevrennoù all ha da vrezhonekaat ar Framm nevez savet tamm ha tamm. Kontañ a raed kalz - dre fazi emichañs - war an Estourbeillon evit kas ar raktres-se da benn.

Penaos lec'hiañ K.B.B. e-keñver politikerezh ? A-hervez e oa neptu. E devoud ivez e oa toueziet enni dhouiz ha kleiziz (Republikaned an amzer-se) evel Durocher hag Anatol ar Bras, da skouer ; mesket e oa enni ivez broadelourion ha ramvroelourion, yaouankizoù ha tataoù kozh. A-se, adal an eil kendalc'h e Gwened e 1899 e klaskas ar vroadelourion yaouank - F. Vallee, Henri de la Guichardière, F. Even, Erwan ar Moal, Charles Holland) distroadañ ar "ramvroelourion". Skarzhet e voe Durocher ha dilennet e voe an Estourbeillon en e lec'h. Moarvat e oa hemañ ur broadelour - an dra-se a zo anat pa lenner ar gazetenn a embannas war-lerc'h ar brezel bed kentañ "La Bretagne intégrale" - hogen bez e oa anezhañ ivez ur rouselour gull - pe da vihanañ e oa brudet da vezañ rouselour gall - ha rak-se e kavas gwell "kleiziz" zo - a-du gant ar Republikaned - egiz Anatol ar Bras reiñ o dilez d'ar c'houlz-se.

Gwelomp bremañ penaos e oa kenaozet K.B.B.

E gwirionez e oa kenaozet un tamm evel "Breureiezh Breizh", da lavarout eo evel un doare Akademiezh a oa mennet, a-hervez, da gweizennañ holl obererezh meizel ha kevredigezhel Breizh (1).

(1) Ar Framm keltiek en devoa an hevelep mennad e-pad an eil brezel hag hiziv an "Journées générales de la renaissance bretonne".

Rannet e oa e kevrennoù liesseurt a glote, war-bouez nebeut, gant ar re a gaved e "Breureiezh Breizh" : labourdouar, arzoù-kaer, armerzh, hanez, lennegezh. E kevrenn al lennegezh avat e oa bet rakwelet un iskevrenn, hini ar yezh vrezhonek, a oa bet fiziet e F. Vallee hag en e ziskibl, Taldir. Ar re-mañ avat a voe harpet dizale gant skrivagnerion vrezhonek a bep seurt, Erwan Berthou (ne chomas ket hemañ e K.B.B.) ha Leon ar Berr (Abalor), - a gemere perzh e labour ar Gorsedd - pe skrivagnerion boblek evel Yann Roudot, person Laniliz, Hollsent ar Garreg, hag en tu-hont d'ar re-se gwenedourion : un adderaouadur yezhadurel a oa c'hoarvezet e Gwened e deroù ar c'hantved: Jerom Buleon, person Bignenen o zouez, hep kontañ Emil Ernod, ar geriadurour a blede ivez gant rannyezh Wened.

Klask a raimp bremañ reiñ un alberz eus obererezh K.B.B. e-pad an dek vloaz war-lerc'h hag a c'hellomp heuliañ dre ar bodadegoù bloaziek hollek a veze dalc'het gant ar "Gevredigezh". E gwirionez, ur wech deuet da gemer ar penn anezhi, ne voe ket kemmet kalz tra en he falioù nag en hec'h urzhiadur.

Bodadeg-veur 1901 a voe dalc'het eta d'an 21 a viz Gwengolo e Kemperle hag en he ser ez emezelas un nebeut gwenedourion, Joseb Loth ha Loeiz Herrieu, ar "barzh-labouren" a ziskouezas a-c'houdevezh bezañ ur brogarour eus an dibab. Jos Parker, a oa ur skrivagner gallek eus Kernev, a roas e anv ivez. E-touez an nevez izili e c'heller menegiñ ouzhpenn L. Beaufrière a oa kazetenner en "Union Agricole" eus Kemperle hag en devoa un tamm brud e-touez labourerion-douar Kernev-Izel hag ar skrivagner brezhonek hon eus meneget endev: Hollsent ar Garreg. Er c'hendalc'h-se e oa en em gavet un dileuriad eus ar "Félibrige", Roqueferrier e anv. Tennañ a rae K.B.B. eta da vodañ en he ser kefredourion Vreizh" d'an ampoent, petra bennak ma oa bet dilezet a-benn neuze gant ar re en em lec'hie kentoc'h a-gleiz.

Dres, degouezhet e oa renerezh ar Gevredigezh da zaou noblañs, Kerviler, a oa bet lakaet da rener hag an Estourbeillon, da "gannad-meur" daoust ma kaved er stroll-ren d'ar mare-se tud o devoa

mennoziou plitikel disheñvel - Picquenard, da skouer, ne oa ket anezhañ un hengounelour rik, dreist-holl avat e-touez ar skrivagnerion vrezhonek en em gave eno : Erwan Berthou ha Leon ar Berr n'o devoa ket kennebeut an hevelep stuziadur politikel.

Berzh ar strollad nevez a voe anat dreist-holl da geñver kendalc'h an Alre er bloaz-war-lerc'h, etre ar 25 hag ar 27 a viz Gwengolo 1902. E-kerzh ar c'hendalc'h-se e oa bet displeget ar pezh-c'hoari savet gant Job ar Bayon e brezhoneg Gwened : an aotrou Kerioulet. D'ar c'houlz-se avat e oa birvilhet an dud gant tagadennoù ar maadiern gall Combes a-enep d'ar yezh ha d'ar gloer vreizhat hag a oa entanet e gwimionez gant uhelvennad K.B.B. Taldir, en drovezh-se, en devoa distaget ur brezegenn d'an 28 a viz Gwengolo 1902, e ser lezenn Combes diwar-benn dispartit an Iliz hag ar Stad ha lakaet en devoa ar pouez war gudem ar yezh e Breizh (difennet e oa bet ouzh ar veleion gant ar Stad c'hall a-ziarack dre an hevelep maadiern prezeg hag ober katekiz e brezhoneg). Grouifet e oa bet da Daldir gant an arvezidi hag a-benn ar fin e oa bet degemeret a-unvan ur m'nad a oa geriet avel henn :

"Dek mil Breizhad deredet d'an Alre (Morbihan) da geñver displegadur poblek ar pezh-c'hoari 'an aotrou Kerioulet' a sav kreff o mouezh dirak ar gouarnamant gall a-enep d'an diferdurioù e vefe mennet da gemer a-enep d'hor yezh vroadel..."

Ar wech-se ivez e oa bet dilennet an Estourbeillon da rener K.B.B. gant harp Taldir hag ar varzhed. Da heul an dilennadur-se a-hend-all eo e voe dilezet K.B.B. gant izili zo tuet d'ar "republikan-elezh" hag o chom dreist-holl e Paris (e devoud e oa act huit meur a hini endev a-ziagent). (1)

Moarvat ne voe ket laouen tre ar gouarnamant gall da vezañ kenteliet evel-se hag hep mar ivez n'en devoa ket prizet an dro-lavar "yezh vroadel" implijet e ser ar brezhoneg. Bloaz goude eta

(1) Bodadeg vloaz K.B.B. a voe dalc'het e Lezvenen e 1903 hag e Gourin e 1904.

e voe gourdroutet ar Gevredigezh ent digor - mui pe vui - gant ar mererezh gall a lakaas brozennoù da redek diwar-benn un "irienn enep-stadel" e diabarzh K.B.B. ken e rankas Taldir klask gwennañ e genseurterd eus ar Strollad en ur pennad a voe embannet ebarzh an "Ouest-Eclair" er bloaz war-lerc'h, d'an 21 ha d'an 23 a viz Gwengolo 1903 dindan an talbenn "Le complot de l'U.R.B." (1) Dre vras e tamallet da gK.B.B. bezañ mirelour - roueelour eta - ha disrannour war un dro. Merkañ a rae Taldir a-hend-all e oa dislavar etre an div c'herienn. Diazezet e oa an tamalloù-se war embannadur timbroù-post breizhat bet moulet gant K.B.B. evit bezañ peget e kichen an timbroù-post gall ordinal (2). Taldir eta a ziogele er pennadoù-se ne oa ket disrannourion eus izili K.B.B. ; ne c'houlenne ar "Gevredigezh" nemet "frankizioù" evit Breizh ha n'eo ket ar "Frankiz". "Ar pal gwirion a zo diorren obererezhioù brezhon liesseurt, lennegel, speredel, ha kevredigezhel en hor bro..." a skrive. Goude bezañ savet e vouezh avat a-enep d'ar prosez politikel edod o prientiñ a-hervez a-enep da gK.B.B. ez ouzhpenn Taldir taer a-walc'h :

"Aucune force humaine ne pourrait endiguer désormais le torrent du mouvement breton..."
A bon entendeur, salut."

Stumm dibenn ar pennad ne glote ket nemeur e gwirionez gant hini an deroù ; diskouez a rafe a-walc'h an dibenn-se avat ne oa ket Taldir da vihanañ lealelour gall e gwirionez.

Dudius eo ar pennadoù-mañ e meur a geñver. Diouzh o lenn ez eo anat, da skouer, e rene an unvaniezh klok e-touez izili ar Gevredigezh ha dreist-holl etre ar Varzhed a gemere perzh en obererezh ar Coursez hag an izili all (3).

(1) An "Ouest-Eclair" a roe bod da bennadoù ar vrogarturion vrezhon hogen d'ar c'houlz-se e voe taget an Emsav -ahend-all gant toullad mat a gazetennoù e Paris : "La Lanterne", "L'Aurore" ; pe e Breizh : "Les Nouvelles Rennaises", "Le réveil des Côtes-du-Nord", "L'Avenir de Morlaix", "Le réveil du Finistère", "Le Progrès du Morbihan", a-gleiz koulz hag a-zehoù hogen dre vras e oa sellet an Emsaverion evel dehouiz a-du gant an Iliz. Kv. Ur c'hrogad etre ar varzhed ha Republikaned e Kastell-Pol da geñver bodadeg vloaz K.B.B.
(2) Un delemn gant herminigoù ha Sant-Herve gant e gi. Reizhet e oa bet an afer dre asantiñ d'o fegañ war an tu-gin d'al lizher pe tro-dro d'an timbr gall kefridiel. (3) Da gentañ e voe sevenet lidoù ar Coursez diouzhtu war-lerc'h bodadeg K.B.B. hag an hevelep kêr.

D'ar c'houlz-se e oa sellet an Estourbeillon evel rener an Emsav ha Taldir (1) - a oa c'hoazh un den yaouank neuze - a voule war e gelaouenn AR VRO eus an 12 a viz c'hwevrer 1905 ur poltred bras eus hemañ, ur mell poltred a zalc'he ur bajennad a-bezh eus ar gazetenn, e-lec'h e weled an Estourbeillon gant un dalc'h-penn meurdezhus hag arwarzhus meurbet hag ur mourrou eus ar stankañ, dellezek eus ar C'halianed kozh, ha dindan ar poltred e oa enskrivet ar gwerzennoù-mañ:

"Humbl evel un den a bobl
petra bennak eo a ouenn nobl...h.a.

Seurt poltred a ro a-walc'h da gompren an tamall a voe graet a-ziwar-lerc'h da'n Estourbeillon da vagañ un tamm re keheladur e bersoniezh.

Er bloavezhioù goude e kasas K.B.B. war-raok hec'h obererezh hep ehan na fallaem. E 1906 e oa bet dalc'het ar vodadeg vloaz e Sant-Drieg. E 1907 e oa bet graet "kendalc'h broadus" ar Gevredigezh e Rostrenen e miz Gwengolo (1) ha Yann-Vari Goblet en devoa distaget ur brezegenn war "broadelezhioù eus an Europa pere a gomañs da adsevel..." (2). Evel boaz e oa bet darmaouet prizioù d'ar skrivagnerion vrezhonek : Bleimor, Roc'hlan, Loeiz ar Floc'h, Eostig Kerineg, Job an Drouzvor, Stevan Kerhoret en em gave e-touez al loreidi. E-pad ar goañv-se ivez e oa bet aozet ur "c'hourenadeg" ("kenstrivadeg") sevel lizhiri evit bugale ar skolioù. Houmañ oa an destenn : penaos eo arabat mont da chom e kêr rak "al labour-douar a zo an noplñ eus an holl vicherioù...".

Kendalc'h bloaziek adarre e Plougastell-Daoulaz e 1908 (3) ha brezegenn a nevez gant Yann-Vari Goblet. Gouestlet e oa bet ar c'hendalc'h-mañ da gudennoù an armerzh e Breizh : ar "Rann espernek" eus ar Gevredigezh he doa pledet gant poent an laezherezh en "Urop"(4).

Kendalc'h ar goañv e 1909 a oa da vezañ graet e Pont-ar-C'hastell e rannvro an Naoned etre ar 5 hag an 8 a viz Meurzh hag hini

(1) Ar maer - ur "radikalour" - en doa roet bod koulskoude da g.K.B.B. ha d'ar varzhed a oa diskennet en ostaleri Bongorz. (2) Hervez AR VRO. (3) Ret eo notañ e oa krog K.B.B. hag ar Goursez d'en em zispartiañ a-benn neuze. Aet e oa "Skol-Veur ar varzhed" da Vrest en dro-mañ. (4) Diwar ar c'hembraeg.

an hañv etre an 9 hag ar 15 a viz Gwengolo. Evel henn e oa kemeret hemañ war ar gelaouenn AR VRO renet gant Taldir :

"E-pad miz Gwengolo nesañ, kalon Breizh a drido c'hoazh un nebeut amzer...Ar vroadelerion en em zastumo e kendalc'h Pontrev, bro-Dreger, eus an 9 d'ar 15 a viz Gwengolo. Setu amañ ar roll gouel : 9 eur noz, scañs digridigezh,kevrennoù esperniek ha yezhek, kaniri poblus..."

Meneget hon eus ar gemennadenn-mañ dre ma tiskouez mat doare obererezh ar Gevredigezh hag ivez ar spered broadel a roent da hemañ (K.B.B. eta a oa memet da zastum broadelerion). Padal, an holl ne gavent ket bastus an obererezh-mañ evelato, dreist-holl ar varzhed a glaske tostaat ouzh ar bobl ar miziañ ar gwellañ (ho pezet soñj o devoa ar varzhed savet TI KANIRI VREZEH da vont da ganañ war ar maez e-touez ar gouerion). Tamall a raent da vour'hizion g.K.B.B. o lakaat da goll o amzer o selaou prezegennoù gallek ; ivez, kas da benn al labour gouiziek e galleg ha lezel d'ar brezhoneg an diduamantoù "poblus" ; war ar marc'had, ar prezegennoù gouiziek a gemere da nebeutañ tri devezh - emez - ha ne chome mui goude-se nemeur a amzer da zarnaouiñ levrigoù e-touez ar bobl ha da ganañ sonioù er beilhadegoù. Padal, a skrive AR BOBL, "don ez a da galon ar Breizhad komzoù an adsavidigezh pa vezont displeget evel maz eo dleet..."

Ar bodadegoù-bloaz diwezhañ a-raok an disparti a voe dalc'het e Kastell-Nevez ar Faou dindan gwarez Job ar Gall "brezhonegour ampart, bourc'hiz a ouenn binvidik..." hag ezel eus K.B.B.

Dezrevell a reomp en ur pennad all abegoù zo eus an disrann a zo c'hoarvezet etre ar "Varzhed" hag an izili all eus K.B.B. e 1912. Er pennad-mañ e ve da klask gwelout peseurt abegoù personel o deus broudet an enebiezh etre izili ar Gevredigezh betek devoudañ an darzhidigezh anezhi. Gouzout a reer en devoa gallet an Estourbeillon kregiñ e stur ar Gevredigezh a-drugarez da sikour ar Varzhed e 1902 e kendalc'h an Alre. E-pad ur reuziad e oa bet hemañ hag ar varzhed eta mignoned vras ; deuet e oa an Estourbeillon zoken da vezañ barzh ha kemeret en doa perzh e lidoù ar Goursez e Kembre hag e Breizh e 1907

eCaernarfon hag e Benac'h.

A-ziarraok e ranker notañ e oa bet startaet unvaniezh an daou rumm - barzhed ha gouvriaded - gant ar stourm o devoa bet da ren e deroù ar c'hantved evit difenn gwirioù ar veleion - rediet da brezeg e galleg - a-enep d'ar maodiern gall Combes a oa o rendaelañ gant an Iliz d'ar c'houlz-se hag o vont da embann a-hend-all "lezem an Disparti". Hogen ur wech distremenet an enkadenn-mañ avat e teuas an eneberezhioù etre "barzhed"ha gouvriaded bet goloet betek neuze d'en em ziskouez adarre en un doare ken lemm abarzh peil ma roas Erwan Berthou e zilez adal 1905. Taeraet e oa bet an tabut gant droukrañs an Estourbeillon en devoa klasket en aner tapout ar garg a oa bet deroet da Erwan Berthou dre ma oa hemañ ur "brezhoneger", pezh n'oa ket ar Markiz. Pa oa bet anvet **E.B.** da arc'hdroviz eta en devoa goulenet kaout an "hanterenn eus ar c'hleze" a oa miret gant an Estourbeillon, pezh en devoa nac'het hemañ ober. Moarvat, evit diskoulmañ ar breud, e oa bet goulenet digant Dyfed "arc'hdroviz" Kembre, mont da dredeog. Ar c'hembread avat a oa savet a-du gant Erwan Berthou ha kadarnaet e oa bet debarzhadur an "hanterenn gleze" da "arc'hdroviz Breizh". Hemañ a oa kintus a-walc'h en devoa goulenet groñs kaout ar pezh a zlee degouezhout dezhañ dre lizher erbedet kaset d'ar Markiz a oa bet feuket hag ancazet evel maz eo kaer gortoz. Diwar neuze e oa trenket an traoù da vat etre an Estourbeillon hag e vignoned kozh. Rener K.B.B. en devoa graet e soñj war-lerc'h kendalc'h Gwizurieg e 1911 (1) en em zizober eus ar galloud diwall-minor o devoa tapet ar varzhed en aozadur ha disteurel ur wech evit mat beliezh kuzh ar Coursez ennañ. Unan eus harperion ar markiz e Paris, an Dr. ar Fur, en devoa embannet er gazetenn "Le Breton de Paris" adal an 18 hag an 29 a viz Gwengolo 1908 ur pennad evit diskouez e tlee ar varzhed hag izili all ar Gevredigezh en em zisrannañ hag e ranke ar varzhed sevel un aozadur diforc'h evito. Evit kregiñ gant al labour diskarzhañ e fellas d'an Estourbeillon lemel digant Léon ar Berr e amaezh a sekretour K.B.B. (hemañ a oa e gwirionez dileuriad ar varzhed).

(1) Eno e oa en em gavet e-touez re all Eleimor, Yann-Vari- Goblet h.a.

Ar c'havailh-mañ a zlee bezañ kaset da benn e-pad kendalc'h Lokronan-Leon e 1912. Evit arbennañ ouzh itrikoù ar gostezenn virolour e kinnigas ar Varzhed neuze dilemm Jos Parker da sturier ar Gevredigezh hogen a-benn ar fin, daoust d'o strivoù, e oa bet addilemmet ar Markiz dre 59 mouezh a-enep da 34. Ne chome mui da izili K.B.B. o devoa roet o mouezh da Jos Parker nemet en em demañ kuit. Sed pezh a rejont ha sevel neuze ur gevredigezh nevez a voe anvet "Unvaniezh Arvor" a gomzimp diwar he fenn en ur pennad all.

E gwirionez e oa aes gortoz hevelep disoc'h d'an dilennadeg ha diskouezet o deus ar varzhed en degouezh-mañ n'o devoa ket kalz spered politikel ; dav e vije bet d'ar vrezhonegerion a yae d'ober ar pep brasañ eus an nagennerion e diabarzh K.B.B. kuitaat ar Gevredigezh abretoc'h pe, neuze, gortoz un drovezh all evit kemer ar galloud enni. Hogen ampartoc'h ha primoc'h egeto e oa bet ar Markiz. P'en devoa klevet kel eus mennadoù ar varzhed en devoa feurmet ur c'harr-tan ha graet diwar henn tro ar c'hestell e Leon ; lakaet en doa da emezelañ d'illo un toullad mat a izili nevez a oa deuet da vouezhiañ evitañ a-ungalon e Lokronan-Leon (ret eo lavarout ned eas ket obererezh brezhon an izili-mañ en tu-hont d'ar vouezhiadeg-se).

Sur eo ivez e rene an Estourbeillon ar politikerezh-se abaoe ur pennad amzer. Klack a rae tuta evit K.B.B. e metou an hengounelourion. Setu dres pezh a ziskleir Erwan Berthou en e levr "Les Vessies pour des lanternes" embannet e 1913 :

"Le marquis politicien retors avait ses idées. Ses amis et ses créatures s'infiltrèrent peu à peu dans la société. L'odeur de peau d'Espagne et de fleur de lys y rendit l'atmosphère irrespirable aux poumons habitués à l'air pur..."(1)

Diouzh kredañ lavarou Erwan Berthou en dije klasket an Estourbeillon heuliañ ur politikerezh koulzelour a zehoù a c'houlakae e vije distroet an danvez roue gall war e dron. Ar wirionez, sur-mat, n'eo ket ken eeun-se. Ur broadelour a oa eus an Estourbeillon. Moarvat, d'ur mare, evit talañ ouzh eneberion a oa leo'hiet a gleiz

dezhañ en doa klasket en em harpañ war izili nevez a oa tost dezhañ dre o stummadur hag o mennozhioù politikel hogen diaes eo asurifiñ en dije kredet e oa tu da adsevel emberr ar rouezelezh e Bro-C'hall e tro ar bloavezhioù 1910 (1). Moarvat en devoa graet eus ar Fur e Paris e zen-a-fiziañs hag hemañ, hervez Erwan Berthou bepred, a oa "arverad gwiriektaet" an Dug a Orleans a oa o kestal mouezhioù e Vretoned vat emichañs rak mont a rae betek gwiskañ ur "chupenn glazik" evit bezañ deuet mat dezho (bepred hervez Erwan Berthou).

Gwir pe ziwir, sed ar mennadoù a oa tamallet d'an Estourbeillon gant ar barzh a embanne en e levr "Les Vessies pour des lanternes" e oa "Bonedoù Ruz" eus ar Vrezhoned ha ne c'helle ket doareoù brientinel K.B.B. plijout dezho dre se end-eeun. A-hend-all e rebeche ouzh an Estourbeillon hag ar Fur o ratozhioù "meurgar" : daoust ha n'o devoa ket savet un "Institut de Bretagne" hag un "Académie bretonne" egiz Richelieu gwechall e Bro-C'hall ? (2) O klask seveniñ hevelep mennadoù ne raent nemet trevezañ ar C'hall-lacued hervez Erwan Berthou.

Ouzhpennomp, n'eus forzh penaos, e voe trec'h an Estourbeillon e Lokronan-Leon un trec'h diouzh giz Pirrus, evel ma c'hoarvez alies e politikerezh. Ur wech ma oa bet dilezet K.B.B. gant ar Varzhed, anezho "défenseurs du pur esprit national", gouez da Erwan Berthou, ne oa mui chomet enni nemet gouvriaded hep spered brezhon gwirion ha diseblant ouzh Breizh e gwirionez, gallegerieon anezho holl (diwar neuze en devoa nac'het ar Markiz derc'hel bodadegoù e komog ar vro : gwir eo ivez e c'helle an Estourbeillon bezañ heuet ouzh gouennelouriezh iskis stourmerion zo a seurt gant Erwan Berthou ha na welent Breizh ebet er-maez eus "Breizh-Izel).

Evel-se ez echuas marevezh kentañ K.B.B., gant un (3) disrann a skoas anezhi d'an traon petra bennak ma arnodas an Estourbeillon adkregiñ gant e labour goude ar brezel kentañ evel ma tisplegimp el

(1) Ma ranker krediñ bepred tezennoù Erwan Berthou e oa bet gwarriet tonkad K.B.B. abaoe ar bloavezh 1901 m'en doa kemeret an Estourbeillon penn ar Gevredigezh e-lec'h de Kervilors a oa dezhañ a-hervez ur stumma demokratel, da vihanañ. (2) An aozadurioù-se a chomas ganet-marv. (3) Bloaz pe zaou vloaz zo ez eo bet embannet adsevidigezh K.B.B.

levremm da heul.

Bezot pe vezot, - ma ne ouie ket ar Varzhed re vat pezh a raent, daoust ma sentent dreist-holl ouzh droukrañsoù kozh personel dianat dezho o unan marteze, ez aent evelato gant red istor Breizh a denn da zaskoriñ d'ar vroad he riegezh ha da berzhiekaat er vuhez vroadel ar renkadoù nevez diwanet enni. Sklaer eo koulskoude n'o doa ket ar virelourion - lakaomp an Estourbeillon a-ziforc'h rak bez e oa anezhañ ur gwir vroadelour - meizad resis ebet eus ar riegezh-se. Iavaromp n'o doa ket komprenet kennebeut e skoe istor Breizh ivez war-du ar werinelezh, elese, war-du perzhiekadur holl boblañs Vreizh er galloud politikel brezhon a oa da vezañ savet. Dre m'en em lede an deskadurezh - gallek, siwazh, - dre ar vro e teus kendereoù nevez da emouezañ ouzh o broadelezh ; politikerezh ar renkad-ren kozh e Breizh - a oa o pellaat mui-ouzh-mui diouzh kudennoù ar vro - ne c'helle ket derecuz outo eveljust. Dre se e oa natur d'ar re-mañ ivez klask o hent o unan. Keuziañ a c'heller hepken e vije bet kontammet an emdroadur-se gant ur spered trenk a zroukrañs hag a erez a-berzh hiniennoù zo eus ar Varzhed rak gwell e vije bet m'en dije gallet an Estourbeillon - a oa un den barrek e pep keñver, dreist d'an darn-vuiañ eus e eneberion, - kenderc'hel da labourat gant e genseurted kentañ eus an Emsav.

Pennad 11

Kevredigezhioù arall :
"Gorsedd" ar Varzhed

Daoust ma ne c'hoarias ket ur roll a-bouez dre maz eas an izili anezhi tre ebarzh kevarzheoù all e c'heller menegiñ ecelato, e-touez ar c'hevredigezhioù breizhat a voe diazezet e deroù ar c'hantved "Breuriezh ar studierion vreizhat".

Oberiant e voe enni, da skouer, Leon ar Berr (Abalor), eus Kemperle, a zeuas da vezañ skrivagner brezhonek (ne c'uit ket ar yezh a-vihanik ha, moarvat e voe ar skrivagner brezhonek kentañ oc'h addeksiñ e yezh) ; Doric ar Gall, ur bourc'hiz eus Gwaien (e dad a zalc'he ur fritur eno) ; Nouel a Gerangwe, a zlee kenskrivañ er c'hazetemoù brogar a neuze).

Padout a reas ar gevredigezh un toullad bloavezhioù evelato peogwir e kaved enni c'hoazh e 1908 an anvioù da heul : F. Jaffrenou, Yann ar Menn, Nouel Kerangwe, Cuillandre (a voe skrivagner brezhonek hogen a gouezhas er chaovinistiezh c'hall), Glamor a oa e anv-pluenn) ; Per Portgamp. D'ar c'houlz-se e oa harpet ar vreuriezh gant Joseph Loth a oa kelenner er Skol-veur.

E gwirionez ne rae ar gevredigezh-se nemet ur bruderezh sevenadurel. "Poblekaat" a rae ar yezh koulz hag ar gwiskamant dre ar c'hân koulz hag ar c'hoariva : un doare "kelc'h keltiek brezhoneger" a oa anezhi. Danevellskridoù ar "sekretouriezh", a-hervez, a oa savet e brezhoneg. Klask a rae ar Vreizhezh kourantioù da "Groaz-ar-Vretoned" a zalc'he neuze lec'h "Al Liamm" a-c'houdevezh.

E-touez ar studierion a bledas gant ar Vreuriezh e ranker menegiñ Alfred Lajat, Breizh-Uhelad, ez-kloareg, gouiziek war an doueoniezh hag ar brederouriezh, hervez Taldir, desket ar yezh gantañ, a ergerzhe ar maezioù en ur ganañ sonennoù brezhonek hogen na zeuas ket a-benn daoust da se da vezañ na skrivagner brezhonek na politiker brezhon. Evit sentiñ ouzh reolemoù ar stuzegezh emsavel a neuze a c'hourc'hemmes dougen ar "gwiskamant breizhat" bewech m'en deveze unan tro da ober e timezas e Skrigneg d'ur bennhêrez eus ar c'horn-bro-se fichet e giz he c'hanton hag eñ gwisket e unan evel ur peizant eus Skaer. Met e obererezh brezhon, war a hañval, ned eas napred kalz en tu-hont d'ar c'hoariva-se.

Meur a ezel eus ar Vreuriezh a emezelas e strolladoù an Emsav a neuze ha dreist-holl e "Skol-Veur Barzhed Breizh" a voe savet e deroù ar c'hantved, e 1900 (1). Dav eo decmp avat gouestlañ ur pennad d'ar gevredigezh-mañ a voe pouezus he roll etre 1900 ha 1914, e-doug an Emsav kentañ, dreist-holl war dachenn ar yezh hag ar spered broadel.

Hervez Taldir hag Erwan Berthou, Yann ar Fusteg an hini eo a zo bet kiriek da savidigezh ar "Gorsedd" e Breizh (2). Gouez da Taldir bepred "an ide eus seremoni priedelezh ar c'hleze a zo dioutañ..." (3) Pe ez eo gwir kement-se pe n'eo ket, Yann ar Fusteg, dre berzh e eured, en devoa darempredoù gant Breizhveuriz ha dre se gant Kembreiz o unan. "Urzhel" e oa bet barzh e Kêrdiz e 1899 dindan ar moranv a "Ab Gwilhom", diwar anv e dad, ha karget da aozañ ur skourr eus ar "Gorsedd" e Breizh-Vihan. E unan e oa gouest da gas da bennvat hevelep kefridi : e barr an oad e oa neuze, 44 bloaz dezhañ, pa ne oa en Emsav d'ar c'houlz-se nemet tud yaouank ; e genoad nemetañ a oa Erwan Berthou hag ivez Frañsez Vallee a zeuas da vezañ barzh dindan ar moranv Abherve.

Endro d'ar re-mañ - a voe deraouerion ar "Gorsedd" e Breizh - en em gave Taldir, Alfred Lajat, Leon ar Berr, Charlez Picquenard, Jos Parker, Moriz Nikolaz, Olier Sagory, Frañsez Even, Erwan ar Moal a-benn ur pennad amzer ; an holl re-se a gemere perzh e labour

(1) Ebarzh Eñvoremoù krennoad Taldir e kavan ar bloaziad 1899 hogen n'on ket evit divizout pehini zo gwir (2) Kv AR VRO, Eost 1912 ha "Iemenik" embannet e 1911. (3) Padal e oa bet arveret al lid-se e 1838 e Abergavenni.

kevredigezhioù arall e deroù ar c'hantved ha dreist-holl K.B.B.

Yann ar Fusteg, addiazezer an darempredoù etrekeltiek e dibenn ar c'hantved tremenet, a oa bet lakaet da rener ar "Gorsedd", Frañsez Vallee (Abherve) da eilrener, Erwan Berthou da deñzorier ha Taldir da sekretour.

Hep dale avat, hag evit abegoù ha n'int ket bet diskleriet mat, marteze dre ma ne oa ket mat e yec'hed, marteze dre ma hente a-hend-all kelc'hiadurioù kefridiel gall ha ma veve pell diouzh ar vro, marteze c'hoazh dre ma ne zeuas ket a-benn d'en em ober ouzh tud yaouank pe dre ma ne gave ket enno an danvez a hete, e roas Yann ar Fusteg e zilez eus e garg a rener ar Gorsedd hag Erwan Berthou a voe arvet da zrouiz-meur e 1902 (1).

Stabil a-walc'h e voe bepred poellgor-ren ar Gorsedd, marteze ivez dre ma ne voe ket e obererezh biskoazh birvidik kenañ. E 1928, da skouer, war-lerc'h ar brezel bed kentañ, e oa manet ennañ an hevelep tud a oa bet en digezez anezhañ, war-bouez unan pe zaou, - da lavarout eo : F. Vallee, Taldir, Erwan Berthou, Leon ar Berr (Abalor), Loeiz Herriou, Henri de la Guichardière, mignon Taldir, Pol Diverres (2), Frañsez Vallee, A. Lajat, Renan Quillevic, Jul ar Groz (3) ; an daou ziwezhañ-mañ, war a seblant, a oa deuet diwezhatoc'h (hervez dastumad pezhioù barzhoniezh Erwan Berthou : "An daouzek Abostol").

E-lec'h-all e klaskomp termeniñ pennañ tresoù personelezh Yann ar Fusteg, dreist-holl a-dreuz skrid Erwan Berthou, "Iemenik". Hogen mat e vefe menegiñ ivez amañ ar pennad en deus gouestlet Taldir dezhañ en e eñvorenoù krennoad dindan an talbenn "Yann ar Fusteg, ur gweledour" :

"E empenn a oa un ardivink tredanel a skigne luo'hed dre an daou brenestr a oa e zaoulagad glas a salle ouzhoc'h evel evit ho treuziñ gant biroù... e oa tuet da gaout kred en tasantoù, en treuztreminidigezh an eneoù, e dasorc'hidigezh Arzhur. E gwirionez, ar gredenn drouisek a oa, gouez dezhañ, mammenn an holl relijionoù. Bezañ

(1) Er garg-se en em gavas ensbet ouzh an Estourbeillon. (2) P.D. a zivroas da Gembre hag a varvas eno. (3) Bev bepred e 1972.

drouiz ne oa ket evitañ ur garg skañv.
Fellout a rae dezhañ ober ganimp ebestel ar gredenn
drouizek ha nann ebestel ar gredenn vroadel.
Pa welas ne oa ket ennomp an danvez en doa
hetet e noas e zilez e 1904..." (1)

Peseurt tutadur a oa d'ar "Gorsedd" ? E gwirionez e
kaved ennañ dreist-holl bourc'hizion vihan pe etre. Taldir, da skouer,
a oa ur bourc'hiz en e aez, oc'h ober aferioù mat ha dezhañ ur c'harr-
tan adal 1909, hervez a fougas e unan en e eñvorennoù. Yann Choleau,
Loeiz ar em, Jules Haag, Olier Guyon a oa ivez bourc'hizion etre,
evel Jos Albaret, Frañsez Caurel. Re all a oa tostoc'h d'ar werin
evel Loeiz Herrieu, Andrev Mellac, Yann-Frañsez Jacob, marteze Pol
Diverres. Estregeto avat e konted en aozadur un nebeudig a noblañsoù :
Henri de la Guichardièrre, ar c'hoarezed e Volz-Kerhoent, genidik eus
Kiberen. Ar re-mañ, da skouer, a oa deuet d'ar Gorsedd e Karnag e 1906
evit ar wech kentañ, gwisket ganto dilhad breizhek, e maner Kermorbraz.
Re all a c'hellfed menegiñ moarvat hogen ret eo anzav e oa an elfenn
"bourc'hiz bihan" an elfenn bennañ (2).

Klask a raimp bremañ reiñ un alberz eus urzhadur ar
"Gorsedd" hag eus e"bolitikerezh".

Meur a rumm a zigemmed e Gorsedd Breizh-Vihan evel en
hini Kembre. Un diforc'h a raed, da skouer, etre an izili pennañ,
"leunperzhiek"ha"leunwiriek" - ma c'heller lavarout - a ouie komz, lemm
ha skrivañ ar yezh, an ovizion a oa brogarourion desket hep bezañ
brezhonegerion - Yann Choleau, da skouer - hag erfin an diskibion

(1) Stadañ a ran an diforc'h a zo etre ar bloaziad a zo merket amañ
hag an hini am eus meneget e-lec'h-all hervez mammennoù all; n'em eus
ket gallet gwiriañ gant piv edo ar gaou.

(2) Evel diell mat da ziskouez spered ar Goursez e veneg an amañ pelloc'h
skrid al le a fealded a Vreizh o devoa distaget an div c'hoar pa cant
bet degemeret da varzhez e 1927 e Rieg : "Dirak eneñvoù an Drouized
meurag an hanamzer vel hon amzer-ni, tolpet amañ e'it ar gouel-mañ,
dirak eneñvoù ma hendadoù, dreist-holl ar re o deus skulhet o gwad
evit difenn Breizh ha dirak c'hwil holl (sic), Kelted a Vreizh-Veur
a welan endo din, brogarourion dispar evel mibion wirion ar C'haeled
dishual hag ar Vrezhoneg didrec'het, touiñ a ran difenn Breizh ; touiñ
a ran difenn he yezh enorus meurbet hag he frankiz..."

Ur skrivagnerez vrezhonek - e brezhoneg Gwened - e voe
Nathalie de Volz-Kerhoent, savet ganti ar "Eleuñv keltiek".

hag ar vabinogion, graz a oa miret d'ar yaouankizoù danvez izili
"Gorsedd" Breizh-Vihan (1).

Hemañ, a-hend-all, koulz hag hini Kembre a oa leviet
gant un arc'h-drouiz hepken, ur C'hembread, na petra, Dyfed e anv(2).
An unrenerezh-se en devoa da bal ha da gorvo startaat an unvaniezh
etre an daou skourr eus ar "Gorsedd" (2).

En arbenn eus an holl berzhioù-mat hag an holl varregezhioù
a c'houlenned digant an danvez izili ne zeuas ket ar varzhez da vezañ
stank tre buan. E 1906, da skouer, ne gonted nemet 90 diouto. Taldir
a gave dezhañ e oa re nebeut ha karet en dije moarvat distardañ an
divizoù a lakaed evit degemer unan da ezel ar "Gorsedd", dreist-holl
hini ar yezh. A-hend-all, setu pezh a skrive sekretour ar Gorsedd
er bloavezh-se end-eeun ebarzh ar VRO e 1906 :

"Ni a laosk er-maez darn eus tud barrekañ hor
gouenn ; ni a c'hoanta hepken degas ar re-se
ebarzh, nann evel izili a enor hogen evel izili
gwir..."

Goude bezañ meneget memad ar re o dije karet lakaat an
danvez izili da zeskiñ ar yezh ha da dremen un arnodenn warni ez ouzpenne
Taldir :

"N'hellomp ket bezañ en gortoz ma 'n em blego
pernoù bras gouizieker ar vro da gement-se..."(3)

E gwirionez ez arnodjed dedennañ d'ar Gorsedd holl
gefredourion ha gouviaded Vreizh d'an ampoent. Se a oa reizh d'ur mare
ma oa ar werin dizek a-gremm ha diframm dre se ivez ken na c'helle pep
kevarzhe kemer da amkan nemet bodañ hepken un dibab a dud, gouviaded
eta pe ouezoniourion a hep seurt. Ar "Gorsedd" a sentas ivez ouz ar
reolenn-se. Moarvat e sachas dezhañ da gentañ ar skrivagnerion vrezhonek:
A. Mellac, unan eus diazezerion DITHUNAME, August Boscher (ar Yeodet,
drouklazhet e 1944), Jord ar Rumeur h.a. D'ar re-se e oa deroet an
titl a "varzhez" ; hogen dindan an titl a ovizion e oa dastumet ivez
gallegerion vrogar evel Yann Choleau, kont Menorvan, de la Guichardièrre
h.a.

(1) "Mabinog" hervez ar ger implijet gant Taldir ebarzh AR VRO.
(2) Dyfed a oa ur skrivagner kembraek. Dont a reas meur a wech da Vreizh
a-raok ar brezel kentañ. (3) E 1911, war AR VRO, ez eztaole L.N. ar
Rouz reolenn ar yezh evel henn : Evit bezañ barzh e ranker gouzout komz,
lemm ha skrivañ ar brezhoneg..."

Ouzhpenn-se, d'ar "personelezhioù" a roe harp d'ar Varzhed e doare pe zoare, da skouer o reiñ bod dezho evit o gouel en ur gêr bennak, e veze profet an titl a varzh a enor pe a oviz a enor. Servain, maer Sant-Brieg, en devoa aotreet d'ar Varzhed dero'hel o bodadeg-vloaz e kêr Sant-Brieg ha lakaet digeriñ dezho gourliorz ar Prefedti a oa bet graet anezhañ ur barzh-a-enor ; kemendall evit Waron, ezel eus kuzul-kêr Sant-Brieg. Tostaet e veze evel-se ouzh an Emsav gouvriaded a bep seurt, Aubert hag Hamonic, luc'hskeudennierion hag embannerion kartennoù-post, Olier Guyon, barzh gallek ha kalaouenner, Théophile Gemblain (an holl re-se a oa bet degemeret e Sant-Brieg, da heul nevez politikerezh Taldir).

Da geñver kendalc'h Brest e 1908 e oa deuet tre adarre un toullad mat a varzhed nevez, skrivagnerion vrezhonek, da gentañ, evel boaz : Ivon Crocq, ("Eostig Kerineg", ur C'haper, eus kichen Gwaien), Loeiz ar Floc'h, eus Bodiliz ; pe c'hallek, Renan Degoul, ("An Hader", eus an Orient, rener "Kloc'hdi Breizh"). E-touez anvioù an "Oveded" bet degemeret neuze e c'heller diuz ar re-mañ : Moriz Nicolas, eus Montroulez, Pol Ladmirault, sonaozour, eus an Naoned, Ferel, h.a. Erfin, ar varzhed a enor a oa adarre gouvriaded : Delobea ("Mab Armor"), maer Brest, an Dr. Piton, "Mab Enez Sizhun", kuzulier departamant, an dr. Bergniaud, h.a.

Dacoust ha fur e oa seurt politikerezh ? Marteze a-walc'h e roe d'ar Gorsedd an neuz a vezañ "diazezet" ha ledanaat a rae e "selaouva" betek ur poent zo da vihanañ hogen - war ar c'hraf-mañ e tistroimp e dibenn ar pennañ - ne oa ket gouest ar "Gorsedd" da ober gwir vroadelourion eus ar c'hovriaded pe an amaezhidi c'hall a zedenne evel-se ha war var edo ivez eta d'en em gavout enframmet e unan er gevredigezh c'hall.

§§§§§

Mat eo bremañ teurel ur sell war obererezh diavaez ar "Gorsedd". "Gorsedd barzhiek gourenez Breizh-Izel" - hervez an talbenn a roas dezhañ e unan, a voe krouet eta e miz Gwengolo 1900 e Gwengamp. Un emvod all eus an izili a voe dalc'het er bloaz-se end-ocun

e Langollen, E Karnag, e 1902, e oa bet termenet da vat urzhiadur ar "Gorsedd". Goude-se e voe dalc'het div vodadeg vras e 1903 e Plouneour-Traezh hag e Brignogan (1) ha neuze eo e oa bet kadarnaet reizhwirigezh ar "Gorsedd" breizhat gant Dyfed, arc'hdroiz ar "Gorsedd" e Kembre, evel ur skourr eus "Gorsedd Inys Prydain" (2). Er "Gorsedd"-se e oa en em gavet ur C'hernevad tramor, Herri Jenner, merour ar "British Museum" a voe ivez diazezer ar "Gorsedd" kernevad tramor e 1933 (3). Diwar neuze e tilec'hias ar c'hendalc'h bloaziek a bep eil da Castell-Pol (19-20 a viz Gwengolo 1905), da Sant-Brieg e-lec'h e voe lidet "gouelioù hollgeltiek" e gourliorz ar Prefedti dirak 15.000 a dud e 1906. En drovezh-se en devoa an Estourbeillon distaget ur brezegem, war un dro gant Servain, maer Sant-Brieg Cochfarf, ar barzh kembreat hag Olier Guyon, ar c'helaouenner.

Diwar ar mare-se en devoa Taldir kemeret ar pleg da bediñ personelezhioù kefridiel gall pe bersonelezhioù brudet er gevredigezh c'hall e Breizh (4). E Sant-Brieg, da skouer, e oa deuet a-benn da zedennañ evel-se, estreget ar maer Servain, Emil Hamonic, ar poltreder, ar gazetennierion Olier Guyon, Gwilh Gorfec ha Louis Aubert (eus an tu kleiz e oa hemañ). Evit ar wech kentañ ivez e oa erruet un dileuriadur stank eus Kembre (Erwan Berthou an hini eo a blede gantañ), en e greiz Thomas Matthews, skolaer e Llandebie, sekretour ar c'hannadelezhioù kembreat (5), Dyfed (Evan Rees) a oa e penn "Gorsedd" Breizh-Veur, eilet gant Cochfarf (Edward Thomas). En holl, ugent kembread a oa en em gavet e Sant-Brieg, an darn-vuiañ anezho

(1) Erwan Berthou a oa bet degemeret da ezel dindan an anv a Alc'hweder Treger, an Estourbeillon dindan an anv Hoel bro Wereg. En em gavet e oa eno ivez an dimezelled Riou, Rozenn, Gwenola ha Yonca, diskiblezed ar Markiz, an Amerikanez vreizhat Anjel Mosher ; ivez Louis Goblet a oa bet degemeret da oved, Yann Choleau. Perzhidi all: Jos Albaret, ("Ar Bruger"), Renan Degoul, Frañsez Vallee, Leon ar Benn, Piquenard, Pol Diverres, Alfred Lajat, Herri de la Guichardière. (2) Klasket e voe diazezañ ur "Gorsedd des Gaules" e Bro-C'hall etre an daou vrezel. (3) Ne voe ket buhezkek tre biskoazh ar "Gorsedd"-se. (4) Evel-se e teuas Taldir a-benn da dapout al "Légion d'honneur" a zo un diwezh trist evit un emsaver. (5) Kemer a reas perzh e "Goursezioù" Brest (1908) hag An Naoned (1910).

o tont eus Morgannwg, e kreisteiz ar vro (1).

Hervez Taldir e oa neuze tregont barzh oberiant er "Gorsedd", c'hwec'h anezho o vont d'ober ar poellgor. Bez eo 200 anezho e 1939 hogen ar re-se n'o devo neuze moarvat spered brezhon ebet ken. Ar c'hresk-se n'en doa ster ebet eta.

E-keñver kevredadouriezh an Emsav ez eo mat dero'hel kont eus evezhiadennoù "aldir e sigur an niveroù-se. Diwar gant stourmer a oa deuet d'an Emsav e 1900 e oa c'hwitet un drederenn adal 1914 ha ne chome mui nemet un dekvedenn war an dachenn e 1939. Berr a-walc'h eo eta redad keitat un emsaver. Moarvat eo ar verventi kiriek evit darn da gement-se hogen ivez teuc'hadur pe wariadur an aozadurioù o unan. An devoudoù-se a zo mat da anavezout ha da studiañ a-benn gellout reiñ muioc'h a efedusted d'an Emsav rak ne vir ket an Emsav e stourmerion dre maz eo urzhiet fall emichañs.

Hogen menegomp komzoù Taldir e unan e sigur kendalc'h Sant-Brieg, hervez e eñvorennoù krennbad :

"Er bloavezh a c'hras 1906 ne oa ket unan bev eus kendalc'herion 1867. Met hep gouzout doare dezhe, ar re vev ne reont nemet adkomañs labourioù bet stummet araoke, adlavarout gerioù bet servijet kant gwech, tremen dre wenedennoù bet pleustret gant milieroù a dud. Pep renzi a gred start emañ o vont d'ober burzhudoù berzh ha mat eo ma kred se rak, anez, penaos e vije dalc'het ar flamm war elum..

E 1907 e oa bet ar "Gorsedd" ur "Gorsedd" digor d'an holl. C'hoarvezet e oa e Kenec'h-Laeron, war-lerc'h bodadeg-vloaz K.B.B. e Rostrenen. En dro-se e oa bet degemeret c'hwec'h a veleion da izili, en o zouez Brelivet eus Lokronan, Yann-Ber'ario (Ab Tudal), Alexis Presse, danvez abad Boken, J. Mary h.a. Er "Gorsedd"-se e oa ar markiz de l'Estourbeillon, hervez Taldir, "deuet da vezañ barzh dre ret..." Betek neuze, a ouzhpenn ar skrivagner, "en doa en em servijet eus ar varzhed..." Touet en doa war ar c'hleze astennet dezhañ gant Henri de la Guichardière.

Er bloavezh-se ivez en doa ar "Gorsedd" hollgeltiek" kemeret lec'h en Abertawe. Eno e oa renet an dileuriadur kembreat

(1) E 1904 e oa bet dalc'het ur "Gorsedd" kuzh e-tal Courin. E-keñver emezeladur an Estourbeillon er "Gorsedd" e kaver bloaziadoù diforc'h ha n'em eus ket gallet gwiriekaat.

gant ar barzh David Rhys Philipps. A-berzh an dileuriadur-se e oa bet roet ur banniel d'ar varzhed vreizhat. D'ar c'houlz-se c'hoazh,, ret eo krediñ, e c'hoarie an Estourbeillon ur roll pouezus er "Gorsedd" rak da geñver "priedelezh ar c'hleze" e oa-eñ o tere'hel al laonern vreizhat tra ma talc'he Coochfarf (Edward Thomas) hini Gembre(1).

E Brest e oa bet renet ar "Gorsedd" breizhat da heul, e 1908. En dro-mañ, - se hon eus merket - e oa bet anat ar c'hentañ toull etre K.B.B. hag ar "Gorsedd" peogwir o doa an daou aozadur dalc'het o bodadegoù kevateb e kêrioù diforc'h. En dro-mañ ivez en doa klasket Taldir adarre dedennañ gouviaded zo evel an Dr. Piton, kuzulier-departamant, ha Delobean, senadour-maer. Adarre ivez e oa erruet ur gargad a 20 Kembre war ul lestr-samm, en he c'hreiz Dyfed, Thomas Matthews,, hag ar varzhez Betsi Jones, gwreg Pol Diverres.

Lidet e oa bet "Gorsedd" bloaziek 1909 e lein Menez Bre war blasenn chapel Sant-Herve. Er bloavezhioù-se e oa degouezhet an Emsav kentañ e berr-uhelañ an hent en doa kroget da heuliañ abaoe deroù ar c'hantved. Gorsedd ha K.B.B. a gerzhe dorn-ouzh-dorn. A-hend-all, bez e reole ar varzhed ar pep brasañ eus gwask vrezhon ar mare-se : "Kroaz-ar-Vretoned" a oa renet gant F. Vallee (kelc'hiad : 7.000 skouerenn ent keitat), ar "Pays Breton" (10.000 skouerenn) ha Dihunamb (3.000 skouerenn) gant Loeiz Herrieu hag Andrev Mellag. E penn an "Echo du Ministère" edo "Mab-an-Argoat" ; Degoul ("An Hader") a vere "Kloc'hi Breiz" hag, eveljust, "Ar Bobl" hag "Ar Vro" a oa e dalc'h Taldir e unan.

Unan eus kaerañ bodadegoù ar "Gorsedd" a-raok ar brezel kentañ, an hini kentañ ha skedusañ eus an holl, hep mar, a voe hini an Naoned e 1910. Evit kas o mennad da bemvat o doa aozerion ar c'hendalc'h-mañ - Erwan Berthou ha Thomas Matthews - gounezet skoazell maer an Naoned a oa un den "uhelijinet", gouez da Daldir, hag ivez hini gCaillaud, barzh ha sekretour an ti-kêr, Giraud-Mangin levracoueger-kêr, Bernard Roy, mirour mirdi Salorges. Prest d'o harpañ e oa ivez ur vreuriezh studierion vrezhon renet gant Coty ha Gwegen,

(1) Setu amañ anvioù pennañ penzhidi ar "Gorsedd" : an Estourbeillon hag an dim. Riou, Henri de la Guichardière, F. Vallee, Loeiz Herrieu, an Dr. Plateau eus Sant-Brieg, Guillo, mestr-skol e Kamorzh, ar c'hont de Nettancourt eus Montroulez, Taldir.

ivez ur gevredigezh vrezhonegerion, e-lec'h en em gave pergen Loeiz ar Bark, "porteur ha barzh", - hervez Taldir -, sokialour-frankizelour, kalz brud dezhañ e-touez ar vicherourion, a zeuass da vezañ barzh e 1910.(1).

Kemurzhiet mat e oa bet an traoù da geñver ar c'hendalc'h-mañ, net eo lavarout. Da gentañ e oa bet digollet an holl berzhidi eus o mizoù, dreist-holl Kembreiz (hag ur bagad niverus eus ar re-se a oa deuet adarre d'ar c'hendalc'h, en o zouez ul laz telemañ hag ul laz kanañ, pevar gwaz ha peder maouez emañ, an it. Herbert eus Llanover ha Maggie Jones o vezañ div anezho). Un abadenn c'hoariva hag ur varc'hekadeg dre gêr a oa bet aozet war ar marc'had. Abarzh sevenñ al lidoù barzhiek war leurgêr Veurzh d'ar c'hentañ a viz Meurzh 1910 o devoa tri-ugent barzh breizhat ha kembreat dibunet e kêr dindan selloù diduet ha sabatuet Naonediz, hag int fichet en o c'haerañ saoù livek, bleniet gant Dyfed deuet a-ratozh eus Kembre da gadoriañ ar c'hendalc'h-mañ (2). Lidoù kemblac'h d'ar re-mañ a oa bet kaset da benn e Kêrveurzhin e Kembre, er bloaz-se hogen a-benn neuze e oa echu ren an Estourbeillon hag Erwan Berthou an hini eo en em gave e-tal Dyfed en Eisteddfod.(3).

An displegadegoù all aozet gant ar "Gorsedd" ne voent ket koulz. Menegiñ a c'heller velato an hini a gemeras lec'h e ser diskouezadeg etrevroadel Brest e 1911 a badas ur mizvezh bennak. . Eno, pergen, e oa bet lakaet e gwel an holl levrioù brezhonek embannet gant AR BOBL. Menegiñ a c'heller ivez "Gorsedd dilorc'h" Sant-Weltaz-Karnoed - un ardremez drouizel all kar da galon Taldir - a voe - hervez Taldir bepred - an hini kentañ da vout dalc'het dirak kouerion hepken.

A-c'houdevezh en em gemmeskas obererezh ar "Gorsedd"

(1) "Socialiste libertaire" evel Emile Masson. Mervel a reas e-pad ar brezel kentañ. En e stal e veze gwerzhet AR BOBL a-gevret gant kelaouennoù ar gostezenn gleizelour. (2) Seurt diskouezadeg a oa folklorek un tamm nemet e oa dezhi un tamm meurdezh ha n'o deus ket diskouezadegoù folklorek an trede Emsav. Notomp e oa kroget ar gostezenn gleiz da dagañ ar Gorsedd en degouezh-mañ. (3) An Estourbeillon a zalc'he bepred hanterenn ar c'hleze. Afer al lizher erbedet a zevoudas an disrann etre K.B.B. hag ar "Gorsedd" a c'hoarvezas e 1911.

tost da vat gant hini UNVANIEZH ARVOR. Ne voe adsavet nemet goude ar brezel kentañ. Tro hor bo da gomz adarre anezhañ o studiañ istor an eil Emsav.

Poent eo bremañ klask termeniñ ar pezh a c'heller envel "spered ar Gorsedd". Dav eo kounañ avat abarzh kregiñ gant ar rannbennad-mañ n'en deus ket ar Gorsedd miret bepred ha penn-da-benn an hevelep spered, dreist-holl ur wech ma voe deuet Taldir da gemer ar penn anezhañ, - rak arabat eo ankounac'haat ez eo bet savet ar "Gorsedd" gant Yann ar Fusteg ha n'eo ket gant Taldir. Spered ar Fusteg eta a renas er "Gorsedd" er penn-kentañ, na petra, hag evit kompren peseurt rôll ha kefridi a vire hemañ d'an aozadur ez eo dav anavezout e vennozioù ivez. Ar re-mañ dres a zamverzomp a-dreuz al levrig bihan "Lemenik" e anv, kempennet gant Erwan Berthou, e ziskibl, a hañval bezañ degemeret e levezon, a ziavaez, da vihanañ.

Kredapl eo ez eo bet stummet speredegzh Yann ar Fusteg dindan levezon kelc'hiadurioù esoterek hag amgristen e Paris, marteze ivez hini ur frañmasonerezh breizhveurat bennak, techet a-walc'h d'ar "Republikanelezh" ha d'ar "gleizelezh" a oa dibaot en amzer-se e Breizh. An hini kentañ ez eo bet Yann ar Fusteg a-hend-all o faltaziañ ur roll mesiazel evit Breizh nemet dic'hortoz a-walc'h d'ar c'houlz-se : Breizh an hini eo eta, hervez Yann ar Fusteg, a oa bet kiriek da grouidigezh ar Republik gall e Paris e 1792, dre labour ar C'hlub breton a oa bet diazezet er gêr-se e deroù an dispac'h gall ; Breizh ivez, dre wered Yann ar Fusteg, a zlee kaout un delanvad pouner war donkadur Europa dre skoulmidigezh an Englev kalonek a oa bet gallus da heul an darempredoù adstaget etre Breizh ha Kembre e deroù ar c'hantved dre hanterouriezh ar "Gorsedd" (rak darbem a rae Yann ar Fusteg ar sorc'henn ne c'helle Breizh oberiañ en istor nemet e framm ar Stad c'hall).

Moarvat ez asure Yann ar Fusteg, hervez e gomzoù e unan, "ned eo stag an Hollc'halloudeg" nag ouzh kredenn varvel nag ouzh gouarnamant ebet.." ha n'eo ket dav kennebeut addisplegañ amañ ar meizadoù hon eus dezrevellet endev ebarzh ar pennad hon eus gouestlet

da vBerthou diwar-benn "ar Galloud, ar c'hredennoù, an Uzsh" a zo "o vont da goll" hag a vo amsavet warc'hoazh gant re all uheloc'h hag haeloc'h egeto hervez "lezenn ar Welladurezh" na kennebeut all diskleriañ adarre damkaniezh an treuzannezerezh-ene. Merkomp hepken evelato ne oa ket Yann ar Fusteg enebet ouzh ar Gristeniezh evit keloù-se ; ne oa ket anezhañ un "damvezelour", un "hollsperedelour" ne lavaran ket (e "hollsperedelouriezh" a dennfe a-walc'h marteze da hini ar barzh gall Victor Hugo). An arrouden-mañ da heul a roy tu d'al lenner da varn :

"Galvet En (Dous) deus ar Spered da vezañ aotrou ar bed ; abaoe kant vloaz, ar spered-se a zo bet troet war an Ijinoù... Ha pa vezo anavezet buhez spered ar bed gant an holl, an holl a vezo war hent ar Welladurezh..."

Ar "furnezh"-mañ a gave he siohenn, a-hervez, e "gouiziegezh an Drouized kozh" ha pergen er "Barddas" a oa, hervez "Lemenik Yann-ar-Fusteg", "alc'hwez ar vuhez", un doare aviell pe skriturioù sakr, na petra.

Empennet e oa ar "Gorsedd" eta evel un doare urzh relijiel rik a zlee reiñ tu d'an izili anezhi da c'hlanat o buhezgezh ha da uhelaat o ene. Setu amañ a-hend-all an alioù a roed d'an dud yaouank c'hoant dezho mont da varzhed e Gorsedd Kastell-Pol e 1905 (hervez an niverenn 19/2 eus AR VRO) :

"Dont da vezañ barzh ez eo dilezel pep follentez ar yaouankiz hag ar peurvuiañ eus he flijadur da dostaat muiañ ma c'haller ouzh ar c'haerñ skouer den en ur wellat e vuhez hag e skiant... Kentoc'h degemer nebeutoc'h a dud vat eget degemer kalz a dud dibenn... Klask e welladur evel den hag evel breur d'ar bobl ; e labour keltiek n'hall ket bezañ hep se... sakrifiañ netra d'e c'hoant e unan..."

E miz Kerzu 1906, war an hevelep kelaouenn e ro Taldir adarre an hevelep kemennadurioù uhelvennadet hag an hevelep kentelioù a skouer vat e ser "doareoù-mat ar varzhed" :

"Dareviñ ar Skiant, miroutar galon skotus,
labourat dalc'hmat da wellat ar spered..."

Hag eñ pelloc'h d'ober anc eus "urzhoù garv an Triadoù..." eus an "ober divarvel uheloc'h eget gwander an denelezh", eus "distagidigezh drant diouzh holl ezhommoù ar bed" a zo goulemmet digant ar varzhed, "en holl hentegoù o buhez". Hag evit klozañ :

"Dont da vezañ barzh a zo dilezel netraigoù
ar yaouankiz, klask e welladurezh evel den..."

Oc'h implijout gerioù all ha gant ar siriusted relijiel vrezhon a zo marteze merk anatañ hor gouenn, gouenn a-raed digant an damvez barzhed sellout ouzh o galvedigezh a varzh ken a-zevri ha ma sell ar veleion pe ar venec'h ouzh o hini. Hor bezet koun a-hend-all e veze "urzhet" ar varzhed evel ar veleion o unan.

Eveljust o devoa an doareoù-diseurt-mañ, ar rinelezh-mañ en em ziskoueze ivez e lidoù espar ar varzhed, desachet disfiz ar vourc'hizion vat a Vreizh, enebour da bep nevezinti ha da bep dispac'h. Ar re-mañ, na petra, a damalle d'ar Varzhed bezañ frañmasoned ha da geñver o c'hendalc'h e Brest en devoa embanner an "Echo paroissial de Brest" moulet un dilinnad droukyoulet a-walc'h e-lec'h e oa graet anv eus ar "cérémonies bizarres qui sont parfois des mystères répugnants". Dija a-hend-all en devoa ul lean dominikan prezeget ur wech a-enep d'ar Gorsedd ur vodadeg bennak (aozet gant dalc'hidi ar roue gall, gwir eo). Erwan ar Moal, an oberour breizhat kristen, en abeg d'an disfiz a oa stag ouzh ar Gorsedd, en devoa bet kertri da emezelañ emañ. Evit dizarbenn an holl vrudoù-se a rede war o divoud eta o devoa ar Varzhed ranket resizañ ne oant memmet tamm ebet da zizezañ ur relijion nevez. Hogen, siwazh dezho, ne oant ket deuet gwelloc'h da baotred ar gostezenn gleiz a gareze anezho en abeg d'o darempredoù strizh gant kostezenn an hengounelourion, diouzh gredent, da vihanañ. Didalvez eo ouzhpennañ ne oa ket ar pennadurezhioù gall, ken nebeut all, douget an disterañ d'ar Varzhed daoust da vemadoù mat o diazezer. Hervez Erwan Berthou bepred en e levr "Les Vessies pour des lanternes" e oa bet prest ar gouarnamant gall renet gant Combes da dreuzkas ar Varzhed dirak ul lezvarn a ziogelroez-stad, war-lerc'h kendalc'h K.B.B. e Lezvenn.

Goude ar brezel kentañ a-hend-all e tilezas ar Gorsedd e rinelezh - n'oa nemet un diavaez anezhi, n'eus forzh penaos - hag e vennadoù led-prederouriezhel. Taldir a oa deuet da skoulmañ mignoniezh gant an Tad Alexis Presse, diazezer abati Boken hag hemañ a zeuas da vezañ ur men aluzenmer eus ar "Gorsedd" (1). Padal e fellas da dTaldir bepred mirout evelato un doare sakrelezh d'ar "Gorsedd" (pe an neuz anezhi, da vihanañ : daoust hag an drouized ne oant ket beleion?) Neb a zismegañse anezhañ pe a zismegañse ar Gorsedd - an hevelep tra e oa - a veze kastizet hep mank gant an Aotrou Doue. En un niverenn eus an "Oaled", kelaouenn dTaldir etre an daou vrezel, e 1937, e kaver ur roll iskis a-walc'h eus an dud a oa bet skoet gant an Aotrou Doue dre ma oant eneberion pe zispriz-erion ar "Gorsedd" (en o zouez Jakez Riou, kablus a vezañ graet al lu gant ar Varzhed ebarzh "Gorsedd digor"). Diaes eo gouzout eveljust betek pelec'h ez ae gwirionded Taldir. Hogen, moarvat, ne oa ket distank ar re a roe d'o 'drouizelezh' un dalvoudegezh nevet, koulz lavaret.(2).

Kement-se ne zle ket hol lakaat da zisoñjal e chome ar "Gorsedd" zoken ha dreist-holl en e varevezh kentañ ur gevredigezh vrogar menet da zifenn ar yezh ha da chom e darempred gant ar bobl an tostañ ar gwellañ :

"Ils ont conservé la vieille langue des aïeux,
ils vont au peuple..."

a skrive Erwan Berthou ebarzh "Les vessies pour des lanternes".

Dre se, ha daoust ma n'en deus bet biskoazh obererezh politikel ebet, en deus ar Gorsedd evelato c'hoariet ur roll pouezus a-walc'h en Emsav e deroù ar c'hantved. Ouzhpennomp ez eo ar stroll-mañ chomet bezant e Breizh abaoe seikont vloaz hag an dra-se a dalvez ar boan bezañ isverket(3). Dreist-holl ez eus bet anezhi ar gevarzhe

(1) An emroadur-se ne voe ket diouzh grad an holl ha darn a glaskas sevel un drouizelezh pagan war-dro an eil brezel bed. (2) Nevez zo, e 1970, hon eus bet tro da welout ur barzh kozh, Yann Caroff, war e varvska varvskañv, hag oñ gwisket en e sae varzh gant arouezioù an tribann.
(3) Dont a ra er-maez bepred kelaouenn ar "Gorsedd" an "Tribann".

gentañ en Emsav he deus klasket reiñ ur ster buhezel ha speredel d'an Emsav. Moarvat n'eo ket deuet a-benn ar Varzhed, en desped d'o uhelo'hoant (1), da bourchas d'an danvez izili a zeue daveto ur stummadur azas ouzh ar gefridi o dije karet fiziout enno hogen da nebeutañ o deus merzet ervat pegen diziouerus e oa ur stummadur bennak d'an Emsaver hag evit se moarvat e rank an Emsav bezañ anaoudek outo.

(1) Fazi ar Varzhed eo bet mennout war un dro krouiñ ur gevredigezh nevez e Breizh ha war un dro bezañ klenket er gevredigezh o'hall.

Pennad 12

Mennoziou TALDIR
etre 1898 ha 1911

Taldir n'eo ket mui prizet kalz en deiz a hiziv nag evel skrivagner nag evel politiker. Ne gemeras ket perzh e labour an eil Emsav, evit abegoù liesseurt hogen moarvat dre hiniennelouriezh dreist-holl ha n'eo ket bet gouest kennebeut hag eñ unan eus pennañ stourmerion ar c'hentañ Emsav da gas an Emsav-se en tu-hont d'ar brezel bed 1914-1918. Aes a-walc'h eo diskleriañ ar c'hwitadenn-se. E hiniennelouriezh, da gentañ, hon eus meneget endev, a vire outañ a c'hoari roll ur rener ; Ouzhpennomp e goulzelouriezh hag e c'hoant d'ober berzh - en diavaez dreist-holl - a gasas anezhañ da zegemer zoken al "Légion d'honneur" e fin e vuhez ; bez ez eo bet Taldir unan eus ar stourmerion-se o deus kredet hag a gred ez eus tu da dapout un dra bennak evit Breizh digant ar pennadurezhioù gall e fram ar Stad c'hall hag a zo implijet gant ar re-mañ a-benn ar fin. Mat eo evelato studiañ e vennoziou a zo ivez, dre vras, mennoziou ar c'hentañ Emsav hag a ziskleir pergen perak o deus ar re a oa er penn anezhañ graet tro-wenn a-benn ar fin.

Ne gomzimp ket nemeur eus e oberenn lennegel. Ankouast eo bet abaoe amzer WALARN. Skrivagnerion an eil Emsav a-hand-all a rebeche outañ klask plijout war un dro d'an emsaverion desket ha d'ar bobl dizesk. Evit tizhout ar bobl, da skouer, e tilezas Taldir abred a-walc'h ar yezh unvan goveliet gant Vallee evit ober gant ur yezh kemmesk a roe ul lec'h re vras da drefocadaj e gorn-bro e Karnoed.

Evelato e c'hoarias Taldir e deroù ar c'hantved ur roll a-bouez o tiorren an darempredoù etrekeltiek d'ar mare-se hag oc'h heñchañ an Emsav war-du ar vroadelouriezh a-gevret gant

F. Vallee (1) en devoa graet anezhañ ur brogarour.

Hep mar ebet ez eus bet ivez un doare broadelour eus Taldir, broadelour egiz ma oad en amzer-se. Da skouer, adal ar pennad kentañ a embannas ebarzh an "Indépendance bretonne" eus Sant-Brieg (13 ha 19 a viz Gouere 1898) e ra un implij stank eus ar gerioù "broad" ha "broadel" e sigur Breizh ha perzhioù Breizh. Dont a ra gant Taldir troiennoù a seurt gant "caractère national" ar Vrezhoned ; menegiñ a ra ar skrivagner ivez lavarenn Thomas Davies, ar brogarour iwerzhonat a orin kembreat : "Ur vroad a rank mirout he yezh muioc'h eget he yezh muioc'h eget he ziriegezh..." Hag oc'h ober dave da Gembre e skrivo : "cette nation, soeur de la notre..." Moarvat ne rae Taldir oc'h ober gant ar gerioù-se nemet heuliañ un hengoun ken kozh hag an Emsav e unan hogen mat eo kounañ amañ ez eo bet ar skrivagner-mañ herroc'h e deroù e redad emsaver eget meur a strollad eus al ledemsav a hiziv.

Merzet eo bet ar pouez a roe Taldir d'ar yezh. Nevez e oa avat an dro-soñjal-mañ rak ar strollad breizhat nemetañ a oa oberiant e Breizh d'ar mare-se, an "Association Bretonne" - "Breuriezh Breizh" - ne daole ket nemeur pled ouzh ar gudenn anezhi. An hini kentañ ez eo bet Taldir - hag e kement-se e tiskoueze bezañ diskibl da F. Vallee - o tiogeliñ dirak ar foran ne c'helle bezañ broad ebet e Breizh er-maez eus ar yezh. En ur pennad all war an hevelep kazetenn eus Sant-Brieg d'an 29 a viz Ebrel 1899 ez asur evel henn : "Yezh ebet, broad ebet..." a voe kemeret da c'her-stur gant Yann-Vari Perrot er prantad-se endeeun : "Bep brezhoneg n'eus Breizh ebet..."

Arabat deomp avat bezañ touellet gant an implij a ra Taldir eus gerioù "evel "broad" pe "broadel". Anv a ra eus "yezh vroadel" ha sevel a ra e-lec'h-all a-du gant ar yezh lennek hag unvan : war niverenn an 22 a viz Ebrel 1898 eus ar "Résistance" e tifenn skritur ar Gonideg kempennet gant Frañsez Vallee ha war un dro glanded ar yezh ; hogen ne rakwele eviti nemet un tamm lec'h

(1) F. Vallee a zamantas bepred d'e ziskibl. Soñj am eus e c'hoarveze gantañ e zifenn e 1944-45 p'em boa bet tro da weladenniñ ar stourmer kozh e klinikenn Sant-Lacrañs.

er skolioù gall ; anv a ranke a-hend-all e chome ar yezh skort a-walc'h peogwir e verken en en bennad kentañ en "Indépendance bretonne" - 13 a viz Gouere 1899 - e c'helle houmañ bezañ diorreet (kompren a rae eta ne oa ket c'hoazh diorreet) ; a-walc'h e oa dezhañ eta gouenn ar brezhoneg er skol evel ma c'houlenne ar brezhoneg er gador-brezeg en iliz.

E devoud e oa techet - evel meur a stourmer brezhon all er grez-se - da ziforc'hañ ar vroadelezh diouz ar Stad peogwir e kave dezhañ evel d'ar re all moarvat e oa dic'hallus krenn sevel ur Stad e Breizh. Ebarzh ar "Résistance bretonne" bepred e responte d'ar gouenn-mañ : "Petra eo ur vroad?" evel henn : bez ez eo ur vroad ar bobl a zo dezhi un istor, ur stuziadur hag ur yezh ; n'eo ket dav dezhi dre ret kaout an emrenerezh (a c'heller kompren evel-mañ ivez : n'eus ezhomm kaout pe sevel stad ebet evit derc'hel en he sav ur vroadelezh). A-benn ar fin ne hete Taldir nemet e ve doujet "hengounioù broadel" ar "gouennoù" (1), e vefe roet dezho amaezhidi gouest da gompren o yezh koulz hag ar gwir d'en em velestrañ o unan hervez o lezemoù. Un doare emvelestrerezh a oa gouennet eta d'ar muiñ gant Taldir : padal e oa kement-se kalzig o vezañ ma ne c'houlenned mann ebet a-ziagent.

A-hend-all, daoust ha tamall a ranker amañ abafed politikel Taldir ? Ne gav ket din e vefe reizh an dra-se. Er pennad kentañ skrivet gantañ e ra Taldir, da skouer, meneg eus broadoù evel Poloniz, Hungariz, Bohemiz, Iwerzhoniz a geñverie ouzh Breizhiz hag a enebe ouzh ar "broadoù meur sur eus o nerzh". Hogen, dres, hini ebet eus ar broadoù-mañ n'he doa tizhet kaout an emrenerezh klok ha den ne c'helle rakwelout pe da vare na penaos o dije tapet anezhañ : piv en dije diouganet diskar ha difloskadur impalaeriezh Aostria e 1898 ?

Hogen ar meneg a ra Taldir eus ar "broadoù"-se a zo deurus evelato rak diskouez a ra orin an "azginivelezh" a darzhas e Breizh adal 1898 : bez e c'hoarveze an azginivelezh-se eus an

(1) Evel ma vo gwelet ebarzh epnadoù anall e rae an Emsav kentañ un implij stank eus ar ger "gouenn" pe "race" e galleg. Dre vras e klote ar gerioù-se gant "kenel" pe "ethnie" hiziv.

darempred nevez adskoulmet etre Breizhiz brogarourion hag ar vrogarourion all eus ar broioù keltiek keltiek all (1) hag ivez eus an evezh taolet ouzh kudennoù ar c'helenioù bet staget ouzh ar Stadoù impalaerel. Betek neuze e oa chomet "Breuriezh Breizh" (an "Association Bretonne") tamolodet warni hec'h unan, predeziat hepken gant armerzh Breizh pe he "zremened" (kv. kevrenn an "henoniezh" en "Association Bretonne" end-eeun), - un doare C.E.L.I.B. renet ivez gant gouvriaden et a ha netra ken.

Emsav europat ar broadoù bihan, an Emsav hollgeltiek eta an hini eo en deus roet tro da Emsav Breizh da ziwanañ ; ha Taldir en devoa ur skiant lemm eus orin an Emsav kentañ pa rae eus an Emsav europat hag hollgeltiek-se "le mouvement des races ou racique..." Em e unan a rae alies gant ar ger "race" a glot mui pe vui ar ster anezhañ gant hini ar ger gallek a vremañ "ethnie" implijet alies gant al ledemav (pe "kenel" e yezh emsaverion zo) ; ar ger-se a veze arveret kichen-ha-kichen gant ar ger "nation". War an "Ouest-Eclair" (2) eus ar 4 a viz Ebrel 1900 e tibrad Taldir d'ar barr-uhelañ roll ar "gouennoù bihan" ha dreist-holl hini ar Gelted o devo da gefridi difenn Europa a-enep da aloubidigezh ar Slaved :

"La philosophie de l'histoire nous fait voir l'époque fatale où les Slaves sans nombre et civilisés essaieront de dominer l'Europe. C'est alors que le monde pourra compter sur les dix-huit millions de Celtes de l'Ouest..."

Goude bezañ meneget ar "péril germanique et slave" gant un ton a ziouganer sebezus a-walc'h (3) ez ouzhpenna Taldir :

"Nerzh ur ouenn n'emañ ket en he niver ; dibennañ a ra kalz mui diouzh ar feiz he deus emmi hec'h unan. Sellit ouzh ar pobloù o deus aloubet ar bed : ar Romaned gant an dornad forbanned eus Romulus hag ar Slaved gant meuriad Moskov..."(4)

"L'esprit commun, la foi en eux-mêmes, voilà ce qui manque aux Bretons..."

(1) Kv. ar pennad diwar-benn an darempredoù etrekeltiek e deroù ar c'hantved.
 (2) Ur gelaouenn roazhonat e oa dreist-holl en amzer-se.
 (3) Ar skrivagner a ra anv eus Ezekiel. Kv. barzhoneg Kalloc'h trevezet diwar Ezekiel end-eeun.
 (4) Brezhoneg ganecomp.

E gwirionez, oc'h ober gant ar ger "race" a enebe ouzh ar ger "peuple" el lavarenn-mañ, da skouer :

"Ils (ar Gelted) paracheveront l'union commencée lorsqu'il n'y aura plus de peuples mais des races..." e hañval Taldir krediñ e c'hell an "natur" - ar "ouenn" - bezañ trec'h d'ar Stadoù savet gant mab-den, pezh a zo ur fazi, rak frouezh darvoudoù hag ensavioù politikel ez eo ar "gouennoù".

Mat eo, a gav deomp, reiñ ul lec'h ispisial d'ar ger "race" amañ peogwir e tiskouez ervat n'en doa Taldir skiant ebet eus an darempredoù a zo etre ar Stad hag ar gevredigezh. Krediñ a-walc'h a rae, lakaomp, e c'helle engroezioù a zivroerion vreizhat, iwerzhonat, skosat, a yae da greskiñ isproleteriezh Paris, Bro-C'hall pe ar Stadoù-Unanet, kaout ul levezon bennak war em-droadur ha tonkad ar broadoù gall pe amerikan a roe bod dezho (1).

Ar "ouennelouriezh" iskis-se avat he devoe koulskoude heuliadoù kasas pa glaskas ar skrivagner empennañ ur politikerezh breizhat bennak ; ar "ouennelouriezh"-se, da skouer, a zegase Taldir da ober un diforc'h groñs - ha n'en doa diazez ebet - etre "Breizh-Izel" ha "Breizh-Uhel" (2). Ar "vreizhizelouriezh-se" a vroudas anezhañ d'ur mare - e 1941 - da empennañ savidigezh ur Vreizh "unyez" e kornog al ledenez-mañ (3).

E gwirionez, seurt gounnelouriezh a oa awenet gant kentelioù ar vistri c'hall er skoloù. Anv a ra Taldir, da skouer, eus tezennoù Augustin Thierry ha dre vras eus re ar Geltomaned romantel er c'hantved tremenet (4) ; menecomp ar re vrudetañ : Henri Martin ha Charles de Gaulle o devoa kemeret perzh e kendalc'h etrekeltiek Sant-Brieg e 1867.

Er brezegenn a zistagas da-geñver banvez an daol-grenn hag a voe embannet war AR BOEL d'ar 24 a viz Mezheven 1911 en em ziskouez ar splannañ faltaziennoù romantel ar skrivagner. Ober a

(1) Prest e oa Taldir da ober "trevadennoù" eus ar bochadoù brezhonegerion reuzeidik a oa staliet er gallegra. Meven Mordien diwezhatoc'h a savas a-eneb d'an endouell dibocell-se.
 (2) Kv. Ouest-Eclair an 11 a viz Du 1900. Kreñv tre e oa ar spered kanton war vevn ar yezh e deroù ar c'hantved. Kv. Ervorennoù Taldir.
 (3) Hervez ar gelaouenn SAV hag an "Heure Bretonne" e 1941 end-eeun e oa bet ar raktres-se kavet mat gant Laval, pennaodiern Vichi.
 (4) Arabat disoñjal e voe degaset Meven Mordiern d'an Emsav gant ar re-se. Taldir a oa tehet da reiñ pouez d'an drouzelezh c'halian hag a savas ul levr diwar-benn La Tour d'Auvergne.

ra eus Bro-C'hall, da skouer, "la patrie de Vercingétorix" hag anv a ra ivez eus ar "vieux sang gaulois". Un tammig droukvesk a zo er pennad a-hond-all hag a chom disklaer a-walc'h. Diwar e lenn avat e teu anat da unan e vage Taldir ar goanag e c'helled ober ur c'hemm etre ur Vro-C'hall fall "roueat-napoleonat" (ret eo stourm, emezañ, a-enep d'ar "centralisation royalo-napoléonienne") hag ur Vro-C'hall vat a vije bet republikan-kevreadelour (1) Ar pezh a fell da dTaldir lavarout eo ez eus ur Vro-C'hall gefridiel, ur Vro-C'hall bolitikel ha na glot tamm ebet he mennadoù gant re ar Vro-C'hall wirion, ar Vro-C'hall "werc'hek" (2) a zo keltiek koulz ha Breizh hec'h unan. Setu, da vihanañ, pezh a ziogel er frazenn-mañ :

"La monarchie franque à laquelle succéderent dans le même ordre d'idées l'impérialisme napoléonien et le parlementarisme actuel... n'ont jamais répondu à notre racialité..."

Parañ a ra an empennadenn-mañ dreist-holl er pennad embannet war an "Ouest-Eclair" d'ar 4 a viz Eost 1901 hag a zo e dalbenn : "L'âme française et l'âme celtique" e-lec'h ez eus keal a Gelted Vreizh keñver-ha-keñver gant Kelted Vro-C'hall ; er pennad-se ivez e reer anv adarre eus an 18.000.000 milion a Gelted atlantel, eus ar "ouenn" evel eus un devoud hud, egiz ma rae anezhi istorourion c'hall zo meneget er skrid-mañ : Henri Martin ha Michelet, pergen. Hogen dreist-holl en em harp Taldir war dodennoù Augustin Thierry evit enebif Galianed ouzh Germaned hag ivez hevelebañ ar re-mañ ouzh ar rouaned, an noblañsoù, an aotrouion ; ha Taldir da renkañ e-touez ar Gelted c'halian, mesk-ha-mesk, "bagaudi" ar izel-impalaeriezh roman e Galia, dispac'herion c'hall 1789 (ar vourc'hizion o doa en em savet a-enep d'an noblañsoù), ar vicherourion o deus un ene "galian" ; ar vac'homerion a damalled a oa al "latinéd-yuzevion" (Napoleon, pergen), enebourion gantvedel ar C'helt bepred en ereoù e Bro-C'hall, ar "Gall-Yuzev"(3)

(1) War-dro ar mare-se en em zisrannas "kleizidi" K.B.. diouzh kevredigezh ar Markiz de l'Estourbeillon evit sevel "Unvaniezh Arvor".
 (2) Diskan ar stourmerion bolitikel n'en em santont ket gouest da dapout ar galloud abarzh pell. Kv. "France réelle" ar vaorasourion a-ziagent hag ar "Bretagne réelle" dreistveverion an eil Emsav.
 (3) Temoù brudañ ar gostezenn degoù gall d'ar mare-se mesket gant republikanouriezh ha gwerinelouriezh "bonedoù ruz" trivliadel kernevat ar skrivagner.

a sun didruez ar paour kaezh micherour gall-galian ; ret eo da hemañ hejañ kuit yev ar mac'homer "semitiek" en em skor war ar "german" hag ar "frañmason" evit gwaskañ ar werin c'halian vat.

Er pennad-mañ e leze Taldir e awen d'e ren rak ennañ ne ziskouez ket kaout an disterañ skiant-vat. Hogen en tu-hont da se, war a seblant, e klaske ar skrivagner gounit grad-vat ar C'hallaoued dre vras, dreist-holl avat ar re a oa a-du gant ar Republik (kianted an "Ouest-Eclair", na petra, a oa ur gazetenn republikan). An dra-se a zo sklaer a-walc'h er c'hlozadur :

"En plus de son but purement breton et irlandais le mouvement celtique a donc une portée sociale beaucoup plus grande : celle de lutter contre les omnipotents et de redonner la Gaule aux Gaulois..." Ret eo, emezañ c'hoazh "pousser les vrais Français, partisans de la liberté des races, les socialistes éclairés dont le but est d'affranchir la société, à appuyer et à développer le mouvement celtique aujourd'hui confiné dans les limites de la Bretagne..."

lois

El linennadoù-mañ ez anavezet e gwirionez preder meur a stourmer brezhon a gav re enk tachenn Vreizh d'e obererezh hag a garfe reiñ dezhañ un dalvoudegezh hollvedel.

Rak-se e klaske Taldir ivez sachañ ar sokialourion d'e gostezenn (pezh a oa gwall herr en Emsav d'ar c'houlz-se), lakaomp er pennad en doa moulet war ar BOBL d'an 3 a viz c'hwevrer 1906. War e veno eta e oa "imboudet" ar sokialouriezh hag ar rannvroelouriezh - eus kevreadelouriezh e fell da dTaldir komz moarvat - "war an hevelep keñ" daoust ma kavent o andon e froudadoù mennoziou diforc'h. Ha pelloc'h : "Sur le tronc primitif du peuple travailleur, lentement se greffe, à côté du socialisme, le culte des atres familiaux et de la patrie racique..." Hag en diwezh ez asur : ar "rannvroelouriezh" a voe er penn-kentañ, ur reizhiad prederouriezhel evel he c'hoar gevellez, ar sokialouriezh..." Mennoziou nes d'ar re-mañ a gaver e-lec'h-all, - da skouer en ur brezegenn graet e brezhoneg e Kallag hag a voe embannet ebarzh SPERED AR VJIO e 1903 ; enni e lavar Taldir e rank al labourourion sevel "bevezuniadoù" (1), kevelourioù evitstourm ouzh ar gevalourion.

(1) An temoù brudañ-se a vo adkemeret er gelaouenn BRUG un nebeut bloavezhioù war-lerc'h.

Padal ne ra ket Taldir dave, peurvuiañ, d'ar vezourion sokialour klasel. Meneg ebet eus Proudhon, da skouer. Ur wech hepken e veneg Marks, en ur pennad embannet war an "Ouest-Eclair" e ser erbediñ savidigezh kevelourioù. "Ar c'henderc'h distag a chom dister e bouez," emezañ. Gwir eo evelkent e oa savboent ar skrivagner strizh a-walc'h : mennet e oa Taldir da zifern ar gemenerion vreizhat a oa tonket dezho mont da get ma nac'hent en em gevrediñ a-benn herzel ouzh an dilhadoczeirezh greantel.

Bezot pe vezot, prest e oa Taldir da gomz ouzh ar werin evit he broudañ d'an emgann, goulenñ diganti dilezel ar strolladoù gall, mirout he frankiz barn. Ur pennad embannet war AR BOBL, d'an 29 a viz Ebrel 1904 a echue evel henn : "Bebet Breizh da virviken; bevet al labourerion ; bevet ar frankiz!" (1)

E kement-se holl e tiverzer un tech anat eus mennoziou Taldir : en eneb da Galloc'h pe d'an Diberder, gwenedourion o daou hag evitañ da vezañ kristen a-c'houez d'an holl ne oa ket douget Taldir tamm ebet da dezennoù ar gostezenn dehoù gall ha nac'hañ a rae krediñ e promesaoù paotred Vaurras e sigur an "digreizennerezh". Ar pezh a hete - lemm er c'heñver-se ar pennad "Politique nouvelle" embannet war an "Ouest-Eclair" d'an 18 a viz Here 1900 - e oa diazeziged ur Republik gwerinveliel ha kevreadel. Fellout a rae dezhañ aotren an "emvelestrezezh" da zarn eus ar broioù a oa bet alcubet gant ar Stad c'hall, gant m'o dije bet ur "ouenn" hag ul lec'hiadur douaroniel resis ha diseurt (2). Evit pezh a selle ouzh Breizh en em harpe Taldir war an istor ivez a-benn arc'hiñ an emvelestrezezh eviti : reizh e oa ez adkavje Breizh he frankizioù netra nemet dre m'he doa en em vataet diouto gwechall. Mont a rae Taldir betek empenañ e c'hellje Versailles bezañ kêrbenn kevreadel "Frañs". Hag eveljust, diouzhtu eo e tleed kaout eskibion ha kargidi vrezhon hep kontañ ur gelennadurezh divyezhek.

(1) Notomp koulskoude e chomas Taldir bepred ur c'hristen leal hag e tifennas an Iliz a-hed ar wech. En e brezegenn e Kallag e lavare ne c'helle ket bezañ Republikaned eus ar re a heskine al leaned.
 (2) "Situation topographique et racique des contrées en pays d'Etats quasi-autonomes qui gèrent eux-mêmes leurs affaires particulières..." Ur galleg iskis a skriva Taldir.

Daoust d'e ziskleriadennoù a lealouriezh c'hall e c'hoarveze gant Taldir en em ziskouez dic'hall a-grem. Dont a rae gantañ diskanoù a vo adkemeret diwezhatoc'h gant ar vroadelourion a-zivout breinadurezh ha diskar Bro-C'hall keñveriet ouzh an izel-impalaeriezh roman (1). Eztaolet eo ar mennoz-se dreist-holl ebarzh ar BOBL, en niverenn eus an 23 a viz Gouere 1910, da skouer. "Finis Franciae", a skriva Taldir e latin. Hag eñ neuze da lakaat keñver-ha-keñver barbared ar Reter ha barbared ar C'hornog a zlee aloubiñ Bro-C'hall (gwelet hon eus avat en em douelle Taldir diwar-benn gwir bouez an divroerezh poblek-se : un tamm didro e oa e fiziañs). An hevelep spered enep-gall a bar en ur pennad all eus AR BOBL a zo e dalbenn "Barn an istor" e-lec'h ez a ar skrivagner a-du gant Yann Moñforzh hag a-enep da Charlez Eleiz.

A-hend-all, daoust ha gouest e oa Taldir da empenañ ur brederouriezh pe ur gelennadurezh bemak da harpañ e vennoziou ? War a seblant ne oa ket, daoust ma tichañs dezhañ menegiñ Marks. Moarvat e oa anezhañ, e-keñver Istor, ur gwazhwelour, evel maz eo ar gristenion dre vras : war ar poent-se, da vihanañ, n'en em douelle ket. En niverenn eus an 12 a viz Du 1910 eus ar BOBL ez embannas ur pennad a zispleg mennoziou nes a-walc'h d'ar re a zisplegas Yann Brezal (Jos ar Bras) danc'houde ebarzh BREIZ DISHUAL. "An dud," eme ar skrivagner, "n'int ket gouest da gaout mennoz ebet drezo o unan... bepred e vezo lodenn an dud uhelañ etreze da ren an ideoù a zleo ar re izelañ degemer..." An dra-se, da vihanañ, a oa gwir e Breizh e-lec'h ne oa ket ar werin evit kemer perzh e buhez veizel ebet. Ha menegiñ a ra Taldir an Aviel : "Peorion ha pinvidigion a vo bepred... tud o ren ha tud renet a vezo ivez eveljust. Mez ar justiz padus a gaver amañ memestra rak an Istor zo test ne vez ket bepred ar memes rumm o ren... Ar re finañ eus ar re n'o deus ket (2) ... ha raktal m'int deust da vezañ ar re o deus e troont un dremm galet war-du o breudeur n'o deus ket..."

Skiant-vat ar c'houerriad kentoc'h eget meiz ar prederour a verzer el linennoù-mañ e gwirionez.

(1) Klevet em eus Kerverzioù oc'h eztaolliñ ur mennoz kar da hemañ.
 (2) Ar broleterion. Ne oa ket Taldir barrek tre da grouiñ gerioù nevez daoust ma tifenne ar re a save anezho a-enep d'o fismigerion.

E"omprenèzon" - evit implijout ur ger a vourre Taldir oc'h arverañ - a oa skort a-walc'h ivez. "Ar relijion a zo ur c'hleuz da ziwall an urzh en ur zegas ar soñj eus o deverioù d'ar re n'o deus ket..." (1)

Gwall ziakuit eo yezh prederour Taldir (notit n'eo ket gwell e c'halleg, pell emañ zoken) hogen n'eo ket al lec'h amañ studiañ mennoziadeg Taldir dre vras(2). Pezh a c'heller lavarout hepken eo ez eo bet e deroù ar c'hantved-mañ ur brouder kentoc'h eget ur c'henurzhier. Hiniennelour e oa Taldir ha ne oa ket gouest da c'houzañv framm ebet. Er pennad eus an 31 a viz Here 1911 ebarzh AR BOBL - e-lec'h e ra un dezrannadur eus darvoudoù Lokronan-Leon a oa disoc'het da ziempredur K.B.B. ha da savidigezh "Unvaniezh Arvor" - e tiskleir ar skrivagner :

"La propagande individuelle, voilà où le Celte est maître. Individualiste par tempérament, il ne fait jamais meilleure besogne que quant il est seul ou en petit nombre..."

Seurt diskleriadenn, e gwirionez, ne oa nemet stadadur ur c'hwitadenn. Hogen gwelomp kentoc'h penaos e veize Taldir an obererezh breizhat. Erbediñ a rae ar bruderezh gant levrioùgoù, skridoùgoù, ar Wask ; e unan e savo hag e talc'ho en o flomm betek ar brezel AR BOBL hag AR VRO.

War ar"varzhouriezh" e konte dreist-holl avañ.

"Le bardisme est un état d'âme, une inclination intellectuelle qui a trouvé dans le Gorsedd une organisation, des cadres et un gouvernement..."

(1) Meven Mordiern a lavare tost-da-vat ar memes tra. Ur savboent bourc'hiz a-grenn e oa.

(2) Er c'heñver-se e c'hellfed lem ur pennad evel "Divarventez an eneoù" ebarzh SPERED AR VRO a ziskouezfe a-walc'h e oa douget Taldir d'un doare kendeuzerezh kredennoù. Reiñ a rae ivez d'ar Gorsedd ur roll damgevritel, par a-walc'h da hini un urzh relijiel evel Kembreiz o unan. Merzout a reer an tech soñjal-se ebarzh ur pennad a embannas Taldir e kembraeg - gouest e oa Taldir da skrivañ e kembraeg ha zoken da sevel barzhonegoù er yezh-se - hag a zo e dalbenn "Amdiffyniad y beirdd", ebarzh ar galacuenn "Y BRYTHON" e-lec'h e ra eus an drouizelezh ur velegiezh lik hag e-lec'h e ro un dalvoudegezh sakr d'ar vrogarouriezh. Padal e chomas Taldir kristen ha gouzout a reer e voe an Tad Alexis eus Boken aluzenner ar Gorsedd.

Hogen n'oa ket anv a zerc'hel d'ur gemurzh strizh er Gorsedd daoust ma oa ar poellgor anezhañ dizistroadus rak bez ez eo ar C'helt, eme Taldir, "individualiste d'abord, rebelle aux embrigadements et aux omnipotences..." (1)

A-hend-all e harpe ar skrivagner e"furnez"war ar gredem ne vije ket dieubet nag adsavet Breizh e korf un devezh :

"L'Oeuvre de rénovation de la Bretagne," emezañ er pennad-se,"n'est ni celle d'un jour ni celle d'un homme, ni celle d'une Société..."

Kement-se a oa skiantek a-walc'h. Gwir eo e skrive Taldir al linennoù-mañ da vare un enkadenn eus an Emsav peogwir e oa hemañ o paouez en em rannañ. Ne rae, evel m'hon eus merket, nemet gwiriañ ur c'hwitadenn. Ar gudenn e oa gouzout, eveljust, ha tu a oa da dec'hout diouz ar c'hwitadenn-se. Hogen en ur pennad all eus al levr-mañ e vo ensellet ar gudenn-se.

=====

(1) Dave da'n Estourbeillon ha d'e "hollvelouriezh" moarvat.

Pennad 13

Mennozioù Erwan Berthou

a-raok ar brezel bed kentañ

Mat eo, d'hor soñj, ma fell deomp kompren ervat tro-spered ar stourmerion e deroù ar c'hantved studiañ mennozioù ar skrivagnerion o deus klasket sevel, e brezhoneg pe e galleg, un oberenn emsavel.

Kregiñ a raimp gant Erwan Berthou (Kaledvoulc'h e anv-pluenn) a zo ganet e 1861, a zo marvet e 1933 hag a gemeras perzh e labour an Emsav ha dreist-holl e hini Skol-Veur ar Varzhed etre 1900 ha 1918.

Displegomp, da gentañ, peseurt mennozioù prederouriezhel en devoa ar skrivagner-mañ, evit gellout kompren e peseurt endro veizel ez eo bet diorreet an Emsav kentañ.

Er penn-kentañ, da vihanañ, ha moarvat da heul Yann ar Fusteg, e hañval Erwan Berthou en em lec'hiañ e froud ar mennoziadegoù kar d'an deosofiezh a oa diouzh ar c'hiz e kelc'hiadurioù arzourion ha kefredourion zo e Paris, lakaomp, e deroù an ugentvet kantved. Ebarzh "Les vessies pour des lanternes", da skouer, e veneg Kaledvoulc'h damkaniezh an "Eter", un doare metou danvezel-speredel a endalc'h kement boud zo hag anv a ra ivez eus ar

"grands initiés dont l'illustre maître Edouard Schéré a tracé la vie de quelques uns..." (1)

Hag ouzhpennañ a ra ar skrivagner e ser marv Yann ar Fusteg d'an dek a viz Mae 1910 ebarzh LEMENIK - buhezskrid Yann ar Fusteg end-eeun - en deus fellet dezhañ displegañ el levrig-se

"ur vedgeneliezh, aviel gouenn ar Vretoned pe ouiziegezh ar bed..." (2)

(1) Hengoun an drouizelezh deskoniet a zo padet pell e Breizh, keit hag ar bloavezhioù pemont, a gav deomp.

(2) "Kosmogoniezh".

Ar "vedgeneliezh"-se a zigure, eme Erwan Berthou,

"un immense horizon aux matérialistes comme
aux spiritualistes..." (1)

Ar memmoziou-se a gave o andon evit darn e kelennadurezh
ar "Barddas" savet gant Iolo Morgannwg e Kembre en hanterenn gentañ
an 19vet kantved hag a oa mennet, a-hervez, da addezevell furnez
"hengounel" an Drouized kozh (2). E gwirionez e oa eus ar geleennad-
urezh-se un doare "anavezadur", un doare "gnôsis" a glaske kediañ
skiant ha prederouriezh (un tammig evel ar varksouriezh a zo ivez
ur "gnôsis" er c'heñver-se) en ur ginnig ur bedvezadur nevez (3).
Damkaniezh an "Eter", da skouer, diazezet war ar "bannoberezh"
- ar "skinoberiusted" - nevez dizoloet d'ar mare-se a zisoc'he da
geal ar "mor-spered" a laka da soñjal a-walc'h e hini "noosfer"
ar prederour gall Teillard du Chardin. E ser ar "mor-spered"
end-eeun e lavare Kaledvoulc'h :

"Setu aze ur gavademn dispar a zle mirout da
virviken anv Lemenik - Yann ar Fusteg, diazezer
ar "varzhouriezh" - diouzh an Ankouazh. War ar
ger-se e vezo, hep mar, savet, un deiz da
zont ur gredenn nevez, ur ouiziegezh, ur filo-
zofiezh nevez..."

Un doare kevrinelezh a zo eta e diazez ar vennoziadeg-mañ.
Houmañ ivez a lakae Erwan Berthou - war-lerc'h Yann ar Fusteg -
da empennañ evit Breizh ur c'halvedigezh a zivar laez, ur roll
mesiazel en ur stumm. "Ar Vrezhonez," eme c'hoazh Erwan Berthou,
dre vouezh Lemepik, "a zo bet lakaet gant an Tad hollc'halloudek,
koulz war zouar Breizh-Veur ha war zouar Breizh-Izel, evit bezañ
da virviken skoazellerion ar pobloù all, o blenierion war hent ar
Gwelladur denel, evit bezañ kelennourion ar speredoù war annoudegezh
ar Wirionez..."

Taolomp evezh amañ ouzh an droienn "Gwelladur denel". Hol
lakaat a ra da soñjal a-walc'h e oa awenet memmoziadeg ar Fusteg

(1) Hiziv eo ar c'hiz adarre e-tonz an Emsaverion unvanif ar
varksouriezh gant gant an emsavouriezh pe ur speredelouriezh bennak.

(2) Un tabut a zo savet endro d'ar "Barddas"-se ha n'oa ket diles
eveljust.

(3) Un arnod seurt-se a zo bet kaset da benn en hon amzer gant Teillard
du Chardin. A-hend-all ez eo gallus e vije bet levezonet Iolo Morgannwg
gant ar frañmasonerezh breizhveurat.

hag eñ e darempred gant uhlegargidi eus ar Stad c'hall a-hervez,
gant kelennadurezh ur frañmasonerezh bennak, an hini breizhveurat,
pe hini ar "sklerijennoù" dre vras. Evel speredelourion ar rumm-se
a-hend-all e oa prest a-walc'h Erwan Berthou da gemmeskañ an holl
gredennoù ha da eren, da skouer, anv Erwan Helouri gant hini ...
Natsis Kelien hag Ernest Renan.

Hogen lezomp a gostez "filozofiezh" Erwan Berthou evit
studiañ e vennoziou a denne d'ar politikerezh rak arceuziusoc'h
int c'hoazh eus tro-soñjal e genstourmerion en e amzer.

Evel meur a hini all en e brantad en deus Erwan Berthou
poan da zilezel ar skeudenn eus Bro-C'hall ez eo bet akourset da
azeuliñ er skol c'hall end-eeun, dreist-holl skeudenn hud ar Vro-
C'hall c'halian. Er c'heñver-se e pleustr Erwan Berthou a-zevri
adarre an hevelep kendeuzerezh kredennoù ha war dachenn an dregor-
foniezh pe ar relijion peogwir e veneg en hevelep dilinennad Ia
Tour d'Auvergne - eus Keraez, evel Taldir - Henri Martin, Jean
Raynaud, Edgar Quinet, Charles de Gaulle, Kervarker, an Uhel ha
Yann ar Fusteg. Betek dibenn e vuhez e c'hoanago ar barzh un adsav
keltiek bennak e Bro-C'hall : Arzhur eta a oa lakaet war an hevelep
pazenn ha Verkingetoriks. Ha droukveskañ a ray Erwan Berthou en
hevelep doare hag en hevelep disfiz Romaned, Franked, Saizon ha
Germaned : an etrevroadelenn enep-keltiek en ur damall war un dro
ar "c'hoarezed latin" ; Galia, a-hervez, he dije gouzañvet teir
aloubidigezh : roman, frankat ha ... kosmopolitat.(1).

Ar vrizhkredenn-se a luske anezhañ ivez da zegemer un
doare gouennelouriezh. Diouzh a skrive Berthou eta e oa tost
gouenn orin ar C'hallaoued da vezañ beuzet dindan niver an envroidi
estren :

"Pauvre Gaulle de 1789... vous nationalisez
14.000 étrangers par an..."(2)

Ar C'hallaoued a zo o koll o gouenn eta hogen ar gwashañ
zo eo e klaskont ober eus ar pobloù all - Breizhiz, da skouer -
sklaved, goude bezañ aet da sklaved o unan :

(1) Netra souezhus maz ay Kalloc'h d'ar brezel evit difenn Keltia
a-enep d'ar C'hermaned.

(2) Kv. Tem ar c'havelloù goull e Bro-C'hall amprestet gant Kalloc'h
digant ar gostezenn dehoù gall.

"Chez eux," a skriv Erwan Berthou, "le machiavélisme de la conquête s'associe à l'inconscience de la servitude..."

E gwirionez, n'int mui nemet dileuridi ha mevelion o mistri roman, ar re o deus krouet

"la fameuse civilisation romaine sur laquelle nous calquons la nôtre..."

A-enep d'ar re-se, a ziskleir ar skrivagner, emañ ar Varbarek (elese ar Vrezhoned ha n'int ket bet tizhet gant breinadurezh ar sevenadur-se) o vont d'en em lakaat en hent...

Ar ouennelouriezh-se a oa strizh a-walc'h peogwir e tegase Erwan Berthou da nac'hañ ouzh renerion zo eus ar "Bretagne à Paris" ar gwir da bleidiñ gant Breizh dre ma oa anezho "Normaned", lakaomp. Dav eo bezañ a ouenn bur evit gellout komz en anv Breizh. Hag a-benn diskouez pegen diboell e oa ober war-dro Breizh hep bezañ Breizhad e kemere Erwan Berthou ar skouer-mañ :

"Ainsi, parce que la loi confère au breton et au nègre martiniquais le même droit de vote... le nègre est un breton et le breton est un nègre..." (1)

Hogen pelloc'h e tispleg Erwan Berthou fraeshoc'h e vennoz war an divoud-mañ en ur pennad anvet en un doare sterleun kenañ "Le patriotisme de la race" e-lec'h ez eneb an "nation" (=ar Stad) ouzh ar "race" (ar ouenn, ar genel): "La Nation

"La Nation ne peut conférer aux étrangers que des droits nationaux ; les autres droits ne peuvent être conférés que par le Conseil de la Race. Le droit de race est antérieur et supérieur à celui de la Nation... Tout le droit général lui revient : organisme, propriété, famille, liberté, naturalisation... le droit politique basé sur la force revient à la Nation..." (2)

Moarvat n'eo ket sklaer a-gzenn ar pennad-mañ. Ouzh e lenn avat e c'heller kompren ez empenne ar skrivagner evit Breizh un doare

(1) Savboent Meven Mordiern hag eñ gall a orin a oa disheñvel krenn. Ar yezh hepken a verme evitañ hag estlamiñ a rae ouzh degouezh ar vorianed o devoa komzet gouezeleg en antantou o mistri eus Alba er Stadoù-Unanet.

(2) Tennet diouzh "Les Vessies pour des lanternes".

emvelestrerezh diabarzh en dije lezet d'ar Stad c'hall greiz an emell eus ar gerreizh hag eus an difenn. Padal ne vije ket bet galloud ar Stad-se nemet unan leuriadek ; d'ar broadoù diazez e vije bet termenañ piv a vije bet keodedour ha kement-se a oa pouezus a-walc'h moarvat. Bez e c'heller soñjal eta e huñvree Erwan Berthou en ur stumm bennak a vonreizh kevreadel evit ar Stad c'hall. Hogen merkomp adarre ne c'heller ket jubenniñ ez pervezh an arroudenn-mañ. Pezh a c'heller notañ evelato eo ez isurzhié Erwan Berthou ar Stad d'ar gevredigezh peogwir e resize en diwezh :

"La Nation est une province de la race..."

E-lec'h-all e par ur meni enep-stadelouriezh ; tamall a ra ar skrivagner, da skouer, "le tout puissant et tout impuissant Etat collectiviste..."

Ar gevreadelezh-se e hiraetze dezhi a zo erbedet e lec'hiennoù all eus an hevelep levr pa glask Kaledvoulc'h termenañ un doare dereziadur etre ar "rannvro", ar gumun hag an tiegezh.

War un dro e kinnige Erwan Berthou, evel un uhelskouer, ar gevredigezh henvoazel vrezhon gant hec'h urzhaznatur a zo enebet ouzh urzhaz dinatur ar gevredigezh vodern (1). Sed avat pezh a ziskleir Erwan Berthou bepred ebarzh "Les vessies pour des lanternes" :

"Le patriarche doit être placé dans un milieu patriarcal. Existe-t-il une commune en France - exception faite pour la Bretagne - où le patriarche jouisse d'une autorité incontestée? Les mœurs patriarcales sont incompatibles avec le cosmopolitisme (2) ... Les campagnes ont vu s'écrouler leurs cadres familiaux et disparaître toute hiérarchie (3) ... L'unique hiérarchie n'est-elle pas aujourd'hui la hiérarchie officielle imposée par les gouvernements centralisateurs, royauté, empire, république..."

(1) War e lerc'h e kenneulo Emil Masson an "urzhaz santel" ebarzh "Les Iles bienheureuses" embannet e 1923.

(2) Emil Masson a ray kalz implij eus ar ger-se ivez.

(3) Hevelep implij eus ar ger-mañ ivez gant Emil Masson.

Hag Erwan Berthou da reiñ da skouer da Vreizh Bro-Japan hec'h unan a zo en em arvezet hep koll evit se hec'h henvoazioù.

(1). Hogen a-bouez eo ivez al lavarenn diwezhañ rak adkavout a reer enni enni unan eus pennaennoù divrall ar c'hentañ hag an eil Emsav : ar vrogarourion vrezhon a zle en em lakaat er-maez eus politikerezh diabarzh ar C'hallaoued ; kemeret er ster-se e kav deomp ez eo yac'hus ar bennaenn-mañ a reas berzh e-pad ouzhpenn tregont vloaz : "Na ruz, na gwenn..."

"Na ruz, na gwenn, disent les bardes : tenez-vous sur le terrain de la race..."

An emzalc'h-se a gase war-eeun d'ar vroadelouriezh. Evel-se eta ez echue levr Erwan Berthou gant un diskleriadenn a vroadelouriezh :

"Entre les rouges et les blancs qui ne se réconcilieront jamais il y a place pour la Nation bretonne (2) qui veut vivre et progresser..."

Pezh a rebeche Erwan Berthou dres ouzh K.B.B. e oa klask enkañ an Emsav er gostezenn dehoù gall, ar pezh na c'helle di-sochañ nemet da vougañ ar spered broadel. Hag Erwan Berthou a gloze neuze evel hemm :

"Le régionalisme parisien est en train de mourir d'une indigestion de carnaval (3) ; Le nationalisme est né..."

(1) Ret eo anzav ne chom ket kalz tra eus an henvoazelezh hiziv an deiz e Bro-Japan. Ar sevenadur ijinerezhel a zo reo'h da bep tra.
(2) War a hañval e kemer Erwan Berthou amañ ar ger "nation" er ster a vroad kemurzhiet er stad, en dro-mañ.
(3) Erwan Berthou a rae goap ouzh ar "Prince de Franconie" en em zic'hize e Breizhad.

NOTERN DIVAR-BENN BUHEZ HA STUMMADUR ERWAN BERTHOU

Ganet eo Erwan Berthou d'ar 4 a viz Gwengolo 1861 e Flouvihan (Tregener). E dad a oa un den eus ar bobl ha na ouie na lenn na skrivañ hag a oa a-hend-all un urvezher brezhonek. E vamm he doa tapet un tamm deskamant e kouent Landreger e-lec'h e oa chomet e-pad tri bloaz ; kalz yaouankoc'h eget he gwaz e oa ; menel a reas intañvez ken abred ha 1870 hag addimeziñ a reas ; Erwan Berthou ne oa d'ar mare-se nemet 9 bloaz.

Etre 1872 ha 1879 e reas Erwan Berthou st udiou etre e Kloerdi bihan Landreger. Goude bezañ desket ar vicher a vekaniker e Brelevenez, e Lamou, e verdeas war listri-brezel gall etre 1879 ha 1884. Neuze e kavas fred ebarzh embregerezhioù gall liesseurt e Rochefort, en Havr-Nevez, e Paris, ken na gemeras e leve e 1918, bepred en harlu eta, ma lakaer a ziforc'h an arnod da zistreiñ war ar maez e 1900-1901, e Nant-Kanaff, da zerc'hel atant e vamm; Klasket en doa ivez war un dro d'ar mare-se skignañ mennozhioù an Emsav e kornog ar vro o sevel TI KANERI VREIZHA yae a di da di, a gêriadenn da gêriadenn o kanañ kanaouennoù brezhonek d'an dud diwar ar maez. An arnod-se avat a droas d'ur c'hwitadenn hag ar barzh en devoa ranket distreiñ d'an harlu.

Gwashoc'h e voe c'hoazh stad ar skrivagner en e gozhni, goude ma voe deuet endo da Vreizh da vevañ en e gorn-bro genidik e 1918. Er bloavezh-se en devoa Erwan Berthou gwerzhet e vevreuri a oa deuet dezhañ diwar lerc'h e vamm evit ul leve hed-buhez. Siwazh, war ziwerzhdekaat ez eas buan ar mouneiz gall goude ar brezel bed kentañ ken en em gavas Erwan Berthou hag e wrag en dienez an duañ. Rankout a reas difocrañ e levracoueg hag e arrebeuri evit ur zenaouad bara ha degemer zoken an aluzen a veze graet dezhañ gant Taldin a-berzh ar varzhed.

Berr a-walc'h e oa deskadurezh Erwan Berthou ha n'oa ket aet kalz en tu-hont d'ar studioù etre ; a-c'houdevezh e teuas da vezañ skiantour-kalvezour, ijinour ha se a ziskleir perak e oa techet ivez d'an damkaniezhoù prederouriezhel-skiantel a seurt gant an hini a zo displeget ebarzh LEMENIK. da skouer.

Padal e voe dedennet Erwan Berthou abred a-walc'h gant al lennegezh, goude bezañ kejet gant ar skrivagner rannvroel Charles Le Goffic, Breizhad a orin, hag ur skrivagner gallek all Daniel de Venancourt en havr-Nevez ha diwezhatoc'h gant Léon Bloy e Rochefort. Da heul e savas Erwan Berthou un toullad skridoù gallek : "Coeurs bretons", da skouer, a zeuas er-maez e 1893 gant ur raskrid eus Charles Le Goffic end-eeun ; da c'houde e vualas "La lande fleurie" e 1894 ha "Les fontaines miraculeuses" hag "Ames simples" e ti Lemerre, embanner barzhoniezh c'hallek e Paris. Krouiñ a reas zoken en Havr-Nevez ur gelaouennig lennegel c'hallek a badas ur bloavezh bennak e 1897.

Pennad 14

Ar gelaouenn "AR VRO"

1904 - 1914

Ar gelaouenn "AR VRO" savet gant Taldir e 1904 evel stagadenn d'ar gazetenn AR BOBL a voe renet gant an hevelep skrivagner betek ar brezel 1914. Skridaozet e oa e brezhoneg penn-da-benn. Er penn-kentañ e oa dezhi ur vent vras, hini ur gazetenn, hanter bihanoc'h eget hini AR BOBL. Koulskoude, adal ar bloaz 1906, e miz Meurzh, e teuas da vezañ dishual ha kemer a reas ment vihan ar c'helaouennoù lennegel a viras ken nad eas da get e 1914 evel holl gelaouennoù an Emsav d'an ampoent. War un dro e oa bet kresket niver ar pajennoù hag izelaet ar priz anezhi (eus 14 real da 6 real ar bloaz evit "poblañ" (sic) ar gelaouenn-gelc'h war ar maez" a lavared deomp en niverenn 24 eus miz C'hwevrer 1906). E niverenn miz Meurzh ez asured deomp a-hend-all "ne vezo mui tra ur 500 bennak a goumananterion feal ha madelezhus e ti gwerzherion AR BOBL". Daoust da seurt embannadennoù n'eo ket sur e vije kresket a-walc'h niver ar goumananterion evit tizhout hini KROAZ AR VRETONED (6.000 pe 7.000 skouerenn a veze tennet eus houmañ) rak bihanaat a reas niver he fajennoù dre ma tremene an amzer ken n'he devoe mui nemet 8 pajennad e-lec'h 16 er penn-kentañ ; diaes eo gouzout ha kiriek e voe d'an diskar-se kresk ar mizoù moulañ - hogen e ti AR BOBL, perc'hennet gant Taldir e veze moulet - pe neuze an diouer a skrivagnerion (war-dro 1910-14 e krog ar renerion gelaouennoù brezhonek da glemm diwar-benn an dienez a skrivagnerion).

Peseurt talvoudegezh ha peseurt ster he devoa AR VRO ? Hervez a skrive Taldir e uan e oa mennet ar gelaouenn da gemer lec'h SPERED AR VRO ha na oa deuet er-maez nemet e-pad un nebeut mizioù (e gwir, ne oa ket aet en tu all d'ar pedervet niverenn).

Taldir a-hend-all a roe d'e gelaouenn an hevelep mennad lenneget a oa d'an diaraogerez anezhi ; ne rae ket politikerezh nag a-gleiz nag a-zehoù (hemañ oa diskan Taldir hag an Emsav kentañ dre vras). A-hend-all, setu embann Taldir en niverenn gentañ :

"AR VRO n'eo na Bleiz na Montfort ; he gerioù-stur a zo : Gloar Doue, Eñor Breizh, kreskadurezh, deskamant ar Breizhad dre ar brezhoneg..."

Ha pelloc'h ez ouzhpenn :

"Neb na gerzh ket a souz ; neb na stourm ket a vo kannet... Bez ez eus da labourat evit sevel hon yezh war renk ar yezhoù kaer ha pinvidik a gelaouenn anezhi..."

Evel ma weler er raskrid a-hend-all ha petra bennak ma asure Taldir ne oa AR VRO na "Bleiz" na "Montfort" e chome ar gelaouenn doujus d'ar gristeniezh : e miz Meurzh 1906 e roe da c'her-stur d'ar gelaouenn "Doue hag ar Vro". Met en ur vroad a oa neuze kristen evit 90% eus ar boblañs ne denne ket ur seurt emzalc'h da duiñ d'ur gostezenn bennak. E devoud, meur a stourmer eus ar gostezenn "gleiz" a skrive ivez ebarzh ar gelaouenn. O anvioù a gaver war roll kenskrivagnerion AR VRO en niverenn-se a viz Meurzh 1906, dres, da skouer, hini Gwennou (Emil Masson) hag Ar Bruget (Jos ar Bras) a skrivas dresit-holl ebarzh BRUG. Un doare unvaniezh a rene en Emsav d'ar mare-se eta.

Padal ez eo sklaer e klaske Taldir - evel ma oa ar c'hiz d'ar prantad-se - dedennañ gouviaded ha pennoù bras ar gevredigezh vreizhat a neuze. E poellgor-paeroniañ ar gelaouenn en em gave kichen-ha-kichen ar "Prince Ferdinand de Lucinge-Faucigny", ar "Marquis de Kerouartz", an itron de Kervenonael, an aotrou 'n eskob Dubourg, an itron Mosher (un Amerikaner - pinvidik-a orin breizhat), hep kontañ kannaded e-leizh. Ar re-se, e gwirionez, a oa perzhiek er gevredigezh c'hall ha dre se e oa diaes d'ar gelaouenn bezañ dieub da heuliañ ur politikerezh gwir vroadel.

Holl skrivagnerion an amzer-se (ar re a zo meneget end-eeun ebarzh "Eñvorennoù ur brezhonegour" eus F. Vallee) a gase skridoù d'ar gelaouenn. Ar roll anezho a c'heller lenn bepred ebarzh niverenn viz Meurzh 1906. Notomp evelato e kenlaboure

skrivagnerion Wened ivez gant Taldir (evito da vezañ distank a-walc'h evelato : seizh anezho en holl, e-keñver niver ar skrivagnerion eus ar rannvroioù arall, tri-ugent anezho). Darn eus ar re-se a-hend-all n'o devoa savet biskoazh nemet un tamm barzhoneg bennak en hor yezh, da lavarout eo un tamm skrid bennak e yezh-plaen rimet (tost an hanter deus ar gelaouenn a oa gouestlet 'ar "varzhoniezh"). Holl ivez e oant brezhonegerion a-vihanik, hag an darn-vuiañ anezho o chom war ar maez. Un nevezvrezhoneger bennak a gaved evelkent en o zouez : Tiercelin, rener ar gelaouenn lenneget e galleg "L'hermine", eus Dinarzh, ha Mataliz - Jord ar Rumeur - ganet e Filger a genskrive en holl gelaouennoù breizhat an amzer-se. Barzh kefridiel ar Strollad broadel kentañ e oa hemañ ha barrek dreist-holl da aozañ sonedennoù.

Er penn-kentañ e oa dibaot ar goumananterion ; ned ae ket o niver en tu-hont da 276. En o mesk avat - nemet un tregont labourer-douar hag ur marc'hadour red ne oa den ebet eus ar bobl. Gouviaded a oa eus ar re all, "perc'henned", - ugent maer en o zouez - ha neuze kefredourion pe vourc'hizion vihan : apotikerion, kelennerion, alvokaded, un 'tailhanter" ha zoken archerion pe sarjantad, hep kontañ eveljust ar veleion. Padal ez eo ret anzav ne gaver war ar roll anv uhelgefredour ebet, nemet hini René Le Roux, "agrégé des Lettres" o chom e Paris (hemañ, a-hend-all n'en doa netra da welout gmoarvat gant ar René Le Roux all, Neven Mordiern).

Peseurt amkan a lakae AR VRO dezhi hec'h unan ? ne oa nemet unan sevenadurel, evel maz eo anat diouzh an arroudenñ hon eus meneget uheloc'h : "Kreskadurezh, deskamant ar Breizhad dre ar brezhoneg..." - "Sevel hor yezh war renk ar yezhoù kaer ha pinvidik a gelaouenn anezhi..." Ar mennad-se moarvat a oa awenet dreist-holl gant skouer Gembre. Leon ar Berr, en niverenn 1 eus miz Meurzh 1904, a skrive ul lizher eus an tu all d'ar mor (1) hag en eil niverenn ez erbed treiñ an "tiez paeroniaj" e Breizh da "skolioù sul" - "egiz hor c'hengouenniz Kembreiz..." (2)

(1) E gwirionez edo o chom neuze e Dulenn evel kelenner galleg.
(2) Ar skolioù sul - skolioù kateliz - o devoa desket da Gembreiz lenn yezh ar Beibl en triwec'hvet kantved.

Skolioù divyezhek Kembre a hañvale bezañ ur baradoz ; lidañ a raed gouelioù Sant-Dewi ha Sant-Padrig ha keloù a roed diwar-benn ar "Gevredigezh hollgeltiek" ; moulañ a raed ur roll-gerioù kembraek-brezhonek (1) ; a-hend-all he devoa ar gelaouenn da ganskriver Lionel O Doherty Radiguet (2) ; hag eveljust, bez e roed stlenn diwar-benn kement bodadeg keltieka veze dalc'het e lec'h pe lec'h da skouer, diwar-benn kendalc'h "hollgeltiek" Caernarfon h.a.

§§§§§§§§§§§§§§§§

War boentoù all estreget an darempredoù etrekeltiek ne hañval ket Taldir bezañ heuliet ur politikerezh resis. Dalc'h e aviel politikel a oa ur frankizouriezh diouzh giz Breizh-Veur ha prest e oa bepred da blegañ d'ar benmaenn-se en e gelaouenn, zoken evit reiñ ar gomz d'ar re na oant ket ali gantañ. Kement-se a c'helle ivez bezañ un tu da virout e goumananterion a oa evit ar pep brasañ anezho Dehouiz c'hall ha n'o doa, moarvat, uhelvennad broadel brezhon ebet.

Ma oa nevez ha dispac'hel an distro d'ar geltiegezh tramor - diouzh ma pellae, evel m'hon eus merket, Breizh diouzh gwall levezon sevenadurel Bro-U'hall ne oa ket feuls tamm ebet, dre vras, politikerezh Taldir diwar-benn ar yezh. Evel nouspet brezhon war e lerc'h e c'houlenna "Ar brezhoneg er skol" digant ar gouarnamant gall. E niverenn miz Genver 1910, da skouer, e oa anv eus ar c'hammedoù graet gant ar gannaded vreizhat e Paris evit "ma vije digoret dorioù ar skolioù d'ar brezhoneg..." Lezenn gCombes (3) a-enep d'ar yezh ne oa ket dilamet petra bennak n'oa ket mui danvez dezhi abaoe an Disparti. Al lezenn-se, hervez AR VRO, he doa unanet ar yezh hag ar Feiz hag hervez ar gelaouenn bepred e oa diskar al lezenn-se koulz ha reiñ an trec'h war un dro d'ar yezh ha d'ar Feiz. Ar pal-se eo a felle d'AR VRO tizhout

(1) Diwar zorn F. Vallee e oa al labour-se. Embannet e voe da c'houde e stumm ul levr, goude ar brezel kentañ, a gav din.
 (2) Merket hon eus perak e-lec'h-all : evit lakaat labourerion Vreizh war ziwall ouzh koryoerezh divezhet embregourion kanol-vor Panama a glasse e Breizh danvez sklaved gant bennoz ar gouarnamant gall a neuze.
 (3) Difenn a rae al lezenn-se ouzh ar veleion vreizhat ober gant ar brezhoneg er gadorbrezeg hag er c'hatekiz, dindan boan a goll ar gopr o deveze neuze digant ar Stad c'hall.

hag o komz eus e gelaouenn e tisklerie Taldir bepred en niverennoù kentañ : "Gant houmañ (AR VRO), Komb (sic), ho pezo da ober... lezel a ray roudoù he skilfoù war dal enebourion ar brezhoneg hag ar Feiz..." (4 a viz Mezheven 1904).

Estreget kelennadur ar yezh er skolioù a erbeded evit saveteiñ ar "sevenadur" brezhon : ar gouelioù broadel ivez, egiz re ar broioù keltiek all, na petra ! En niverenn 16, Mezheven 1905 e lenned kement-mañ :

"Er bloaz 1897, Bro-Iwerzhon a adsave ar "Feis Ceoil" ; bro ar Skoz, he "mod" ; bro Geumri a zalc'he d'hec'h "Eisteddfodau" ; Breizh-Izel a save "Kevredigezh broadus Breiz" (1).

Diwezhatoc'h ez emdroas meizadur ar stourm evit ar yezh, bepred avat dindan levezon Kembre pe Iwerzhon. Da skouer, e miz Mae 1912, e roer da batrom da stourmerion Vreizh ur vreuriezh kembreat he doa kemeret da amkan lakaat Kembreiz da c'hrataat komz bepred ar yezh (2). Ha Loeiz ar Floc'h, "Bodiliz", e miz Gwengolo 1913, a daelem ar strolloù brogarourion-se a glask adober e Breizh ar pezh a rae poadred ar "O'hevre gouezelek" en Iwerzhon :

"Bep sul, an dud vat-se a ya en ur barrez bennak, a zastum endro dezho bugale hag a zesk dezho skrivañ ha lenn en yezh o zadoù kozh..."

Kont a zo amañ eus "Kendirvi Breizh-Izel" koulz hag eus ar "breuriezhoù ar brezhoneg" a glasse d'ar c'houlz-se deskif lenn ar brezhoneg d'ar vugale war ar maez e kornog ar vro. Hogen ar pezh a zo da verkañ e ser ar stourm evit ar yezh, n'eo ket hepken an doareoù anezhañ hogen ar spered hag an awenadur anezhañ : hemañ a chom triyliadel da gentañ evel m'en diskouez an troioù-lavar implijet.

"Ar c'hazetennoù a embann brezhoneg," a lavar Bodiliz, "rak tizhout a reont kalonoù ar vugale ez yaouank..."

(1) E gwirionez, ar Bleun-Brug an hini eo a zleez klotañ gant an "Eisteddfod". Hogen er bloaz-se end-eeun e voe savet ha ne c'helle ket Taldir e venegiñ.
 (2) En Iwerzhon eo e voe diazezet ur-gevredigezh seurt-se, hini ar "Dainne" ; an izili anezhi a doue war o le komz iwerzhoneg bepred ouzh ar re a zougje un arouez a oa ur walenn aour ("Faimne"). Diwar he skouer e voe savet "Breuriezh an Trec'h" e Breizh etre an daou vrezel.

Hogen an drivliadelezh-se en em ziskouez en he splannañ en ur pennad eus an niverenn (bloavezh kentañ, e miz Eost 1914, a zo e dalbenn "Ar Sovetaerion" e-lec'h e kinniger da batrom an denelezh wirion ar Brezhon pe kentoc'h ar Vrezhonez diwar ar maez e Kornog ar vro.

"Den ar c'hêrioù," a lavar deomp ar skrivagner da gentañ, "n'eo ket un den nerzhus..."

hag enebañ a reer ouzh ar c'hêriad-se kollet gantañ pep emreizh warmañ e unan, bepred o tifranañ hag o tifretañ

"difinivadurezh ha peoc'h sioul ar Brezhonezed-se leun a drelavarioù..."

Ha pelloc'h e peurliver an daolemn eus ar santezed-se :

"Ar gvragez-kozh-se a welen bremaik war o daoulin hag o daoulagad ken peoc'hus dindan ar c'hoefoù..."

Hag evit echuiñ ez asuro ar skrivagner ez eo divarvel ken kaer ur sevenadur :

"Bro ar baotred hag ar merc'hed-se ne c'hell ket mervel..." (1)

Ar mennoziou-se ne oant ket re skrivagnerion ar VRO hepken ; lodet e oant gant ar pep brasañ eus an Emsaverion gentañ ha, pergen, e kejer ganto e pajennoù ar gelaouenn BRUG embannet gant Emil Masson ha dre vras e skridoù Emil Masson ; an holl stourmerion-se a lakae e piaoù ar werin e "Breizh Izel" perzhioù an den skouerel (egiz "narodniki" Rusia d'an ampoent).

§§§§§§§§

Setu, dre vras eta, penaos e komprened ar stourm evit ar yezh er gelaouenn-mañ. Ne empenned eviti dezvad ebet en tu-hont d'an divyezhegezh daoust ma tebarzhed dezhi un dalvoudegezh hud koulz lavaret. Diwar-benn politikerezh dre vras adarre ne oa ket gwall orinel mennoziou ar gelaouenn. Tagañ a raed ar Republik evel ma raed neuze e-touez kelc'hiadurioù ar gostezenn dehoù gall pe ar voure'hizion vihan. Lakaet e veze ar Frañmasoned kiniek da gement gwall a c'hoarveze war dachenn ar Stad c'hall : "AR marmouzion a renk uhel anvet frañmasoned..."

(1) Notomp ez eo troet ar pennad-mañ diwar ar galleg

A-hend-all ne greded ket goulenñ kalz muioc'h er gelaouenn-mañ eget diskar ar "greizadeg" ; en "digreizadeg" edo ar silvidigezh eta. Hogen tres mennoziou ar vourchiziezh vihan dishual a oa gant an arguzennoù implijet evit prezeg an "digreizadeg" ; un tu e tlee bezañ da "vihanaat niver an dud e karg" ha da "spern arc'hant Frañs gwall voull abae ur pennad..."

Padal ne oa ket an Emsav - pell edo zoken - lodek penn-da-benn e mennoziou ar gostezenn dehoù gall. Paotred an danvez roue gall, egiz ma ouzer, a oa enebet, er c'hontrôl, ouzh an Emsav hag e niverenn miz Ebrel 1908, dres, e veneger komzoù un tad Dom Berse "prezeger a-du gant kostezenn ar Roue da zont" ha na oa ket gwall dener evit ar "gwir Vrezhonez" pa oa bet oc'h ober ur brezegenn e kêr Sant-Brieg. Seloaoump avat ar c'helaouenner :

"Lavaret en deus : ar Breizhad, an hind en deus miret e yezh, a zo un huñvreer. Gwelout a reomp anezhañ oc'h en em goll en holl soñjezonoù goull, evel ar "celtisme" pe an "démocratie"..." (2)

Kemm a reas mennoziou ar gelaouenn tamm ha tamm ha gwiskañ liv ar vroadelouriezh. Al lennerion pe ar genlabourerion o devoa ar muiañ poan da zegemer ar mennoziou nevez avat a oa, eveljust, ar re a oa deuet d'an Emsav war an diwezhadou pe a oa bet stag pell amzer ouzh ar Framm gall (2). Hogen daoust d'ar re-se e tiwanas ar spered broadel a nebeudoù, evel ma verkemp, er gelaouenn, adal 1908 dreist-holl, dindan pluenn un istorour genidik a rannvro Wereg, Buleon (3). Hemañ a skrive e miz Ebrel 1908 :

"Ar bobl vreizhat a zo ur bobl kabestret hag huallet gant lezennoù ha mennoziou ostren ha ma ne ro ket d'ar bed ar pezh a vez hemañ o c'hortoz digantañ, ar gwall n'emañ ket en diabarzh met en diavaez..."

(1) Damveneg eus afer ar "Sillon" e Leon moarvat.
(2) Yann ar Fusteg dreist-holl ha Kaledvouc'h e-pad ur pennad. Ar re-mañ a huñvree kemer ar galloud e ... Paris, egiz Lloyd George e Lunden! Kembreiz a ouarn Bro-Saoz a skrive Kaledvouc'h hep c'hoarzhin Ha pelloc'h : "Un deiz bennak e vo gwelet Brezhoned Breizh Vihan ... o ouarn Bro-C'hall en despad d'an ezen gornek..."
(3) Aczet en doa un Istor Breizh e Brezhoneg penn-da-benn.

Goude bezañ tamallet an dud "falskredik" ha na fell ket dezho degemer ez eo Breizh ur vroad ez ouzhpenn ar skrivagner :

"An amzer-da-zont a ziskouezo penaos, a-benn dont a-benn da sevel chadennoù merglet ken pommer hag ar re a vouge anezhi, n'eo ket ur bugel e oa ar bobl vreizhat hogen ur c'haour (1) hag un haroz..."

Taeraat a ray ar vroadelouriezh-se a-c'houdevezh, moarvat dindan levezon ar Strollad broadel kentañ a voe savet e 1911. D'ar mare-se end-eeun, e miz Mae 1911, e c'helled lenn al linemnoù-mañ, ken kriz hag ar re a c'heller lenn ebarzh "reiz Atao" un nebeut bloavezhioù war-lerc'h :

"Gwasket eo Breizh," eme aozer ar pennad, (3)
"d'un toullad mevelion paet gant ar Frañz-se..."

Hag evit echuiñ e ra "bourrevion" eus ar C'hallaoued a heskine ar brezhoneg en amzer-se.

"Ar yezh-se," emezañ e sigur ar brezhoneg, a zo disprizet, argaset, goapaet gant hor bourrevion..."

Ar spered broadel-se - ne c'heller ket komz e gwirionez eus politikerezh broadel d'ar c'houlz-se, zoken gant ar Strollad broadel - a aweno mui pe vui ar gelaouenn diwar neuze. E miz Mezheven 1913, da skouer, e pouezed war liesseurtiezh ar broadoù a oa bet enklozet e diabarzh harzoù ar 'tad c'hall:

"Ha bremañ, petra a welomp ? Ur strollad broioù bihan, ken disheñvel en o memoziou evel en o ezhommoù, doareoù disheñvel evito d'arruout betek an evumsted dre ar binvidigezh, al lizheradur hag ar c'hredennoù..."

Hogen un arliv nevez a oa stag a-benn neuze ouzh ar vroadelouriezh-se a wisko muioc'h-mui ur stumm gwerinel ; rak

(1) "Ramz". Ar ger "kaour" amprestet digant ar c'hembraeg en e stumm orin - "keur" e vije bet e brezhoneg ma vije chomet er yezh a adkaver betek e skridoù Maodez Glandour ebarzh IMRAM.

(2) Gouzout a reer e voe "aldir tuet mat a-walc'h d'ar Strollad Broadel kentañ, a oa gwerinel a-walc'h, tra ma oa enebet ouzh luskad An Diberder.

(3) L.N. Le Roux a oa, war a seblant, an aozer-se. Gallus eo e vije bet heññ "barzh" ivez peogwir e tispleg e-lec'h-all diwar beseurt divizoù e c'hell unan bezañ barzh.

ar werin an hini eo a c'houzañv ar muiañ diouzh mac'homerezh ar galloud gall e Breizh, dizifenn a-grenn ha maz eo. Er pennad-mañ, savet marteze adarre gant L.N. Le Roux pe Jos ar Bras e tizerzer moarvat savboent ar vrogarounion o doa krouet "Breiz Dishual" ha "Brug".

"E gwirionez, petra int, tud ar bobl izel e Vreizh ? Netra nemet korfoù da labourat, dallet dezho o spered en ur nac'h outo ar voien d'en em servijout eus o yezh evit o aferioù hag o deskadurezh..."

Moarvat, evel ma weler hag evel maz eo kaer gortoz, e chom ar sellboent-se gwerinelour ha breizhizelat hogen n'eus mar ebet e oa emdro'et ar gelaouenn-mañ - eviti da vezañ nann-politikel a-hervez - war-du ar vroadelouriezh.

Ouzhpennomp en em lec'hie AR VRO e framm Emsav ar broioù gwasket gant an impalaerelouriezh c'hall pe saoz er rannvedoù tramor : Transvaal, Aljeria, Indez, Tonkin a zo anvet er gelaouenn-mañ ha c'hoarvezout a ra gant Gloada Kergadiou keñveriañ Breizh-(Izel) ouzh Polonia : "daoust ha n'omp ket breset dindan treid ar C'hallaoued?"

§§§§§§§§§§§§§§§§

Hogen broadelouriezh ar gelaouenn n'he deus ket gwisket hepken doare ar bruderezh evit keal an dishualded, hini ar stourm evit ur yezh diorreet hag arnevezet, gouest da gevezañ ouzh ar yezhoù europat all a sevenadurezh, ne lavaran ket.

Moarvat ne oa ket "aldir e unan penn o kas war-raok ar stourm-se. "Reunan ar Rouz", "actreet war al lizhiri", ha F. Vallee en em gave e-touez kenlabourerion ar gelaouenn hag adal an niverenn gentañ e voe moulet rolloù-gerioù nevez ijinat gant an daou sturyezhour-mañ. Setu amañ skouerioù a-hend-all :

"Isdouaroniezh (1), kenblanedem (2), divroderezh (3), unanroderezh, kelc'henlec'h (4), morroderezh (5) bloaziadus..." / AR VRO, 3, Mae 1904 /

Hag e miz Kerzu 1904, Nn. 10 :

"Fraezhoneg (6), eunskriv (7), eunskrivañ, maenskriz, bezskrid (8), mell-houarn (9), delienn (10), enebenn (11) gloazva (12), denoniezh, atavelezh..."

(1) Douarouriezh pe tironiezh. (2) Loarigan. (3) Marc'h-houarn. (4) Linenn ar c'helc'h. (5) Lestr brezel herrek. (6) Prezegerezh, diwar ar c'hemb. (7) eizhskrivadur. (8) "Epitaf" (9) Obuz. (10) Amañ, "follem". (11) Pajenn (12) Lec'h da zaññ an dud gloazet.

Goude bezañ tamallet an dud "falskredik" ha na fell ket dezho degemer ez eo Breizh ur vroad ez ouzhpenn ar skrivagner :

"An amzer-da-zont a ziskouezo penaos, a-benn dont a-benn da sevel chadennoù merglet ken pommer hag ar re a vouge anezhi, n'eo ket ur bugel e oa ar bobl vreizhat hogen ur c'haour (1) hag un haroz..."

Taeraat a ray ar vroadelouriezh-se a-c'houdevezh, moarvat dindan levezon ar Strollad broadel kentañ a voe savet e 1911. D'ar mare-se end-eeun, e miz Mae 1911, e c'helled lenn al linennoù-mañ, ken kriz hag ar re a c'hellor lenn ebarzh "reizh Atao" un nebeut bloavezhioù war-lerc'h :

"Gwasket eo Breizh," eme aozer ar pennad, (3)
"d'un toullad mevelion paeet gant ar Frañz-se..."

Hag evit echuiñ e ra "bourrevion" eus ar C'hallaoued a heskine ar brezhoneg en amzer-se.

"Ar yezh-se," emezañ e sigur ar brezhoneg, a zo disprizet, argaset, goapaet gant hor bourrevion..."

Ar spered broadel-se - ne c'heller ket komz e gwirionez eus politikerezh broadel d'ar c'houlz-se, zoken gant ar Strollad broadel - a aweno mui pe vui ar gelaouenn diwar neuze. E miz Mezheven 1913, da skouer, e pouezed war liesseurtiezh ar broadoù a oa bet enklouzet e diabarzh harzoù ar stad c'hall:

"Ha bremañ, petra a welomp ? Ur strollad broioù bihan, ken disheñvel en o mennozioù evel en o ezhommoù, doareoù disheñvel evito d'arruout betek an evumsted dre ar binvidigezh, al lizheradur hag ar c'hredennoù..."

Hogen un arliv nevez a oa stag a-benn neuze ouzh ar vroadelouriezh-se a wisko muioc'h-mui ur stumm gwerinel ; rak

(1) "Ramz". Ar ger "kaour" amprestet digant ar c'hembraeg en e stumm orin - "keur" e vije bet e brezhoneg ma vije chomet er yezh a adkaver betek e skridoù Maodez Glandour ebarzh IMRAM.

(2) Gouzout a reer e voe "aldir tuet mat a-walc'h d'ar Strollad Broadel kentañ, a oa gwerinel a-walc'h, tra ma oa enebet ouzh luskad An Diberder.

(3) L.N. Le Roux a oa, war a seblant, an aozer-se. Gallus eo e vije bet hemañ "barzh" ivez peogwir e tispleg e-lec'h-all diwar beseurt divizoù e c'hell unan bezañ barzh.

ar werin an hini eo a c'houzañv ar muiañ diouzh mac'homerezh ar galloud gall e Breizh, dizifenn a-grenn ha maz eo. Er pennad-mañ, savet marteze adarre gant L.N. Le Roux pe Jos ar Bras e tiverzer moarvat savboent ar vrogarourion o doa krouet "Breiz Dishual" ha "Brug".

"E gwirionez, petra int, tud ar bobl izel a Vreizh ? Netra nemet korfoù da labourat, dallet dezho o spered en ur mac'h outo ar voien d'en em servijout eus o yezh evit o aferioù hag o deskadurezh..."

Moarvat, evel ma weler hag evel maz eo kaer gortoz, e chom ar sellboent-se gwerinellour ha breizhizelat hogen n'eus mar ebet e oa emdroet ar gelaouenn-mañ - eviti da vezañ nann-politikel a-hervez - war-du ar vroadelouriezh.

Ouzhpennomp en em lec'hie AR VRO e framm Emsav ar broioù gwasket gant an impalaerelouriezh c'hall pe saoz er rannvedoù tramor : Transvaal, Aljeria, Indez, Tonkin a zo anvet er gelaouenn-mañ ha c'hoarvezout a ra gant Gloada Kergadiou keñveriañ Breizh-(Izel) ouzh Polonia : "daoust ha n'omp ket breset dindan treid ar C'hallaoued?"

\$\$\$\$\$\$\$\$\$\$\$\$\$\$\$\$

Hogen broadelouriezh ar gelaouenn n'he deus ket gwisket hepken doare ar bruderezh evit keal an dishualded, hini ar stourm evit ur yezh diorreet hag arnevezet, gouest da gevezañ ouzh ar yezhoù europat all a sevenadurezh, ne lavaran ket.

Moarvat ne oa ket "aldir e unan penn o kas war-raok ar stourm-se. "Reunan ar Rouz", "aotreet war al lizhiri", ha F. Vallee en em gave e-touez kenlabourerion ar gelaouenn hag adal an niverenn gentañ e voe moulet rolloù-gerioù nevez ijinet gant an daou sturvezhour-mañ. Setu amañ skouerioù a-hend-all :

"Isdouaroniezh (1), kenblanedem (2), divroderez (3), unanroderez, kcalc'henlec'h (4), morroderez (5) bloaziadus..." / AR VRO, 3, Mae 1904/

Hag e miz Kerzu 1904, Nn. 10 :
"Fraezhoneg (6), eunskriv (7), eunskrivañ, maenskriz, bezskrid (8), mell-houarn (9), delienn (10), enebenn (11) gloazva (12), denoniezh, atavelezh..."

(1) Douarouriezh pe tironiezh. (2) Icarigan. (3) Marc'h-houarn. (4) Linenn ar c'helc'h. (5) Lestr brezel herrek. (6) Prezegerezh, diwar ar c'hemb. (7) eizhskrivadur. (8) "Epitar" (9) Obuz. (10) Amañ, "follenn". (11) Pajenn (implijet gant Vallee en e enverrennoù). (12) Lec'h da zastum an dud gloazet.

Moarvat, an tri-c'hard eus ar gerioù-mañ n'int ket chomet er yezh ha darn anezho zoken n'int bet implijet ebarzh skrid ebet. Hogen div evezhiadenn a c'heller ober en o sigur. Da gentañ, klask a rae Meven Mordiern ("Reunan ar Rouz") keltiekaat ent reizhiaddek kement ger arnevez a c'helled kaout ezhomm anezhañ ("mell-houarn" evit "obuz", da skouer) (1); a-hend-all, war a seblant, ez eo bet goveliet ar gerioù-mañ gant F. Vallee dreist-holl, rak tres ar gresianeg a ziaweler er gerioù brezhonek ("eeunskriv", da skouer) pe c'hoazh, hini ar c'hembraeg ebarzh "fraezhoneg" ha n'eo nemet un eiltres eus "fraethoneg". Bezet pe vezet, pezh a ranker derc'hel soñj anezhañ eo e oa mennet Meven Mordiern ha Frañsez Vallee da grouñ ur yezh keltiek rik ha ken pinvidik hag ar c'hembraeg a chome neuze patrom ar yezh.

Evel ma verkemp diouzhtu, adarre oa bet kemeret Kembre hag ar c'hembraeg da batromoù. War-dro ar c'houlz-se en devoa F. Vallee e oberenn "Gerioù keumraek ha brezhonek" hag "Etymologies bretonnes" e-lec'h e lakae ar pouez war orin keltiek - elese, kembraek - ar gerioù brezhonek. Taldir e unan a oa a-du gant ar politikerezh yezhel-se. peogwir e skrive en niverenn 1 eus miz Meurzh 1906 :

"Imposupl (sic) eo d'ur Breizhad anaout mat e vamm-yezh ma ne oar ket ar c'heumraeg... amprestañ digant ar c'heumraeg kentoc'h eget digant ar galleg /a zo/ dereat ouzh hor spered broadus..."

Padal e roe Taldir, na petra, ar roll kentañ d'ar skrivagnerion - kentoc'h eget d'ar c'hramadegourion - e diorreadur ar yezh.

Daoust d'ar pezh a c'hellfed krediñ ne oa ket degemeret ar mennozioù-mañ gant kalz skrivagnerion end-eeun. An darn-vuiañ anezho - a oa beleion, n'ankouamp ket - a venne skrivañ evit ar bobl dizek ha n'oant ket e chal da binvidikaat ar yezh na kennebeut all d'he glanaat. Evit ar re-se eo e skrive Taldir ar pennad-mañ war ar VRO e 1906 dindan an talbenn "Ar brezhoneg kozh" :

(1) Albac'henn ar glaryezhañ - evit ar gerioù pemdeziek - a badas pell a-walc'h. Gerioù a zo bet ijinet evit "alumetez", da skouer. Ebarzh "Seizh vloaz e bro ar Vorianed", ivez. e kaver Gerioù seurt se e-leizh; an "toazennou" a zo troet da "vuz'ug-kleuz", da s skouer.

"Lavarout a rit, kenvroad enorus, n'hoc'h ezhomm aluzen ebet na digant Saoz na digant Gall. Holla ! Aze e talc'han ac'hanoc'h a-sav: n'eo ket gwir. Ma fell deoc'h mirout ar brezhoneg evel ma vez komzet koulz e Menez Are hag er Menez Du, evit c'hwi a ranko, sur, degemer meur a c'her gallek evel "madoù spiritual ha temporel" ("speredus, korfus") hag evel-se o klask herzel diwar ur skoasell dañjenn (sevel gerioù nevez), c'hwi a gouezho war ho fri en ur poull dañjennoc'h c'hoazh (kaout ur yezh bastard). Hag evit klozañ un disput bet re hir, lavaromp kement-mañ : daou vrezhoneg a zo hag a zle bezañ, evel maz eus daou seurt galleg, daou seurt saozneg, daou seurt kembraeg : an hini poblus, an hini a gomzer bemdez hag an hini a skriver hag a brezege. Evel-se emañ kont dre-holl, e Breizh evel e-lec'h-all..."

E gwirionez e klot mennozioù ar pennad-mañ gant ar re a vo eztaolet gant rener GWALARN ugent vloaz war-lerc'h, e niverenn gentañ ar gelaouenn, nemet e oa taeroc'h ar stumm evelato.

Glanded ha pinvidigezh, sed eta an amkanioù a oa merket d'ar skrivagnerion : "Laoskomp a-gostez kement ger behini n'eo ket a ouenn geltiek," a skrived ebarzh niverenn miz Mae 1906 hag e niverenn miz Gwengolo ar memes bloavezh e vretae rener ar gelaouenn gant ar gwenedour ar Goff e ser krouidigezh gerioù nevez. Setu a-hend-all pezh a skrive Taldir adarre :

"Ar Gonideg, petra bennak n'en deus savet ur geriadur kaer a zo chomet kalz da ober war e lerc'h c'hoazh ; ar Gonideg ha Troud, pa gavent e galleg ur ger diaes da rentañ e brezhoneg, a gemere div wenedenn treuz o div : lammat dreist ar ger diaes pe reif evit treiñ anezhañ un hanter douzennad gerioù... Berr ha sklaer, setu eno, d'hor soñj, petra a zle bezañ ar yezh sevenet ha skrivet reizh..."

Hag er bloavezh war-lerc'h e kendalc'has Taldir da damall ar re

"a zalc'h d'ar brezhoneg evel ma talc'her d'ur c'hozh bragoù kozh, abalamour m'eo tommoc'h... Nann," eme ar skrivagner, "ar brezhoneg a rank perc'hennañ kement doare-komz en deus ar galleg pe ar saozneg..."

Hag ouzhpennañ a ra :

"An hini na gar ar brezhoneg nemet paour
ha noaz a rafe gwelloc'h bezañ krak a-du
gant ar galleg. ."

Hag eñ da bouezañ adarre war ar ret maz eo kaout
ur yezh c'hlan, distroet da "wrizioù ar c'heltieg pere a zo barrek
da sevel kement a c'herioù hag al latin hep mont d'astenn an dorn
pe da lavarout dek frazenn e-lec'h unan..." Gouest eo ar brezhoneg
ivez "d'en em sevel dre e nerzh betek uhelderioù an traoù amgorfek..."

(1). Heverk eo ar mennoz a zo estaolet da heul dre ma rakkemenn
an hini a vo displeget a-c'houdevezh gant Roparz Hemon e unan
ebarzh e levr "Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh" pa assure e oa
d'ar menezioù dont d'aveit ar re o galve kentoc'h eget d'ar
c'halverion mont davet ar menezioù :

"D'ar re a oar mat ar brezhoneg hag e wriziennoù
eo da eeunañ spered ar bobl betek sevel anezhi
d'o heul a-dreuz da gement mennoz-den a c'hall
goññ ar kiant ; n'eo ket d'ar brezhoneg eo da
blegañ bepred betek ar bobl dizek... Esperomp
e teuo ur mare hag e vezo intentet gant ar ve-
leion penaos ar brezhoneg ne rank ket bezañ
kemeret evel ur skeul da ziskenn betek ar bobl
izel met evel ur benveg meurbet gwevn ha kaer
da dreiñ war an tu mat an holl Vrezhoneg hep
kemm ebet en o ginivelezh pe en o galvedigezh..."

(2)

Er pennad-mañ e hañval Taldir eta mont kalz pelloc'h
eget un darn vras eus stourmerion e amzer, Emil Masson zoken, ur
c'hefredour hemañ koulskoude a gomze hag a skrive e galleg hag a
seblante a-hend-all ober eus ar yezh un doare ti-bac'h mennet da
virout glanded vuhezal pe relijiel ur werin vesiazal ; Taldir, en
eneb, en e gelaouenn atav, a felle dezhañ ober eus ar brezhoneg
benveg buhez veizel ha sevenadurel ur bobl atebek ha gouest da
c'hoari er bed ar roll en doa ranket dilezel abaoe ma oa bet
lamet diganti pep dishualded ha pep frammadur stadel ha politikel.

Dav eo stadañ koulskoude n'eo ket deuet er-maez ebarzh
AR VRO end-eeun ar skridoù pouezus o dije lakaet da dalvezout ar pe
pennaennoù a oa displeget er gelaouenn. An NOTENNOU, da skouer,

(1) "Difetis". En hevelep kelaouenn ez eo implijet gant ar ster-se
"dilavar" ha diheverzh" a badas betek 1938 gant ar ster-se. "Difetis"
a voe degaset gant Maodez Glanndour.

(2) "Micher". Ar ger-mañ a zo kemeret er ster kembraek.

- daoust ma rae AR VRO bruderezh evito - a zo bet embannet war-eeun
gant Meven Mordiern ha Frañsez Vallee. Gwir eo en deus Taldir e
unan savet un tamm tezer e brezhoneg diwar-benn "Prosper Proux", bet difen-
net e 1913 ; hogen war a hañval ne oa ket gouest Taldir ia
c'hovelian gerioù nevez : a-walc'h eo lenn an dezenn-se dres evit
meizañ kement-se. Harpañ a rae eta stourm Frañsez Vallee ha
Meven Mordiern hep kemer perzh ennañ. Hini pe hini eus e genlabourerion
evelkent a gemere a-zevri ar sturiennoù nevez hag a glaske skrivañ
en ur brezhoneg gouiziek ebarzh pajennoù AR VRO : Bodlann ("Laterre")
da skouer, ebarzh niverem miz Here 1913. Ar bennoù da heul a roy
tu da vam doare ar yezh lennegel nevez-se a chome c'hoazh gwall
amparfal : "Kent-tonkadur", "chalmet(1) gant eginlezh maeziat he
c'hanaouennoù", "an emsav lennegel kevameriat(2)", "kenhentadurezhioù",
"leun a zeolidigezh", "ur c'hrennad barzhonius eus istor Breizh",
"diskouezidigezh dastumadenn Kervarker", "flemmadur bihanañ eus
perzh den ebet" h.a. E-lec'h-all e c'heller teskaouiñ troiennoù
arnevez evel "diskouezadeg", "keñveradeg", "skrivadeg", "labourioù
ar c'hevrennoù esperniek ha yezhek", "yezhadurer" h.a. (3)

Nebeut a dra, a lavaro darn. Moarvat, kement-se a zo
a-walc'h evit diskouez ez eo bet bouc'het abred tre al labour
reizhañ ha pinvidikaat ar yezh hag he deus bet ar gelaouenn AR
VRO ur roll pouezusoc'h eget hini nep kelaouenn all, SPERED AR
VRO en o zouez, evit brudañ e-touez an emsaverion keal ur brezhoneg
arnevez azasaet ouzh ezhommoù hon amzer. Pa ne ve nemet evit se
e tlefeomp kaout anaoudegezh-vat ouzh Taldir evit ar roll a ziouganer
en deus sammet e deroù an ugentvet kantved.

- (1) Diouzh ar c'hiz e oa ar ger-se e deroù ar c'hantved. Kv.
barzhoniezh Mathaliz, da skouer.
- (2) "Kempred, kempredel" a oa implijet ivez neuze gant skrivagnerion
arall, gant Kalloc'h pergen.
- (3) "Embannidigezh".

D I E L L O U

Evit resizañ lec'hiadur ha roll AR VRO e roimp amañ da heul al listenn eus an harperion hag ar genskriverion anezhi. Paeroniezh AR VRO da gentañ : an ao. 'n Eskob Dubourg, ar markiz de l'Estourbeillon, ar c'hannad Lamy (bet ezel eus Breuriezh Breiz ivez, ar c'hannad Hamon, ar markiz Frederig a Gerouartz (bet e Breuriezh Breizh), an drouiz Yann ar Fusteg, an it. Mosher (amerikanez a orin breizhat) Anna a Gervenonael, an dimezelled Nathalie ha Marc'harid de Volz-guerhoent (bet izili eus ar Gorsedd; Nathalie a voe skrivagnerez ivez).

SKRIVAGNERION A WENED

Bleiz Lanvauz, Bleimer (a embannas meur a bezh barzhoniezh er gelaouenn) Keleenn Glas, Efflam Koet Skav, Job an Drouz-vor, Loeiz Hermieu, Pengleuik (a skriva dreist-holl a-raok 1900, ebarzh Kloc'hdi Breiz, en un eilvezh iskis a-walc'h, pezhioù barzhoniezh heson tre).

SKRIVAGNERION K.L.T.

Jos Albaret, bourc'hiz eus Pont-e-Kroaz) An Arc'h-anteg, Armel, Leon ar Berr (Abalor), ar Bruger (Jos ar Bras), Charlez ar Bras, Ar Yeodet (Bocher), Belez, Azenor, Barzhieg Kerglas, Ar C'hozig, ar C'horfeg, Ar C'harget, Louisa Charvan, An Du, Evnig Arvor, Esnault, Yann ar Fusteg, Ar Furcher, Ar Garreg, Ar Gall, Loeiz Gourlet, Ar Gag, Godest, Gwennou, H. Guillerm, Gouriou, Glazardig, ar Bod Dero, Leon ar Gourenner (Palaux, buhezskriver Kalloc'h), Efflam an Enoret, Jaffrennou, Kerniliz, Lunedeg, Laouik, Meriadek, Ar May, L. Ar Menn, Meliaf, Yann Nadeno, Pennhouarn, Y. Picquenard (Barzh Melen), Loiz Ar Roz, Loiz Porzikel, Paotr ar C'hab, Klaoda'r Prad (azegasas Abeozen d'an Emsav), Per Pronost (barzh Trefflez) J. ar Peleter, Youenn Poullan, Renan ar Rouz (Meven Mordiern), Jord Rumeur (Mathaluz), Yann Roudot (Mel-oc'h-dir), Anna-Vari Roparz (moereb da Daldir), Erwan Sebillot, Ar Seveleg, Tiercelin (rener l'Herminie e Parame), Yannig ar Venaer, Frañsez Vallee (Aberve).

Isverket hon eus anvioù ar skrivagnerion a zo meneget gant un diskleriadenn bennak diwar o fenn ebarzh "Eñvorennoù ur brezhon-egour" eus F. Vallee. Distank a-walc'h int. Darn eus ar re en em gav ar ar roll-mañ n'o deus ket skrivet kalz tra e brezhoneg a-wechoù. Mat e vefe klask titouroù diwar-benn pep hini anezho. Mat eo ivez lakaat e kamm orin ar skrivagnerion, holl a orin poblek, gant hini izili ar strollad paeroniañ a oa noblañsoù pe vourc'hizion hogen na skrivent ket - an darn-vuiañ anezho - e brezhoneg.

Pennad 15

"UNVANIEZH ARVOR"

a - raok ar brezel - bed kentañ

Diskleriet hon eus penaos e oa c'hoarvezet an disram etre "Kevredigezh Broadel Breizh" hag "Unvaniezh Arvor" pe, kentoc'h, penaos e oa ganet ar gevredigezh-mañ da heul arnod c'hwitet darn eus izili K.B.B. da gemer ar galloud enni. A-raok ensellout obererezh ar gevarzhe nevez-mañ eta e vefe da menegiñ an diskleriadenn a reas diazezerion ar strollad nevez evit reizhabegañ ar savidigezh anezhañ. Setu eta, e galleg, an arbennoù a voe lakaet en a-raok ; tri rumm a oa anezho :

- 1.-"L'introduction d'éléments mondains étrangers à la cause bretonne et régionaliste prenant de jour en jour la place des vrais Bretons et des Bardes, fondateurs de la Société et tendant à aiguiller le mouvement breton vers une propagande politique, contrairement à ses statuts ;
- 2.-"l'autoritarisme du Président entravant la liberté des sections et se substituant de plus en plus à leurs membres et à ceux du bureau central, empêchant tout travail sérieux depuis trois ans ;
- 3.-"l'attitude de certaines personnes du nouvel entourage présidentiel qui prétendirent plier l'Union à leurs caprices et à leur omnipotence et en faire une société de divertissements..."

Anat eo e oa an arbenn kentañ an hini pouezusañ. E gwirionez en devoa divizet an Estourbeillon, egiz m'hon eus merket dija, heuliañ ur politikerezh koulzelour a-zehoù a c'houlakae distro an danvez roue gall war e dron. Evit heuliañ ar politikerezh-se en devoa en em harpet war an Dr. Le Fur eus Paris, - taget taer gant Erwan Berthou, evel m'hon

merket - a oa brudet da vezañ ur c'horzhour eus hêr an tilu a Orleañs. A-hend-all en devoa lakaet an Estourbeillon un toullad mat a noblañsoù - paotred ar c'hestell, evel ma lavare ar varzhed - da emezelañ prim-ha-prim, da zerc'hent ar vodadeg vloaz, er Gevredigezh : ar re-se, na petra, a oa a-du gant e bolitikerezh. Kement-se oa ar pezh a oa anvet e galleg ebarzh niverenn gentañ bloazlevr an "Unvaniezh" "l'appel aux châteaux", e Brest, e Roazhon pe e Gwened. Ar pleustrevezh-se avat a oa dañjerus a-walc'h evit ar varzhed (e devoù, ar stourmerion a oa bodet endro da Erwan Berthou ha Taldir a oa bourc'hizion vihan pe werinourion).

An tamalloù arall n'o deus ket kement a bouez nemet diskouez a reont dreist-holl e oa mennet an Estourbeillon da c'hoari e roll a rener ha da ziazezañ da vat e veli war-bouez diskarzhañ ar varzhed a oa deuet da vezañ ur gevarzhe e-kreiz ar gevarzhe. Padal ez eo ret teurel evezh ouz ar garez da vezañ klasket ober eus K.B.B. ur gevredigezh diduamantoù (lavarout a reomp hiziv "folklor") a oa bet graet da goskor ar "Sturier". Dre se e felle d'ar varzhed reiñ da intent pebezh pouez a roent o unan d'ar yezh ha d'al lennegezh vrezhonek.

Addezrevellomp amañ penaos e oa c'hoarvezet an troc'h e K.B.B. Da heul ar votadeg a oa bet graet e Lesneven evit dilenn ur sturier nevez e oa bet trec'h an emstriver kinniget gant an Estourbeillon, da lavarout eo, ar c'hont Le Gonideg de Treffan, diwar goust an danvez sturier harpet gant ar varzhed hag a oa, evel dres, ur"barzh" Jos Parker, skrivagner gallek eus Fouenant, nemet "brezhoneger" (1), dre 51 mouezh a-enep da 35.

Jos Parker, a-c'houdevezh, a oa deuet da vezañ sturier "Unvaniezh Arvor". Hemañ - kozh a-walc'h d'an ampoent, brudet er metou galleg breizhat a neuze (ar metou-se a zo aet da get hiziv) a oa "brezhoneger": eta hogen n'en devoa a-hend-all, war a hañval, perzh politikel ebet, na personelezh taer, na mennoziou resis diwar-benn politikerezh (rannvroelour giz kozh ha kempennelour gall e oa, evel m'eo anat diouz an areizhoù a zistagas da geñver

(1) Gouest e oa da "gaozeal" e dammig drefoedaj genidik.

kendalc'hoù "Unvaniezh Arvor" kent ar brezel bed kentañ)

Renet e oa "Unvaniezh Arvor" gant ur c'huzul - lennomp un "dael" - a hanterkant ezel ha melestret e oa gant ur c'hengor-erounit a bemzek ezel. A-hend-all, setu roll an izili a oa bet dibabet evit ar c'hengor-se, da gentañ :

"an dim. Huchet de Cintré, Jos Parker, Leon ar Berr, Loeiz Herrieu, J. Duchauxix, A. Mellac, P. Diverres, F. Jaffrennou, V. Nouel de Kerangwe, Henri Thibault de la Guichardière, Louis Le Floc'h ("Flakou"), Yann-Morvan Goblet (1), Francis Even, Alexandre Goaziou, Y. Le Diberder, Delafargue."

D'an 18 a viz C'hwevrer 1912, e kendalc'h Flouarzel B.U. e voe ledanaet kelc'hiad an izili hag ar stourmerion. Diwar neuze e kaver er poellgor-se, estreget Jos Parker, Meriadec de Lantivy-Trédion, eus Sant-Ave-Sencl'f, e-tal Gwened hag anvioù nevez : Per Mokaer, kenwerzhour e Brest "ancien élève diplômé des Hautes Etudes commerciales" (bez e tlee dont da labourat en Orient ha da blediñ gant ar "Pays Breton" koulz ha gant "Brediezh ar Brezhoneg") ; Per ar Rouz, kelenner keltieg e Skol-veur Roazhon ; Yann-Ber Kalloc'h (ren a rae a-gevret gant F. Vallée kevrenn ar yezh hag al lennegezh vrezhonek) ; Joseph Guillerme, perc'henn e Langidig ; Francis Gourvil, kemener e Montroulez, Maurice Duhamel, sonaozour, Saik ar Gall, labourer-douar. e Flabenneg ha Bellanger h.a. Anvioù ar re-mañ a vo adkavet e kevrennoù liesseurt ar gevredigezh war un dro gant re all : Emil Masson, bez-sturier kevrenn al lennegezh, Iwan an Diberder, sekretour an hevelep kevrenn, - da skouer. E kevrenn ar gounez-erezh hag an desaverezh en em gave Saik ar Gall, na petra, a oa sturier ar gevrenn, M. Guédès, a oa gounideg e Kastellin, bez-sturier an hevelep kevrenn, J. Pevedig, eus rannvro Erec'h, mekaniker labour-douar. Ha setu bremañ anvioù renerion gevrenn

(1) Arnodenner en "Institut Commercial", "Maître de conférences" en "Ecole des Hautes Etudes sociales" hervez an titloù a roe dezhañ e unan. Troet e voze e zarlizhoù e brezhoneg hag embannet war ar "Pays Breton". Goude ar brezel ez embannas levrioù o tennañ da Vreizh ha d'ar broioù keltiek, Iwerzhon porgen.

gevrem an arzou-kaer : Duhamel, sonaozour, Ely-Montbet, rener labouradeg ha skulter e Sant-Gwenole a zlee bezañ tizhet - evel Kalloc'h - gant alfo gallgar brezel 1914 ha bezañ lazhet war an talbenn e 1915, Le Guennec, arzour treser. Kargoù a bep seurt a oa bet krouet en "Unvaniezh Arvor" a-hend-all ha pep hini a c'helle kavout e lec'h ; da skouer, anvet e oa bet sekretourion evit an divroerion ; tri a oa dicout : Erwan Berthou, o chom e Paris, Escot, eus Angers, Bellanger, eus an Havr-Nevez, ha de Caderincourt.

Ne oa ket bet disoñjet ar Gelted tramor, eveljust. "Unvaniezh Arvor" he devoa eno dileuridi : J. Patton, en Alba, Geoghegan, en Iwerzhon, ha Morgan Watkins e Kembre. Kement-se a oa natur a-walc'h en un aozadur reolet gant ar varzhed.

Rennerion wizion ar gevarzhe avat a oa ar "vez-sturierion" : Jean Choleau ha Frañsez Vallee, ar sekretourion Leon ar Berr, Loeiz Herrieu, Duhauchix ; erfin, an teñzorier, ur wech ouzhpenn, Andreu Mellac.

§§§§§§§

E gwirionez e oa an darn-wuiañ eus izili "Unvaniezh Arvor", bourc'hizion vihan pe etre, nes d'ar werin meur a wech. Notet en devoa al lenner evelkent e oa noblañsoù eus hiniennoù : Meriadec de Lantivy-Trédion (1), da skouer, Henri Thibault de la Blanchardière, eus Kourseul, mignon da dTaldir, ar gontez de Pesquidoux, ar c'hont d'Herblais, maer Lanvollon, a zlee ren "Unvaniezh Arvor" e-pad ur pennad war-lerc'h ar brezel kentañ. Briaded arall a veze pedet a-wechoù da gemer perzh e labourioù ar gevarzhe. War roll ar gendalc'hidi e Douarnenez e 1913 e oa enskrivet anvioù ar priñs Ferdinand Lucinge-Faucigny, ar markiz de la Moussaye, e-tal Lambaol B.U., ar priñs de Polignac, an dug de Rohan, kannad Josilin, ar c'hont G. de Braultpont, o chom e maner Rozkledan, e parrez Arvadon ha re all c'hoazh : J. de Boisfleury, de l'Ecluse de Trevoedal, e kastell Lokeran e-tal Gwaien, darn anezho dreistveverion eus an "Association Bretonne".

(1) Hemañ ne chomo ket, na Kalloc'h nag an "Diberder kennebeut.

Bez e c'hellfe unan eta ober dezhañ ar goulenñ daoust ha disrann 1911 etre K.B.B. hag ar re a zlee diazezañ "Unvaniezh Arvor" a wiske e gwirionez ur ster politikel, e par ar politikerezh kevredigezhel da vihanañ ; seul aescoc'h e rafe dezhañ ar goulenñ-se ma kavfe er roll hon eus graet anvioù Meriadec de Lantivy, kempennelour ha koulzelour a-zehoù, savet gantañ ur skrid evit erbediñ aozidigezh ur rannvro vreizhat diouzh ar patrom maorasat ; ha re Iwan an Diberder ha Y.B. Kalloc'h a harpe an hevelep politikerezh - war-bouez nebeut - er gelacuenn "Brittia" (gallus eo e vijent bet gounezet d'ar politikerezh-se gant de Lantivy e unan).

Ne soñj ket deomp koulskoude e oa arouezius bras bezañ an noblañsoù hon eus meneget en "Unvaniezh Arvor". Ouzh o fedif pe ouzh o dedennañ n'o doa klasket atebien ar gevarzhe nemet reiñ un tamm lufr hag un tamm enor sted dezhi ; n'o doa goulemmet digant ar "vrientinon" nemet prestañ o anv ; un doare e oa da aesaat labour an "Unvaniezh Arvor" er gevredigezh vrezhon hen-voazel a neuze ; evit an hevelep abeg, a-hend-all, e oa bet lakaet an ao. 'n Eskob Dubourg da ezel "Unvaniezh Arvor" (1). Darn all eus an noblañsoù pe an dehouiz pellañ a oa deuet enni dre vignonezh evit an diazezerion anezhi (hemañ a oa degouezh de la Blanchardière, mignon Taldir) ; recu all o doa heuliet ar varzhed dre ma harpent politikerezh yezhel an disrannidi : d'Herblais, eus Lanvollon, ha paotred "Brittia", da skouer. Goulakaat a c'hellomp e kuitaas ar re-mañ K.B.B. dre ma ne roe an Estourbeillon pouez ebet d'ar stourm evit ar yezh. Hogen, evel m'hon eus damverket endev, ar peb all eus politikerezh an "Unvaniezh Arvor" a zisplijas dezho buan a-walc'h rak ken abred ha 1913 e oa bet rasket o anvioù diwar rolloù amaezhidi ar gevarzhe.

E devoud n'en em gave ket ar re-se en o aez e-touez bourc'hizion vihan pe tud eus ar bobl ha n'oant ket chalet tre gant

(1) Menegiñ a c'hellfemp eveljust gouvriaded all e-leizh : Paul Caillaud, rener rannad e maerdi an Naoned, Charles Danielou, kannad e Neuilly, notered hag alvokaded a yoc'h.

danvez roue Bro-C'hall. Adal kendalc'h Plouarzel B.U. e oa deuet tre e poellgor-ren ar gevarzhe kargidi vihan evel an it. Facy, skridaozerez e maodiermezh c'hall an arc'hanterezh pe un implijad kenwerzh eus an Naoned, evel Yves Le Stang. Sturier "Unvaniezh Arvor" a oa boaz da lavarout e oa ar gevarzhe ur strollad poblek. E kendalc'h Douarnenez, d'an 31 a viz Gouere 1912 en devoa diskleriet kement-mañ e brezhoneg. "Ar vrasañ lodenn eus ar Varzhed a zo o ren an Unvaniezh a zo tud eus ar bobl..."

Bourc'hizion pe dud eus ar bobl - evel Erwan Berthou, - an holl anezho a oa digas cuzh ar politikerezh nemetañ a oa bet kinniget d'an Emsav hag a oa ur politikerezh koulzelour a-zehoù. Evit abegoù a bep seurt : lod dre ma taolent meiz cuzh ar yezh hag ar vroadelezh, da gentañ, F. Vallee hag ar "varzhed, dre vras; hiniennoù, dre m'en em lec'hient kentoc'h "a-gleiz" - hep bezañ evit keloù se skialour an disterañ - egiz Yann Choleau, mab bihan un harluad eus 1851 (hemañ a-hend-all a zlee kemer penn ar gevarzhe etre an daou vrezel) ; reoù all, erfin, dre m'o doa dibabet kas war-raok ur politikerezh broadelour ahelet kentoc'h war an tu kleiz, paotred "Breiz dishual" ha "Brug": Jos ar Bras, skolaer kristen (1) hag Emil Masson, Duchauchix, V. Nouel de Kerangwe h.a. Anat eo ne c'helle ket nemeur un den evel Iwan an Diberder chom er memes kevarzhe gant ar stourmerion-se a veze kunijennet dizamant gantañ ebarzh e gelaouenn "Brittia".

Lavaret hon eus e oa reolet "Unvaniezh Arvor" dreist-holl gant yezhkarourion evel F. Vallee a blede gant "Kroaz ar Vretoned" pe Loeiz Herrieu hag Andreu Mellag a rae war-dro "Dihunamb" hag ar "Pays Breton" ; netra souezhus eta m'he doa Unvaniezh Arvor" merket dezhi da bal kentañ difenn ar "yezh hag ar sevenadur". Ar pal-se a oa geriet evel-henn ebarzh trede mell dezvad ar gevredigezh, e galleg :

"Unvaniezh Arvor" a pour but l'étude pratique de toutes les questions intéressant la vie intellectuelle, artistique, sociale et économique de la Bretagne et spécialement de la défense de la culture et de la langue bretonne..."

(1) Daou skolaer all a gaved en "Unvaniezh Arvor". Gourlet ha Guillo. Nebut a-walc'h a veleion : Job ar Bayon hag ar chaloni Boussard du Clos, eus Bruz.

Evit fetisaat ar mennad-se e oa bet divizet reiñ lañs d'ar vrezhonegerion e diabarzh ar gevarzhe hec'h unan :

"La Fédération est dirigée par un conseil de direction de cinquante membres au plus dont les trois cinquièmes doivent justifier de la connaissance de la langue bretonne..."

Diferet e oa bet ivez e vije ar "Sturier" ur brezhoneger dre ret ; eus an daou "vez-sturier" unan a ranke bezañ brezhoneger : eus an tri sekretour, unan a oa da vezañ brezhoneger K.L.T., unan all brezhoneger gwenedour hag an trede galleg : ren a rae an demokratelezh uhelañ e diabarzh "Unvaniezh Arvor" evel ma c'heller gwiriañ. E devoù - se hon eus merket - Jos Parker a oa sellet evel brezhoneger a oa Sturier ; Yann Choleau, galleg, ha F. Vallee, brezhoneger, a oa bez-sturierion ; Leon ar Berr, brezhoneger K.L.T., Loeiz Herrieu, brezhoneger gwenedour ha Duchauchix, galleg, a oa sekretourion.

Moarvat, seurt kempuez a oa mennet da reiñ d'ar yezh ul lec'h a enor ha n'he doa ket bet betek neuze ebarzh kevarzhe vreizhat ebet. Da veuliñ e oa eta hevelep nevezinti. Hogen ret mat eo anzav ne zouge ar reizhiad-mañ heuliad pleustrek ebet rak disoc'hañ a rae n'eus forzh penaos da ober eus ar galleg ar yezh labour ha darempredoù etre an izili, hervez ar reolenn anavezet mat a laka ar galleg da drec'hiñ bewech ma kej a-gevret gallegion ha brezhonegerion...gallegion (1). Ouzhpennomp ne ouie ur c'halz eus ar re a gomze "brezhoneg", sañset, nemet ur stlabez yezh, paour ha disneuz ha na c'helle e nep doare kevezañ ouzh ar galleg reizh ha pinvidik o devoa studiet e-pad bloavezhioù ha bloavezhioù er skol.

§§§§§§§

Bezef pe vezef, pell e oa "Unvaniezh Arvor" a vezañ ur strollad dispac'hel daoust d'an endroerezh nevez en em ziskoueze enni (gwelet hon eus penaos e c'halve warni evel K.B.B. hec'h unan-gwarez ha bennozh ur bodad paeroniañ a zastume gouvrinded ha tud

(1) Ret eo lavarout ez eo hemañ ur gudenn gwall gasaus en hor broioù keltiek enstreyezhekaet. "Plaid Cymru" he deus klasket he diskoulmañ dre ober gant jubennourion hogen hemañ n'eo ket un diskoulm mat, d'hor soñj.

a zoare a bep seurt). E gwirionez e lakae da dalvezout ur wech ouzhpenn keal ar Framm sevenadurel broadel a oa bet lakaet da dalvezout abaoe krouidigezh "Breuriezh Breizh" e 1843, - hag aozet e oa penn-da-benn diouzh patrom K.B.B. Evelti e oa mennet da c'holeiñ holl dachenn obererezh"sevenadurel"ar vro : yezh ha lennegezh vrezhonek, lennegezh hag istor dre vras, armerzhouriezh ha kevredoniezh. An neveded nemeti e-keñver K.B.B. a oa al lec'h dreist a oa deroet d'ar yezh ha d'al lennegezh vrezhonek. Diwar-benn kevrenn ar brezhoneg end-eeun e lened kement-mañ ebarzh danevellskrid kendalc'h Douarnenez, e dibenn miz Gouere 1912 :

"Cette section est un peu considérée comme étant la principale section de la société..."

Ha diwar-benn hec'h obererezh ez ouzhpenned :

"action nationale entre toutes puisqu'il s'agit d'assurer la conservation en tant que langue vivante de notre langue nationale..."

Oberiañ a rae "Unvaniezh Arvor" diouzh giz K.B.B., da lavarout eo, dre vodañ kendalc'hoù bloaziek ha dre urzhiañ kenstrivadegoù. Notomp, diwar dremen, e c'hoarie ar c'henstrivadegoù-se ur roll brasoc'h en obererezh U.A. eget en hini K.B.B., ur roll a oa par a-walc'h e gwirionez da hini kenstrivadegoù an "Eisteddfod" kembreat ez int moarvat un heklev amezhañ (1). Diazezet e oa bet evel-se prizioù da zamaouiñ d'ar genstriverion ; unan a zouge anv Loyant, greanter en Naoned, ez-roueelour gall deuet da vezañ stourmer ar Strollad broadel kentañ ; unan all, hini an Diberder; F. Even, egile hini Esnault ; ur priz diwezhañ a oa bet lakaet dindan anv "Dihunamb".

Evit pezh a sell ouzh ar yezh o devoa ar c'henstrivadegoù ur pal resis hag a oa diorreadur ar yezh. Kevrenn an armerzh, ar politikerezh hag ar gevredigezh a ginnige zoken da verat un destenn o temañ da beskerezhioù Maouritania ha gortoz a raed digant ar genstriverion degas kounskridoù war an destenn-se e brezhoneg :

"Le Président de la section Mr. Yann Morvran-Goblet offrira une médaille pour le meilleur mémoire rédigé en langue bretonne. Cette médaille

(1) Giz ar c'henstrivadegoù, dreist-holl evit ar vugale hag ar skolidi a zo padet betek hiziv. Kv. ar Falz, "Eleun-Brug" pe E.A.T. en trede Emsav.

sera attribuée de préférence au deuxième concours : monographie d'une grande industrie de Bretagne... On tiendra compte, surtout, de l'emploi de mots techniques purement bretons..." (1)

Per Mokaer, diouzh e du, en devoa ensavet ivez ur priz evit an armerzh ; hag o vezañ m'edo neuze o vevañ en Orient en devoa skridaozet an destenn e gwenedeg, na petra ! Setu hi a-hond-all :

"Displegañ pegen talvoudus e vehe evit ar vro d'ar besketerion ha d'ar beizanted em glevout gant Breizhiz Kêrioù bras Bro-C'hall ha Bro-Saoz evit gwerzhañ o mar'hadounezh e-lec'h o c'has da ziavaezerion. Pennas e c'hellhe bout kavet an tu da gas ar soñj-se da benn..."

Ne glasked ket nemeur en "Unvaniezh Arvor" - ne oa ket ar c'hiz en Emsav kennebeut d'ar mare-se - reiñ diazezoù prederouriezhel hollek d'an ober breizhek nag empenañ ur bedvezadur bennak en e ser. Holl stourmerion "Unvaniezh Arvor" a oa troet war-du al labour pleustrek evit ar yezh pe an armerzh ha ne raent ket kalz goulennoù dezho o unan diwar-benn ster an Emsav. Sturier ar gevarzhe hepken a hañval bezañ bet tuet da ober prederiadenoù diwar-benn natur an Emsav. Hemañ - hag eñ brezhoneger a-vihanik - a skrive hepken e galleg, egiz ma cuezet - ha poan en devoa da zrailhañ un nebeut komzoù brezhonek e-pad ar c'hendalc'hoù.E-kerzh "sizhunvezh keltiek" an Henbont, aozet gant "Unvaniezh Arvor" etre ar 24 a viz Eost hag ar 1añ a viz Gwengolo 1913 avat en devoa klasket ar barzh savlec'hiañ an Emsav e-keñver ar sevenadur ijinerezhel a oa oc'h en em ledañ e Breizh d'an d'an ampoent. Evel Brizeug er c'hantved tremenet - ha moarvat en devoa soñj Parker eus e werczennoù a zo chomet brudet e Breizh betek

(1) Yann-Morvran Goblet - e anv kefridiel a oa Louis Goblet - a oa ganet e Trelaze. Lakaat a rae treiñ e brezhoneg danvez ar c'hentelioù a rae en "Ecole des Hautes Etudes sociales"; Leon Palaux, "ar Gourener" a oa an troour. Kalz gerioù gouiziekl ha kalvezel a gaver er pennadoù-se. Dibact ar re a zo chomet er yezh. Y.M. Goblet - mañ ur skolaer e oa - a zimezas gant ur saoez war-lerc'h ar brezel hag a guitas neuze an Emsav.

(2) Kalz danveziou all a oa d'ar c'henstrivadegoù ha d'an diskouezadegoù a veze aozet gant U.A. e ser ar c'hendalc'hoù : liverezh, engraverezh, kizellerezh h.a.

an eil brezel bed - ne zegemere ket a galon vat ar sevenadur arnevez-se ha roet en dije a-walc'h da gefridi nemeti d'an Emsav mirout ar sevenadur maezel hengounel-se a oa bet hini Breizh betek neuze :

"C'est la trombe de l'esprit nouveau. A côté de réelles conquêtes sur la barbarie ... (il) détruit aveuglément des trésors d'art et de poésie, tarit des sources divines de résignation et de paix... Si nous ne sommes pas de ceux qui tintent le glas de la Bretagne, nous ne sommes pas non plus de ceux qui sonnent une aubade triomphales aux Temps Nouveaux..."

Hag evit echuiñ e tistaele Jos Parker an hollvedelouriezh a oa neuze diouzh ar c'hiz gant paotred an arackaat :

"On professe beaucoup aujourd'hui un vague amour de l'humanité abolissant le nom de patrie... mirage d'utopie..."

A-hend-all, peseurt spered a oa da "Unvaniezh Arvor" ? Gwelet hon eus e oa liesseurt a-walc'h kendereoù orin ar stourmerion daoust ma oa ar werinourion rik a seurt gant Erwan Berthou dibaot a-walc'h emni ; a-hend-all ne glaske ket ar gevarzhe en em ledañ e-touez ar bobl. Padal, Jos Parker a fogase gant orin poblek ar "varzhed" a yae d'ober ar pep brasañ eus hec'h ezelerezh. Moarvat e oa maoc'h a-gleiz eget K.B.B. Yann Choleau a zisklerie ez unane "Unvaniezh Arvor" an holl Vrezhonez "d'esprit indépendant et libéral". Hogen daoust d'hec'h anv ne oa unvaniezh politikel ebet e diabarzh "Unvaniezh Arvor", na diwar-benn kevredigezh na diwar-benn broadelezh. Jos Parker, ar Sturier, plantet e penn ar gevarzhe, a oa, war a hañval, ur rannvroelour giz kozh ha c'hoarvezout a rae gantañ, da skouer, komz eus "petite patrie" et "grande patrie" (1), pezh na rae nepred na Vallee na stourmerion all. Dre ziouer a breder politikel personel hag a gendrec'hadurioù don e felle dezhañ ar gas pep "politikerezh" diouzh "Unvaniezh Arvor" ; tamall a rae a-hend-all war un dro "roueelourion" a-du gant ar renad kozh e Bro-C'hall hag an "disrannourion" (ar Vrezhonez o doa skuilhet o gwad evit

(1) Prozegem gantañ e kendalc'h "Unvaniezh Arvor" e Plouarzel B.U.

Bro-C'hall ; dre se e oant Gallaoued, na petra!) Padal evit echuiñ ez ouzhpenn (1) :

"Nous voulons une décentralisation et une autonomie normales qui permettent le plein développement des nos intérêts et des qualités de notre race..."

Merzout a c'heller e oa kenstaget amañ ar gerioù "décentralisation" hag "autonomie" hep ma vije rezizet peseurt keñver a oa etrezo, hep ma vije spisast kennebeut peseurt ster a roe d'an anv-gwan "normales". A-benn ar fin e felle da Jos Parker bezañ hepken brogarour ha frankizour. E Douarnenez ez asure bepred(2) :

"La F.R.B. est ouverte à tous ceux qui approuvent notre but patriotique et notre organisation libérale..."

ha meneget en doa Renan evit echuiñ.

E devoud e kleved un dason "republikan kleizat" er gevarzhe, gwan a-walc'h moarvat, hogen na gleved tamm ebet a-hend-all e K.B.B., da skouer. Daoust avat ha bez e oa broadelourion eus ar re a oa er penn anezhi evit keloù se ? Evit henn gouzout e vefe ret termeniñ da gantañ, egiz m'hon eus merket, an droien "autonomie normale" implijet gant Jos Parker. Dre vras, koulskoude, e c'heller asuriñ, da vihanañ, e oa renet an "Unvaniezh" gant broadelourion, ma ne heulie ket a-hend-all ur politikerezh broadelour anat (se a c'hoarvez dre vras el ledemav hiziv). "Unvaniezh Arvor" avat ned ae ket en tu-hont d'an arc'hadurioù "speredel" ma roe dezho ur galloud had bennak ; n'oa ket gouest avat daoust da se da ginnig d'ar bobl ur raktres empennet da enkorfañ an arc'hadurioù-se ebarzh ensavadurioù.

Kement-se a zo sklaer, da skouer, er bomoù-lavar-mañ distaget gant de Lantivy e-pad ar c'hendalc'h kentañ e Plouarzel

"Puiser dans l'histoire de Bretagne l'énergie et la conscience nationale(3) indispensable

(1) En dilinennad-mañ ez eus anv eus "politikerezh ar Markiz". "Bannissons l'odieuse et détestable politique" (ur c'haal poblek a-walc'h er werin end-eeun). Hag e kendalc'h Douarnenez 1913 : "Cette gueuse ("la politique") plus empoisonnante et plus calamiteuse que toutes les Dahud de la terre..."
(2) Er c'hendalc'h-se en devoa graet A. ar Bras ur gaozeadem.
(3) Un arver stank a raed eus an anv-gwan "national" er c'hentañ Emsav.

aux Bretons pour lutter contre cette centralisation qui leur est funeste..."

e-lec'h ez eo kevreet an emskiant vroadel gant un "digreizemerezh" ha na verzer ket mat ar bevennoù anezhañ (1).

Dodenn an "digreizemerezh" a zeu endro aliesik e komzoù stourmerion an Emsav kentañ, bepred stag ouzh dodenn ar vroadelouriezh evel ebarzh komzoù Erwan Berthou e kendalc'h Douarnenez :

"L'utilité de la décentralisation, d'abord au point de vue français et surtout au point de vue national..." (2)

Pezh a heted dre ar ger "digreizemerezh" a oa e gwirionez un doare emvelestrerezh, un doare "Home Rule" evel m'en diskouez ar frazenn distaget e ser prezegenn Mathilde Delaporte e-pad kendalc'h an Henbont (skrid brezhonek) :

"Ma vije bet aotreet sevel en Roazhon ur Parlamant ispisial evit divizoutdiwar-benn aferioù Breizh, votet en devije lezennoù evit kompezañ pep tra : ur porzh-mor digor treuzatlantik eus Brest..."

Digant an emvelestrerezh-se - par d'an emrenezh tost-da-vat - e c'hortozed, pergen, diorreadur armerzhel ar vro :

"Holl, marc'hadourezh ha tud, a vije tremenet dre hor bro en ur zigeriñ dre eno labourioù, magadurezh ar c'henwerzh... ma vije bet lezet ganti ar frankiz d'en em c'houarn..."

Ha tamall a raed Paris evel boaz :

"A Paris, eno emañ evit hor bro an holl eienoù eus pep fallagriezh... ar vad a zeredfe eus an digreizidigezh en ijinezh..."

Evel ma verzer er frazenn diwezhañ, kemmeskañ a raed mui pe vui adarre an "digreizidigezh" gant an "emvelestrerezh" hag ar "ramvroelouriezh" gant ar "vroadelouriezh" :

(1) Ar ger "décentralisation" - "digreizadeg" pe "digreizidigezh" - en devoa ur ster kalz kreñvoc'h eta eget bremañ.

(2) Tem diskar ha breinadurezh Vro-C'hall barnet da vervel diwar an diboblañ - a orin dehouat gall evit darn - a zeu endro e genoù ar stourmerion U.A. egiz er peurrest eus an Emsav. Ret e oa distrollañ tonkadur Breizh diouzh hini Bro-C'hall : "Car s'il plaît à la France de ralentir sa natalité et de compromettre son avenir..."

"Vous autres, régionalistes, qui voulez faire de la Bretagne une nation forte, une nation unie, une nation respectée. Souvenez-vous des siècles où votre pays fut uni, fut respecté..."

Hevelep frazennerezh a hañval deomp hiziv bezañ isicis a-walc'h hogen komprenet e rank bezañ e kengedouezh politikel ar mare : spered an emrenezh a oa nevez dihunet e Breizh hag ar pennadurezhioù gall - ha n'o doa ket bet amzer da voazañ outañ - a oa strafuilhetmik o stadañ an emled anezhañ hag a ersave outañ ivez taer meurbet ; n'eo ket souezhus eta o dije ranket ar stourmerion vrezhon kafunañ eztaoladur o broadelouriezh evit parrat ouzh foeltr ar barnerezh gall a gouezhañ warno.

E gwirionez, a-raok ar brezel bed kentañ da vihanañ, abarzh ma vije deuet Yann Choleau da sammañ ar renadur anezhi, ha dindan levezon F. Vallee, Loeiz Herriou ha stourmerion all - daoust ma oa enni ivez ur rumm all a stourmerion a oa chalet dreist-holl gant an armerzh - he doa kemeret "Unvaniezh Arvor" - se a adlavaromp - da gefridi difenn ur stumm a vroadelouriezh yezhel, da gentañ penn. E kendalc'h Douarnenez, da skouer, e kinnige ur Breizh-Uhelad - eus Bruz e kreisteiz Roazhon - ar chaloni Bossard des Clos, da vouezhiañ d'ar vodadeg ur mennad oc'h ober eus ar brezhoneg "yezh vroadel" ar Vrezhoneg, koulz er reter hag er c'hornog. A-hend-all, setu skrid ar mennad :

"('Unvaniezh Arvor') affirme que la Haute-Bretagne aura à cœur de donner pour la cause de la langue nationale..."

Hogen, ur wech ouzhpenn, daoust ma raed aes kenañ eus ar brezhoneg yezh vroadel Vreizh ne oa ket stourmerion "Unvaniezh Arvor" evit gouenn netra estreget ur gelennadurezh divyezhek e skolioù Breizh. Barnet unan diouzh an hevelep mennad mouezhiet er c'hendalc'h-se :

"protestant vivement contre l'éviction de notre langue nationale des Ecoles réclame (U.A.) à l'unanimité de toutes les organisations d'enseignement en Basse-Bretagne que cet enseignement soit donné par la méthode bilingue et que les maîtres reçoivent à cette fin l'entraînement nécessaire..."

Merkit mat ne oa anv er mennad-mañ nemet eus kelennadurezh divyezhek hogen gouzout a ranker ivez ne veze goulennet netra en ti-hont da gement-se gant an "disrannourion" o unan, paotred "Breiz Dishual", da skouer ; hag, e gwirionez, o vezañ pezh e oa stad ar yezh-d'ar mare-se ne oa ket tu da c'houlenn muioc'h moarvat.

Pezh a zo heverk, en diwezh, avat, ha pezh a zo nevez emichañs, eo e oa krog Breizhuheliz da gemer perzh er stourm evit ar yezh evel Breizh-Uheliz. Ar chaloni Bossard e unan, da skouer, hervez ar mennad en doa kenlabouret da skridaozañ, en devoa kinniget urzhia ur brofadeg - moarvat un doare kest a seurt gant an hini a voe aozet e Breizh gant "Emgleo Breiz" war-lerc'h ar brezel diwezhañ - evit skoazellañ ar yezh.

Steuziañ a reas an arvez-mañ eus stourm "Unvaniezh Arvor" war-lerc'h ar brezel. Kemmet e oa emgav ar yezh war ar maez end-eeun ; krog e oa an teodyezhoù da gilañ da vat. Dre se e wiskas ar stourm evit ar yezh doareoù nevez, gant GWALARN pergen. War ar marc'had, Yann Choleau an hini eo en doa kroget e stur ar gevarzhe ha petra bennak ma oa hemañ ur brogarour mat a Wizurieg ne dizhas biskaozh peurzeskiñ ar yezh vroadel ha ne gendalc'has ket nemeur gant an arvez-se eus politikerezh ar vrogarourion a rene "Unvaniezh Arvor" en he deroù. A-hend-all, a nebeudoù e tizerias ar gevarzhe daoust ma padas betek en tu-hont d'an eil brezel bed, a-drugarez da bennegezh ha da zalc'husted he rener hogen hemañ, a-benn neuze, ne c'helle mui leuriñ nemetañ e unan dirak ar foran hag an Emsav. Tro hor bo da gomz adarre eus "Unvaniezh Arvor" en eil kevrenn an oberenn-mañ a vo gouestlet d'an eil Emsav, dres.

NOTENNOU.

I. Andarempredoù keltiek en "Unvaniezh Arvor"

E' kendalc'h douarnenez e oa erruet un toullad darempredoù a Gembre : H.M. Morgan, Treherbat, E. Waters, an dimezell J. Edwards

ha Mary Rosser : un dileuriadur pouezus a-walc'h e oa eta. Erfin, Daniel Radcliffe e unan, saver-listri e Kêrdiz a oa deuet da arvestiñ ouzh gouelioù breizhek Douarnenez, o tegas gantañ ul lizher a-berzh ar barzh kembreat Cochfari, maer kczh Kêrdiz. Talvezout a ra ar boan menegiñ an darvoud-mañ rak diskouez a ra penacs e oa chomet an darempredoù etrekeltiek e dalc'h ar stourmerion o devoa kuitaet K.B.B.

II.

Niver izili "Unvaniezh Arvor", da geñver kendalc'h Douarnenez a oa 204. Distankoc'h e oa eget hini "Breuriezh Breizh" e barr he brud hogen barr-kenderc'hañ an izili a oa kal uheloc'h evelato.

Moarvat e oa brasoc'h niver izili K.B.B. hogen ne gaved stourmer gwirion ebet en o zouez, nemet ar rener e unan.

III

"Sizhunvezh keltiek" a oa bet un doare "Eisteddfod" ha "Gorsedd" war un dro, gant un eured drouizel zoken, hini Betsie Jones ha Pol Diverres a zlee mont da chom e Kembre.

Pennad 16

Arvezioù eus ar stourm
evit ar yezh a-raok ar brezel
bed kentañ: Breuriezh ar brezhoneg
ha strivadoù all .

E 1912, hervez bloazdanevell UNVANIEZH ARVOR e oa 300 bugel o studiañ ar yezh e Treger, Goelo, Kernev-Uhel (unan eus ar skolaerezed a oa Filomena Kadoret a zlee embann neuze u un dastumad barzhonegoù hag ur romant : "Bleunioù ar Garantez")

Anv a oa a voulañ un dornlevr evit ar vugale-se hag un "actrouniezh spredel" eus an amzer-se, Anatol ar Bras, a oa dedennet meurbet gant labour "Breuriezh ar Brezhoneg" ha kemeret en doa warnañ zoken aozañ ur c'hest e-touez Iwerzhoniz Amerika - o devoa koulskoude da bleidiñ gant o yezh-int hag o emsav-int - evit harpañ anezhi p'edo oc'h ober ur veaj er Stadoù-Unanet d'ar mare-se. Eus du-hont en devoa degaset 300 lur acour gall ha profet en doa ar sammad-se d'ar Vreuriezh da embann un dornlevr evit he skolidi.

Moarvat n'he doa ket tizhet an aozadur sevel kreizennoù er-maez eus Treger, Kernev-Uhel hag Erec'h hogen e soñj e oa en em ledañ penn-da-benn da Vreizh. Padal ez eo dav merkañ e oa diempret a-walc'h holl strivadennoù ar Vreuriezh. N'oa ket deuet a-benn zoken da gempenn ur framm unvan evit Breizh a-bezh ; skourr Treger ha Kernev-Uhel a chome distag a-grem diouzh hini Bro-Erec'h. Diouzh e du en doa klasket Taldir, gant e spred hiniennelour, sevel e reizhiad-kelenn-efi ha brudañ ar yezh endro d'e c'hlad e Keraez ; KENDIRVI BREIZ-IZEL a oa anv ar gevarzhe en devoa savet ha mennet e oa da drevezañ AR C'HEVRE GOUEZELEK(1). Diskleriañ a raimp pelloc'h a-hend-all

(1) Komz a raimp eus "Kendirvi Breiz-Izel" en ur pennad all.

Evelato e oa "Breuriezh ar Brezhoneg" urzhiet mat a-walc'h, e Treger da vihanañ. Klask a rae renerion an aozadur dizoleiñ "tud a zoare" - gouvriaded evel ma lavarer hiziv - er parrezioù evit fiziout enno ar gang a gelemmer brezhoneg. Setu a-hend-all geriennoù an daneveller Fañch Even evit ar bloavezh 1913 :

"Pa ouzer kavout en ur barrouz un den a zoare tuet mat evit ar brezhoneg ha kristen (1) e vez graet ur vodadenn evit displegañ d'an dud mennoz ha talvoudegezh ar Vreuriezh..."

Goulennet e veze neuze digant an danvez skolidi paeañ ur skodenn a bemp real (pemp real a oa un tammig ouzhpenn paeamant pemdezies ur micherour en amzer-se) a servije da brenañ kaieroù h.a. - sternañ ur skoliad - hag ur c'houmanant d'ar gelaouenn ARVORIG. Ar gelaouenn-se - moulet dister d'hon tañva-ni a hiziv, ha teuc'h a-walc'h pa n'oa ket ouzhpenn 16 pajennad enni bep taol - a oa pouezus a-walc'h evelato rak talvezout a rae da zornlevr-skol d'ar vugale. Pa veze bet bodet 10 skoliad hennak en ur barrez e veze graet ivez ur gouel a-berzh ar Vreuriezh e fin ar bloaz-skol. A-hend-all - evit peurdaolennañ doare ar Vreuriezh - ret eo gouzout e veze lidet an oferenn evit an izili anezhi e pep parrez peder gwech ar bloaz, da geñver gouelioù sent vrezhon egiz Sant-Erwan pe Santez Anna.

An aozadur-mañ en devoa tizhet 26 parrez e Treger ha Kerne er bloaz 1913, en o zouez Plezidi, Sant-Nikolaz ar Pelem, Fleuveur-Bodoù, Mael-Keraez, Plestin, Duod, Peurid, Bourc'h-Vriag.

Kement-se a veze graet gant aotre an eskopti, dindan evezh Erwan ar Moal, F. Even, F. Vallee, hogen daoust d'an aotreadur-se he devoa an oberenn poan da vevañ. Pummer e oa koust ar gelaouenn: kant lur ar miz. Profoù a zegouezhe dezhi koulskoude, zoken eus Amerika, evel m'hon eus merket : an tri-c'hant lur kestet gant Anatol ar Bras e Boston e-touez Iwerzhoniz ; eus Krec'h-ar-Roue, er C'hanada, en devoa kaset ar Mason daou-c'hant lur aour ouzhpenn d'ar gelaouenn. Goude-se e oa bet anv a greskiñ temadur ar gelaouenn hag a voulañ 1.000 skouerenn anezhi e-lec'h 700.

(1) An aozadur-mañ a chome en angant an Iliz.

Unelratozhioù a oa d'al luskad-mañ moarvat ha klask a raed kadarnaat ar stourmerion anezhañ dre reiñ dezho ur stummadur kefredel bennak ; aliañ a raed dezho, da skouer, lenn ar "Psychologie de l'éducation" eus Gustave Le Bon pe c'hoazh "L'éducation des classes moyennes et dirigeantes en Angleterre" - Bro-Saoz a oa neuze e barr he c'hlod hag he galloud - gant Max Leclerc, - hep kontañ oberenn an amerikan Breyse "Méthodes américaines d'éducation générale et technique" pe c'hoazh e saozneg "Welsh as a specific subject to elementary schools". Ar roll-mañ endeeun a ziskouez e oa F. Vallee ha dreist-holl Meven Mordiern gwir awerion an aozadur rak al levrioù gallek meneget a-us a oa e-touez levrioù muiañ-lennet Meven Mordiern hag an hini diwezhañ a zameuc'h mat ivez ar preder a lakae F. Vallee da ginnig bepred Kembreiz da skouer da Vreizhiz.

Roll an daou zen-se e Treger a ziskleir ivez perak ne dizhas ket an aozadur-mañ en em ledañ kalz er-maez eus ar rannvro-mañ dres. Loeiz Herriou - an dra-se a zo anavezet mat - ne oa ket douget nemeur, hag en kouer ha den eus ar bobl, o vevañ e-touez ar bobl, d'ar gefredourion a seurt gant Vallee ha Meven Mordiern a felle dezho - setu pezh a zouje ar gwenedour - reoliñ an Emsav a-bezh en anv o gouiziegezh. En abeg d'an enebiezh-se etre pennoù an emsav e Treger hag e Gwened ne voe ket tu da genframmañ an daou skourr eus an aozadur a chomas dishual an eil diouzh egile betek ar fin, ken na voent kaset da get o daou gant ar brezel. Ret eo lavarout ivez ne oa ket Loeiz Herriou e unan o tisteurel beliezh ar gefredourion : izili abred an Emsav kentañ, Taldir ha Leon ar Berr, da skouer, ne fellas dezho biskoazh plegañ da levezon Vallee ha Meven Mordiern (1). Anzav a ranker a-hend-all o devoa an disrannerion abegoù da chom hep kenlabourat gant stourmerion skourr Treger : liv Treger, dres, a oa war yezh ARVORIG ha kement-se a oa ur skoilh a vire a skignañ ar gelaouenn er rannvroioù all ha dreist-holl e rannvro Erec'h.

(1) Meneget em eus dija afer "Kendirvi Breiz-Izel". Evit Leon ar Berr, kenseurt Taldir, en devoa savet ur skol dishual en Erge-Armel. A-hervez e oa ivez ur skol digenvez all e Skrigneg.

Daoust d'an dicuer a gelaouenn e rannvro Erec'h, avat, e oa bleunius a-walc'h ar Vreuriezh ha deuet e oa a-benn da gemer he lañs eno e 1913 ; ur spered broadel mat a oa dezhi ivez, evel m'en diskouez an arroudem-mañ da heul diwar bluenn Per Mokaer :

"Les patriotes bretons fiers de leur langue nationale n'ont pas manqué au Morbihan ; des sociétés de plus en plus nombreuses et de plus en plus puissantes se créèrent et entreprirent l'éducation nationale du peuple breton..."

A-hend-all, DIHUNAMB" a oa bet krouet dek vloaz a-gent. Er penn-kentañ n'he doa ket ar gelaouenn graet berzh kement-se dre ma oa brezhonegerion ar rannvro-se muioc'h dezisk c'hoazh eget er rannbarzhioù all ; kalz eus ar remziadoù kozh, ar re a ouie ar yezh ar gwellañ, ne ouient na lenn na skrivañ. Setu dres pezh a stade Per Mokaer :

"S'il ne lisait pas sa langue nationale, c'était le plus souvent parce qu'il ne savait pas lire..."

A-c'houdevezh e kreskas niver ar skouerennoù moulet betek tizhout meur a viliad, tri miliad bennak moarvat. War un dro e teuas Dihunamb da c'hoari roll Arvorig e Treger nemet ne oa ket miret da vugale ar skolioù hepken hogen skignet e-touez an holl vrezhonegerion ha dre zegouezh e veze implijet evit deskiñ lenn d'ar re yaouank. E gwirionez, adal ma oa bet savet "Breudiezh ar brezhoneg" (1) he doa ar gevarzhe-se en em harpet war ar gelaouenn; diazezet e oa war ar gevredigezh "Mignoned Dihunamb". Diouzh un tu all, arc'hant a voe kavet evit skoazellañ ar Vreuriezh : aozet e voe ur skodennadeg a genderc'has ur sammad a 300 lur aour gall, pezh a oa heverk a-walc'h pa soñjer ne oa nemet 400.000 brezhoneger er Morbihan.

Adreizhet e oa bet "Breudiezh ar Brezhoneg" e-kerzh ur vodadeg a oa bet dalc'het e miz Genver 1913 en Henbont. D'ar c'houlz-se e oa bet diuzet Iwan an Diberder ha Per Mokaer da renerion hogen damc'houde e tilezas an Diberder e gang evit an arbennoù a reas dezhañ kuitaat UNVANIEZH ARVOR war-dro ar mare-se

(1) "Brediah er brehoneg".

a-gevret gant Yann-Ber Kalloc'h. Da heul an disparti-se e klaskas ar renerion a chome e penn an aozadur luskañ da vat an obererezh hag embann a rejont e sell da se ur c'halvadenn daer ebarzh niv-erenn ar c'hentañ a viz Meurzh 1913 eus ar "Pays Breton".

Neuze ivez e oa bet divizet staliañ en Orient sez ar gevredigezh ; houmañ eta a voe renet ha meret gant ur c'hengor annezet er gêr-se. Diferet e oa bet lakaat pevar real da skodenn d'an izili (pemp real e Treger) h.a.

Ret eo lavarout amañ e oa koulz uheiratozh da skourr Erec'h ar Vreuriezh ha da hini Treger. A-benn neuze e oa deuet brud ar "C'hevre gouezelek" betek Breizh ha reiñ a rae "Breudiezh ar brezhoneg" e rannvro Erec'h dezhi hec'h unan paliou ar C'hevre en Iwerzhon. Bez e oa, emezeur en danevellskrid embannet ebarzh bloazlevr UNVANIEZH ARVOR e 1913 :

"une grande analogie entre la ligue gaélique et la Brediah car tout ce qui a trait à notre langue nationale ne saurait lui être indifférent..." (1)

N'eo ket dre zegouezh e rae Per Mokaer dave d'ar "C'hevre gouezelek". Ar stourmer-mañ a ouie mat ar saozneg ha bemnoz d'an anaoudegezh-se en devoa gallet skoulmañ darempred gant Emsav Iwerzhon hag ar "C'hevre gouezelek" pergen.

Amkaniou ha doareoù-labourat Breuriezh ar Morbihan ne oant ket penn-da-benn ur seurt gant re Treger. Gwell e oa ganti tizhout war-eeun skolaerion ha skolaerezed kentoc'h eget klask stummañ kelennerion hec'h unan ; lezel a rae ivez frankiz da bep kreizern. A-hend-all e tremme ivez ouzh diazezedigezh ur skolañ hañv ("Summer school") bepred diwar skouer Iwerzhoniz hogen war a hañval ne voe kefleuniet biskoazh ar rakwel-mañ (e 1913 edod ; arabat eo ankounac'haat nepred an dra-se).

An diaesañ evit ar "vBreudiezh" - peogwir e oa mennet da

(1) Kendalc'hidi UNVANIEZH ARVOR en Henbont e 1913 o doa trugarekaet Per Mokaer evel henn : "remercie Monsieur Per Mokaer de sa communication sur les collèges gaéliques d'Irlande et engagevivement ses amis à suivre de près le mouvement afin d'en tirer tout le profit désirable pour notre pays..."

oberiañ dre hanterouriezh ar skolioù kefridiel - e oa dont a-benn da glenkañ un eurvezh brezhoneg war roll-amzer ar skolioù -se end-eeun. A-benn ar fin ne oa bet kavet tu d'ober skol vrezhoneg nemet da sul (1) goude ar gousperoù. Graet e veze neuze ur vodadeg, distaget ur brezegenn mennet da :

"Intéresser les enfants, faire sentir l'utilité de ce travail supplémentaire, éveiller et faire appel à leur patriotisme..."

ha neuze e veze roet ar gentel.

Pal ar c'hentelioù e oa - na disoñjomp ket - deskiñ lenn ha skrivañ ar yezh - e doare Gwened - d'ar skolidi a oa holl neuze brezhonegerion a vihanik, o klask didrefoedañ ha glanaat ar brezhoneg e oant kustum da gomz. Evit an drevell-se ez implijent "Dihunamb", ar "Breton usuel" eus Loeiz Herriou, ha da vagañ o brogarantez "Istoer Breizh pe hanez ar Vretoned" nevez embannet neuze gant ar gelaouenn, ur mell levr a zao-c'hant pajennad, moulet war baper dister hogen marc'had mat hag aas da skignañ en abeg da se.

Ret eo anzav ne reas ket ken bras berzh Breuriezh ar Morbihan dacoust d'he mennadoù bras hag hini Dreger (merket hon eus ne oa ket urzhiet kerkoulz d'hor soñj). Deuet e oa a-benn da sevel teir skol sul padus hepken en Inzinez hag e Langidig pergen. A-benn ar fin a-hend-all ne oa ket stag ar skolioù-se ent strizh ouzh ar skolioù kefridiel, ma lakaer e kont evelato div skol gefridiel evit ar baotred e Bubri hag e Branderion ha seizh skol a verc'hed e Ploue, Teiz (war vevenn ar yezh e reter Gwened), Kamorz, Plouvargad, Kistinig, Iannvaodan, Gwened.

Kalz en tu-hont d'ar c'helennerzh ez ae avat oberererezh ar stourmerion evit ar yezh e rannvro Erec'h ; un obererezh brudañ e oa dre vras ha rak-se e voe diaes dezho en em azasaat ouzh ar stumm obererezh-se e oa ar c'helennerzh. War ar marc'had n'oa marteze nemet Per Mokaer en devoa ur gwel sklaer a-walc'h eus al labour a vije bet da ober ; hag eñ a oa yaouank c'hoazh d'ar c'houlz-se, nevez deuet d'en em staliañ en Oriant ha nebeut sel-
aouet moarvat gant stourmerion goshoc'h egetañ hag en em gave war

(1) Bepred gwengel ar "Skol sul kembraek".

an dachenn abaoe pelloc'h egetañ. E gwir ez arvere ar stourmerion bepred an doareoù obererezh henvoazel - ma c'heller lavarout - deurus d'an dud war an oad kentoc'h eget d'ar vugale. Loeiz Herriou hag e genseurtered - Andrev Mellag dreist-holl er penn-kentañ - a rae troiadoù war ar maez hag a rae prezegennoù d'ar gouerion diwar-benn ster ha talvoudegezh an Emsav ; skignet e veze ganto follennoù nij ha kanaouennoù brezhonek a voaze ar vrezhonegerion ouzh ar yezh skrivet ; kinnig a raent d'ar genwerzhourion aozañ enskrivadurioù brezhonek war dalbennoù o ziez. Ha ret e vefe menegiñ ivez stroll c'hoarierion vrezhonek Keranna, renet gant Job ar Bayon a roe abadennoù er bourc'hioù war ar maez.

Hogen plediñ a reomp bremañ gant kelennerzh ar yezh e komzog ar vro ha mat e vefe, evit klokaat an daolenn hon eus treset, ensellout bremañ degouezh ur framm kelenn all - ma c'heller komz eus framm ! - lec'hel rik hennezh, ha lakaat en e blomm endro da Wened ha pergen e gourenez ar Wizh. An embregadenn-mañ a voe renet war-dro ar bloavezhioù 1912-1914. Bez e oa eta er c'horn-bro-se un dimezell de Salins he doa sammet warni aozañ ur reizhiad skolioù brezhonek. Bodet he doa endro dezhi un dek a gelennerzed "dix dames ou demoiselles appartenant aux classes aisées", eme an danevell. Ar stroll kelennerzed-se a rae kentelioù brezhoneg en Hezoù, e Sarzhav, e Sant-Armel, e Sene, dre vras eta e gourenez ar Wizh - e-lec'h e oa ar yezh toc'hor endev - ur wech pe ziv ar sizhun. Un doare framm a oa bet savet evelato peogwir en em vode ar c'helennerzed e ti unan anezho, e Sant-Armel, evit peuzeskiñ ar yezh ; hag evit diskouez kalonegezh ar brogarouezed-se e kont an daneveller kement-mañ :

"Plusieurs viennent de loin et s'astreignent à faire dix-douze kilomètres pour aller au cours. L'une d'elles est obligée de traverser le Golfe. On nous cite même une élève aisée qui fait chaque semaine trente kilomètres en automobile pour assister à la leçon..."

Skoazellet e veze an danvez skolaerzed brezhonek gant Mathurin Boulio, sekretour maerdi an Hezoù, a rae e unan kentelioù

brezhoneg foran dicuzh ar sul ; di e teue bugale ha tud war an oad ; harpet e oa an embregadenn-mañ gant "pennadurezhioù dinazel ha relijiel" .

Setu ar fedoù. Eveljust n'eo ket aes dougen ur varmadenn war o divoud. Ar pezh a c'heller stadañ evelkent, da gentañ holl, eo ne oa ket stag war-eeun ar rouedad skolioù-mañ ouzh un aozadur bennak all. Da skouer, war a hañval, n'en doa darempred nes ebet gant "Breudiezh ar brezhoneg" eus an Oriant, pezh a vije bet natur a-walc'h ; seul danavoc'h e tleñ bezañ bet an ere en dije e staget ouzh Breuriez Treger (ret eo derc'hel kont eus an diaes ma oa kehentañ en amzer-se). Dre se e chome an embregadenn-mañ hiniennel a-grenn, gant an holl wanderioù a zo stag ouzh an hiniennelezh. Anat eo ne c'helle ket seurt labour digenurzh herzel nemeur ouzh darvoudoù dispac'hus evel ar re a voe degaset gant ar brezel un nebeut mizvezhioù war-lerc'h. Gwanderioù all a oa d'an embregadenn-mañ a-hend-all : chom a rae ar c'helennered e par an drivliadelezh hag ar youl-vat ; o mennad a oa mirelour hepken moarvat daoust ma ranker notañ e raent ur striv evit deskiñ ar yezh hec'h unan. Hogen daoust ha gouest e oant da empennañ e o dije gallet komz ar yezh-se kenetrezo, da skouer ?

Diwanadur an embregadenn-mañ a vefe da studiañ ivez (1). Kredapl ^{oo} - pa anavezet orin kevredigezhel an oberourezed a rae war he zro - e oa stag houmañ ouzh al luskad breizhat-macraour a oa leuriadet e rannvro Brez'h gant Yann-Ber Kalloc'h, Iwan an Diberder hag e gelaouenn BRITTIA ; ar re-mañ avat - daoust ma n'edont ket penn-da-benn er memes kostezenn gantañ - o devoa un darempred bennak gant Meriadec de Lentivy-Tredion a glasse ivez azasaat kelennadurezh v'aurras ouzh degouezh an Emsav. Hemañ avat a oa o chom e Senolf, ul lev hanter bennak en hanternoz da Wened ha n'eus netra souezhus m'en dije bet tro da anavezout holl

(1) Kavout a ra deomp e ranker derc'hel kont evit diskleriañ an diwanadur-se eus hengoun lenegel lec'hel Gwened a voe kreizennet endro d'an ti-moulañ Galles a embannas nouspet levr a zevosion abaoe an trivec'hvet kantved ; e parrezioù war vevenn ar yezh e kaved levrioù brezhonek a zevosion betek ar brezel bed kentañ. Kement-se n'en deus ket miret ouzh ar yezh a zieriañ hag a vervel eno.

stourmerezed "framm kelenn" gourenez ar Wizh.

A-hend-all ez eo aes diskleriañ perak e oa c'hoarvezet an disrann etre an embregadenn wenedat-mañ ha "Breudiezh" an Oriant : e 1913 o devoa ar vaorasourion a blede moarvat en un doare bennak gant oberiadenn gourenez ar Wizh dilezet "Unvaniezh Arvor" ; emezelet o doa enni moarvat dre 'n arbenn ma plije dezho politikerezh yezhel an aozadur nevez ; hogen abarzh pell e oant bet diaezet ennañ dre ma nac'he "Unvaniezh Arvor" degemer o c'houlzelouriezh roueelour maorasat (Taldir, Choleau, Berthou hag ar varzhed, egiz m'hon eus gwelet, a fougase da vezañ gwerin-elourion). Strizh a-walc'h e oa avat al liammoù a stage ar "Breuriezhoù" ouzh "Unvaniezh Arvor". Diboan kaer e komprenor dre se ne glaskas ket an oberourion a oa kiriek da embregadenn gourenez ar Wizh en em glevout a dost gant "Breuriezhoù" "Unvaniezh Arvor" p'o devoe graet o soñj kuitaat an aozadur-se.

Evel ma weler, dizunvan a-grenn e oa al luskad kelenn ar yezh da zerc'hent ar brezel bed kentañ. Meur a abeg a c'heller reiñ d'an dizunvaniezh-se. Da gentañ, an diouer a gealiadurezh diwar-benn ar yezh hec'h unan. Daoust ma oa prest atebion skourroù al luskad-se e Treger, e Kernev, en Oriant (e Gwened ne ouzomp ket) da ober eus ar brezhoneg yezh vroadel Breizh e raent outañ e gwirionez, dreist-holl, evel ouzh ur yezh a vije bet da virout d'ar gouerion war ar maez e Kornog ar vro ; hini ebet eus ar skourroù-se ned eo aet en tu-hont da zeskiañ lenn da vugale diwar ar maez en o zammig trefoedaj. Moarvat e klasked un tammig reiñ deskamant dezho war Vreizh, istor Breizh h.a. hogen hep diazez politikel start. Ne zremmed ket ouzh prientiñ stourmerion d'o labour. Dre vras -ahend-all e oa izel a-walc'h deskrez darn eus ar re a oa atebek eus ar "Breuriezhoù".

Hogen ur fazi e vefe kredañ e ranker tamall an dud bepred hag en degouezh-mañ o hiniennelouriezh pe o diouzigezh. E gwirionez, gant ar wellañ youl-vat ne oa ket tu d'ar mare-se da lakaat ar brezhoneg da c'hoari roll ur yezh vroadel e Breizh : o vezañ m'en em harped hepken war an teodyezhoù lec'hel e oa diaes implijout an hevelep dornlevrioù e pep rannvro a Vreizh ; ar yezh skrivet

hec'h unan ne oa ket unvanet da vat - Englev 1908 ne oa ket kozh neuze ha rannyezh "Wened" n'eus forzh penaos ne oa ket perzhiek ennañ - ; war ar marc'had ne oa ket kresket a-walc'h ar yezh d'ar mare-se evit gellout kevezañ gant ar galleg hag amañ anezhañ ; an darn-vuiañ eus ar stourmerion ne ouient nemet ur stlabez brezhoneg bennak. En abeg da gement-se holl eta e oa tonket d'ar stourm evit ar yezh menel darnel ha diempret a-grenn ; en trede Emsav hepken e vezo prientet ar binvioù a actreo d'ar stourmerion kas da benn ur stourm efedus war dachenn ar yezh.

Pennad 17

Emzalc'h ar c'hostezennoù gall
e-keñver ar c'hentañ Emsav
Degouezh an Iliz

N'eur ket hep gouzout ez eo bet an Iliz abaoe pell gelenek pe zisfizius ouzh memadoù politikel an Emsav. Metra souezhus e kement-se o vezañ ma ne c'hell an Iliz bezañ nemet un aozadur gall dindan ar renad gall e Breizh. War a hañval koulskoude e tiskouezas bezañ tuet a-walc'h d'an Emsav e deroù ar c'hantved, e keñverioù zo, da vihanañ.

Kounañ a ranker, da skouer, e voe krouet "KROAZ AR VRETONED" renet gant F. Vallee koulz hag ar "Pays Breton" gant harp kelaouennoù katolik zo evel "La Croix des Côtes du Nord" ha "La Croix du Morbihan". A-hend-all, a-raok ar brezel kentañ, ne voe ket trubuilhet Y.V. Perrot en e labour brogar, evel rener ar "Eleun-Brug" koulz hag evel rener "Feiz-ha-Breizh".

Moarvat ne c'heller ket komz en degouezh-mañ eus un emzalc'h kefridiel eus an Iliz e-keñver an Emsav. Bepred hon eus afer ouzh emzalc'hoù hiniennel ha saviadoù lec'hel. Lean pe lean a c'helle eztaolif e zisfiz ouzh ar Gorsedd hag eskob Sant-Brieg heskinañ brogarourion Dreger hep enouestlañ an Iliz evit keloù se ; eskibion Vreizh ne rejont biskoazh diskleriadur kefridiel ebet e ser an Emsav, da nebeutañ evit barn anezañ.

Pa c'hoarvezas kement-se koulskoude e deroù ar c'hantved e voe anat er c'hontrol e oa prest an eskibion e Breizh d'en em harpañ war an "devoud brezhon" evit herzel ouzh stourm ar gouarnamant gall a-enep d'an Iliz. D'ar mare-se o devoa ar pemp eskob e Breizh kensinet ul lizher a oa bet savet gant arc'heskob Roazhon evit disteurel ul lezenn c'hall en anv "ar Bobl vrezhon" (arc'heskob Roazhon en devoa kemeret perzh karkoulz hag ar re all daoust maz eo

stag eskopti an Naoned ouzh arc'heskopti Teurgn.)

Dre vras, ar stourm a-enep d'an Iliz e deroù ar c'hantved e Bro-C'hall en devoa atizet an emskiant bobl e Breizh evel maz eo anat en displegadegoù a voe kaset da benn e Breizh a-bezh d'ar c'houlz-se hag a wiske un arster broadel alies. Kounomp a-hend-all an diskleriadennoù brogar taer a oa bet graet gant renerion an Emsav e-pad un abadenm aozet gant K.B.B. en Alre e 1903 hag hon eus meneget e-lec'h-all. Dre vras, gwir eo, e oa techet an Emsaverion - Y.B. Kalloc'h eveljust hogen kalz a re all - da ober eus ar relijion e Breizh unan eus merkoù-digenmañ ar vroadelezh a ziforc'he Breizh diouzh Bro-C'hall (ha natur a-walc'h e oa kement-se o vezañ ma oa kristen 95% eus ar boblañs) evel m'en diskouez ar meneg-mañ eus ar "Pays Breton" end-eeun war an niverenn 394 eus an 31 a viz Mae 1914 :

"La Bretagne est encore religieuse et la France ne l'est plus, dans sa plus grande partie..."

An emzalc'h-se eus an Iliz kentoc'h a-du gant an Emsav a baouezas war-dro 1910, adal ma erruas e Breizh eskibion nevez anvet gant bennozh ar gouarnamant gall ; abred tre a-hend-all he doa klasket an Iliz en em zistrollañ diouzh ar gostezenn roueelour ha n'he devoa ken chañs ebet adal deroù ar c'hantved da gemer ar galloud endro emberr e Bro-C'hall. O vezañ ma ne oa ket gwelet gwelloc'h an Emsav - a staged aes a-walc'h ouzh ar gostezenn hengounelour gall, evel ma ouezer - gant ar gouarnamant gall e strivas pennadurezhioù an Iliz e Breizh d'en em zigevarzhañ diouzh an Emsav kerkoulz all. Anat eo e oa pouezusoc'h evit an Iliz kavout ur mod-kenvevañ gant ar Stad c'hall a oa ur galloud fetis eget gant un Emsav ha na oa ket evit c'hoari roll politikel ebet d'ar mare-se. Evel-se eo e nac'has an eskob Morelles e Sant-Brieg skorañ e nep doare labour Frañsez Vallee hag e heskinas anezhañ e pep stumm betek ar brezel bed kentañ.

§§§§§§§

Ur fazi e vefe kredidiñ kerkoulz en devoa en Emsav dre vras darempredoù fall put gant ar gostezenn "gleiz" e Breizh, war an dachenn lec'hel, da vihanañ. Merkañ a reomp e-lec'h-all ez eo an Diberder

- un"hengounelour" koulskoude - en devoa broudet kannad an Oriant Paul Guieysse da c'houlenn digant maodiern gall an deskadurezh degas ar brezhoneg e skolioù an eil derez e Breizh. Adal an 19vet kantved e kaved politikerion republikan evel Jules Simon (1) a-du a-walc'h gant Breizh. Diskouezet hon eus a-hend-all penaos ar gelaouenn BRUG en em harpe war an tu kleiz hag an hengoun republikan e rannvro Wereg end-eeun. Hogen renerion ar "Pays Breton" ha "Dihunamb" o unan Loeiz Herriou hag Andrev Mellag, ne oant ket kennebeut enebet a-grenn ouzh an hengoun republikan-se peogwir o doa kemeret perzh e banvez ar "Fédération Républicaine indépendante" eus an Oriant e 1914 (2). A-hend-all ar stourmerion-mañ o doa kuitaet K.B.B. dre ma chome stag mui pe vui ouzh ar gostezenn roueelour gall en arbenn a bersoniezh an Estourbeillon. Setu dres avat ar pezh a lenned ebarzh ar "Pays Breton", niverenn 394 eus an 31 a viz Mae 1914 :

"Les royalistes nous promettent que sitôt le roi de retour ce sera chose faite ("kaout an emrenezh!") Hum! Je crois la décentralisation bien étrangère aux traditions de la race capétienne..."

Ar mennozioù republikan ha zoken enep-kloerelour a bare ivez en armod da sevel kelaouennoù zo evel "Spered Breiz" ma oa bet anv anezhi e kendalc'h K.B.B. Gwizurieg er bloavezh 1911 (3). E brezhoneg penn-da-benn e tilee ar gelaouenn-se bezañ skridaozet. Evit abegoù dianav deomp ne zeuas ar gelaouenn-se biskoazh er-maez hogen er baperenn-darañvat o devoa skignet atebieion an intrudu-mañ e-touez an danvez koumanterion en em ziskoueze mennozioù digemplegus a-walc'h. Embann a raed, da skouer, ne sentjed ouzh "orthodoxie" ebet (eeunet e oa an diskleriadennoù-mañ a-enep d'an Iliz emichoñs) ; evit ur wech e nac'hed derc'hel kont eus ar veleion evit plediñ gant ar skolaerion lik "sortis des entrailles mêmes de la race..."

(1) Notomp e oa prest uhelrenerion c'hall zo da anzav "broadelezh" Vreizh "in abstracto". Hervez ar "Pays Breton", niverenn 395, en devoa ar Sturieg gall Poincaré kevarc'hed an "Nation Bretonne" e Sant-Brieg evel Napoléon III a zistage ur brezegenn vrezhoneg e Roazhon e 1858 hag a verze an Association Bretonne er memes bloavezh.

(2) Kêr an Oriant a oa bet a-du gant ar re c'hlas e-pad an dispac'h gall ha savet e oa bet eno zoken ur gevarzhe a verc'hed a-du gant ar Republik. (3) Y.B. Kalloc'h a ro an titouroù-mañ hervez levr Palaux diwar e benn. Kalloc'havat a glaske dizarbenn an tamall a "genwallerezh" etre ar presbital hag ar c'hastell. "Si je suis nationaliste breton... c'est aux prêtres que je le dois..."

Ar mennad-mañ ne voe kaset biskoazh da wir, evit n'ouzer peseurt abegoù, evel ma verkemp, hogen ar brezel a voe adarre unan anezho ; ivez, stummet re vat e oa an danvez skolaerion stadel gall e Breizh evit bezañ tizhet gant n'eus forzh peseurt bruderezh brezhon bennak e ve. Dav e vo gortoz an eil Emsav ha Yann Sohier abarzh ma vo klasket skignañ keal an Emsav e metou ar skolaerion stadel c'hall, - hogen hep tizhout anezhañ da vat, evel ma vo gwelet.

=====

Pennad 18

Roll hag obererezh

ar Gatoliked en Emsav kentañ

An darn-vuiañ eus izili an Emsav kentañ a oa katoliked, war a hañval. Dre se e c'hellfe unan kompren n'o dije ket santet an ezhomm da sevel ur Strollad katolik breizhat a ziforc'h. Setu pezh a zo c'hoarvezet koulskoude adal an Emsav kentañ. Ha kement-se moarvat a c'houlenn un diskleriadur bennak.

Daou abeg a voe e gwirionez da savidigezh ur gostezenn gatolik breizhat. Unan a ziavaez : edo ar gatoligiezh en un enkadenn e framm ar Stad c'hall a oa gelenek outi ; aless"bredadur ar c'hreñvlec'h" ma oa tizhet gantañ. Evit gellout herzel ouzh hec'h enebourion e oa techet an Iliz neuze d'en em ziforc'hañ a-grenn diouzh ar gevredigezh stadel c'hall a neuze ha da sevel hec'h unan un doare led-stad. Lodek e oa avat ar Gatoliked e Breizh hag en Emsav e tro-spered ar Gatoliked er Stad c'hall peogwir edont er memes saviad hag int.

An eil abeg a zo unan a ziabarzh d'an Emsav : an elfenn difeiz ne oa ket dinerzh a-grenn e par an Emsav e unan. Menegiñ a c'hellfed, da skouer, daoust ma n'edo ket dres en Emsav d'ar c'houlz-se, Paul Guieysse (1) a bseronias ar c'houlennadeg kentañ a-du gant ar brezhoneg e Paris, a voe degaset da dDoumergue, "Ministre de l'Instruction Publique" e 1909. Hemañ avat a oa hervez an "Télégramme" eus an Naoned (2) ur radical "bonteint" bet e unan"maodiern an trevadennoù" e tevezvod Bourgeois, "uhelenorad er frañmasonerezh"

(1) Anv an tiegezh-se a zo meneget, a gav din adal luskadoù an 19vet kantved. E vab a zeuas da vezañ broadelour hag a harpas savidigezh ar Strollad broadel a-du gant ar "Bezen Perrot" e 1943.
 (2) An "Télégramme"-se eus an Naoned - netra da welout gant hini Brest, - a oa lec'hiet a zehoù. E Miz Mae 1914 e skrive e oa eus Paul guieysse "Grand Pontife aimé du Pélican blanc", hep ma oufen petra zo gwir e kement a gonte.

ha protestant war ar marc'had (1). E diabarzh an Emsav e unan e oa erruet izili nevez a oa tuet d'ar gostezenn gleiz: Anatol ar Bras, da skouer, daoust ma ne c'hoarias biskoazh ur roll bras en Emsav. Hogen oberourion all a gemeras ur roll brasoc'h e krouidigezh an Emsav kentañ ; an hini pennañ anezho a oa moarvat Yann ar Fusteg a voe kiriek da savidigezh ar Gorsedd. A-hend-all, diwar lenn ar pennañ hon eus gouestlet d'an aozadur-mañ, e veizo unan e oa awenet speregezh ar "varzhouriezh" gant ur gredenn a oa estren a-walc'h ouzh ar gristeniezh reizhkravezek. Rak-se o devoa ar c'hloer hag ar c'hloer uhel pergen - evel ma tiskleir Erwan ar Moal en ul lizher - un tamm mat a zisfiz ouzh ar "varzhed".

Deurus eo a-hend-all emzalc'h Erwan ar Moal e unan e-keñver ar Gorsedd end-eeun. Feuket e oa bet ar stourmer-mañ eta gant ar geriennoù implijet gant Erwan Berthou en ul lizher en devoa kaset dezhañ, e-lec'h e talc'he start warnañ evit ma kemerfe perzh da vat e lidoù ar Gorsedd :

"Chaque année le Gorsedd élève un cromlec'h pour honorer la race. C'est pourquoi ils doivent assister à la cérémonie avec la saie bardique..."

Seurt troiennoù avat, evel "beleg ar ouenn" en devoa Erwan ar Moal diegi da zegemer ; ha lavarout a rae da Erwan Berthou a-hend-all ne c'helle lidoù zo sevenet gant ar Gorsedd - ar gouel war ar Menez Bre, lakaomp - nemet divrudañ ar Gorsedd "à cause de son caractère anticlérical". Ouzhpennañ a rae pelloc'h :

"Le Gorsedd regarde le druide comme une sorte de prêtre de la Race ; je ne puis l'admettre ; le cœur et le travail pour la Bretagne, c'est ce qui fait le barde et non la saie ou les fêtes..."

Merket hon eus e-lec'h-all e rae ar Chaloni de la Villerabel anv eus "les mystères répugnants du Gorsedd" ha kompronet e vo goude-se ne oa ket eus ar gwellañ an darempredoù etre an Iliz hag an Emsav ; na BRUG na Strollad Broadel Breizh" ne cant tomm tre ouzh un Iliz a heskine brogarourion gristen (2)

(1) Eus an Oriant e oa Guieysse hag ar gêrig-se a hañval bezañ bet tuet d'ar republikanelezh. Kv. Afer gwezennoù ar Frankiz eno.
(2) Keal a zo amañ eus an Eskob Morelle e Sant-Brieg a glaskas skoilhañ labour Frañsez Vallee en e eskopti.

evel Frañsez Vallee o virout outañ a gas da benn e labour emsaver hag a chome stag tre ouzh ar Stad c'hall bout ma oa handeet gant houmañ.

N'eus forzh penaos, dre ma n'en em gavent ket en o aez en un Emsav amgristen pe diwar ar goanag - gwall douellus - da c'hellout levezonañ an Iliz hec'h unan ha da dreññ anezhi a-du gant Breizh a-benn ar fin-hemañ a c'helle seblantout bezañ un amkan a-bouez o vezañ ma oa an Iliz bepred pennañ nerzh kevredigezhel Breizh d'ar c'houlz-se - ez arnodas stourmerion zo lec'hiañ o emgann e framm an Iliz ha da grouiñ strolloù breizhat kristen e-pad an Emsav kentañ koulz hag e-pad an eil hag an trede Emsav(1).

E deroù an Emsav kentañ avat e oa bet a-walc'h d'ar gristenion kemer perzh el labour sevenadurel. Yann-Vari Perrot, da skouer, en devoa diazezet ar "Eleun-Brug" e 1905. Ar "Eleun-Brug" en deus padet betek hiziv (2) a oa mennet da c'hoari roll an "Eisteddfod" e Kembre (ur wech ouzhpenn e verzomp trevezerezh Emsav Kembre). Krouet e oa bet ar "Eleun-Brug" eta da geñver ur gouel eus K.B.B. e kastell Kêryann (3) da vare Meurlarjez. N'en devoa ar "Eleun-Brug" da vennad d'ar c'houlz-se nemet :

"défendre les plus anciennes traditions de la Bretagne catholique, maintenir la langue bretonne, soutenir le renouveau littéraire, revendiquer pour la Bretagne le plein exercice de ses droits..."

Ma lakaer a-ziforc'h al lavarenn diwezhañ a c'hellfe goustennañ ur mennad politikel bennakne ziskouez an embann-mañ nemet un dezo broadel hengounel. E devoud, da geñver gouelioù ar gevarzhe-mañ, ez aozed ambrougadedoù a oa mennet da daolennañ marevezhioù zo eus Istor Breizh, en tu-hont d'ar c'henstrivadegoù distagerezh ha kanerezh evit ar vugale hag a veze kempennet diouzh reiñ d'ar vugale a gemere perzh enno un alberz bennak eus istor o bro ha diouzh broudañ en o c'halon al loro'h broadel(4).

(1) Tro hor bo da studiañ taolioù-arnod seurt se en eil hag en trede Emsav. (2) A-benn ar fin en deus oberiet evel kevarzheoù an Emsav kentañ, dre gendalc'hoù bloaziek hepken. (3) Anv a oa bet d'ur mare a zaskoriñ ar c'hastell-se d'an aozadurioù sevenadurel breizhat.
(4) Strolloù ledemsañvel zo evel ar Falz hag ar "Eleun-Brug" end-eeun o deus kendalc'het da oberiañ e seurt doare betek hiziv.

Ar "Bleun-Brug" a oa bet empennet, egiz ma ouzer, evel ur rann eus an obererezh katolik e Breizh. Diwar studiañ avat an darempredoù diaes en devoe Yann-Vari Perrot gant mererezh e eskopti adal ar c'houlz-se e teuer da vezañ pegen dall e oa deuet da vezañ gouvriaded ar gevredigezh vreizhat a neuze, frammet dreist-holl endro d'an Iliz - kent bezañ adframmet abarzh pell endro d'ar Stad c'hall - ouzh gwir saviad ar bobl vrezhon. Ar re a oa ar muiañ digor ouzh "Kudenn Vreizh" a oa a-wechoù estrenion evel arc'hannad A. de Mun a glaskas sikour Y.V. Perrot da gas e vennadoù da benn. Respontet e veze da hemañ gant beleion all eus an eskopti, da skouer, "ne oa ket taget ar brezhoneg gant ar Stad c'hall" peogwir, moarvat, ne oa ket berzet komz brezhoneg war ar straed. Hag ar veleion-se a vire ouzh o farrezianiz a vont d'ar gouelioù azet gant Y.V. Perrot en abeg d'an "dizurzhioù" a c'hellje bezañ c'hoarvezet enno. Adal 1911 e oa taerret zoken tamalloù an eskopti a-enep d'ar "Bleun-Brug". Rebech a raed outañ bezañ "neptu", reiñ re a ziduamant d'ar bobl pe, c'hoazh, distreiñ anezhi dicouzh al labour-douar(1). D'an tamalloù-se ne oa diazezet ebet e gwirionez (2), ha kiriek e oa dezho hepken youl-fall ha feiz fall mererezh gall eskopti Kemper hogen talvoudus eo o gwiriañ peogwir e tiskouezent mirelouriezh berrbooll ha sonnet pennadurezhioù an Iliz e Breizh ha na oant gouest e nep doare da verzout ha, seul vui, da heñchañ ha da reoliñ emdroadur didec'hus ar gevredigezh vreizhat.

Yann-Vari Perrot, padal, ne guzhe tamm ebet e vroadelouriezh vrezhon (ha rak-se, evel just, e oa kement a zisfiz outañ e Kemper) peogwir e skrive da vikel vras e eskopti d'ar 15 a viz Ebrel 1913, e sigur e ratozha sevel e Kêryann ur c'hoariva poblek (3) a seurt gant an hini a vleunie e Gwened - diazezet e oa e Santez-Anna-Wened - dindan renadur Job ar Bayon en devoa da bal ar

"relèvement national ayant pour point de départ la défense et la culture de la langue bretonne..."

(1) Ur c'hloer napoleonat-jañzeniat a oa o ren e Breizh en naontekvet kentved, deuet da vezañ darn eus ar fram stadell c'hall zoken en amzer an Disparti, start ha dellidus a-hend-all. Azet e veze gouelioù ar Bleun-Brug e-kreiz ar sizhun. (2) Gouelioù arall - laik ar re-mañ - a veze azet gant sikour ar varzhed hag harpet e vezent gant person Plouzevede a-du gant ar gouelioù kefridiel gall. Da hemañ, peogwir e oa gall ne veze tamallet netra. (3) Ar raktres-se ne voe sevenet biskoazh.

Mat eo isverkañ amañ ar ger "point de départ" rak diskouez a ra adarre e tremme Y.V. Perrot ouzh un obererezh brezhon kalz ledanoc'h eget an hini sevenadurel.

Ret eo ouzhpennañ n'en doa ket ar stourmer-mañ bevennet e obererezh brezhon e tachen ar gouelioù broadel hag ar c'hoariva. Pledet en deus betek e varv gant ar gelaouenn "Feiz-ha-Breizh". Ar gelaouenn-mañ, a-hend-all a zo unan eus hor c'helaouennoù brezhonek koshañ; berzh he doa graet dija en anontekvet kantved hogen adsavet e oa bet adal ar 25 a viz Mae 1899 dindan levezon azginivelezh 1898. Diwar neuze he doa kemeret perzh mui pe vui e mennadoù an Emsav, o c'houlenn ar brezhoneg er skolioù, oc'h embann studiadennoù diwar-benn ar yezh. D'ar c'houlz-se e rae an Tad Coentinn de Kerbeneat war-dro ar gelaouenn. Da heul al lezennoù lakaet da dalvezout gant an Trede Republik gall a-enep d'an Urzhioù ha d'ar Breuriezhoù relijiel e oa divroet al lean-mañ da Gembre e-lec'h e oa marvet e 1905 (1). Yann-Vari Perrot a genskrive gant hemañ abaoe 1902. War-lerc'h marv al lean-mañ eta e voe anvet ur c'hengor beleion gant eskob Kemper intent ouzh ar gelaouenn. Bez e oa eus ar re-mañ an ao.ao. Cardialaguet, Roudan, Nicolas, Perron, ha Y.V. Perrot a zileurias o galloud d'ur rener ha d'ur pennskrivagner a zichenas bezañ an ao. Cardinal ha Yann-Vari Perrot. Cardinal a lakaas degemer skritur ar Gonideg er gelaouenn. A-drugarez Doue en em glevas mat rener ha pennskrivagner ha bez e c'hellas Yann-Vari Perrot prezeg ar vrogarouriezh vrezhon ebarzh "Feiz-ha-Breiz" a oa lennet neuze gant miliadoù a gouerion, dreist-holl e Leon. Un albez eus ar vrogarouriezh-se a c'hellomp kavout er pennad-mañ da heul. savet gant Yann-Vari Perrot e 1911, d'ar mare ma sammas penn-da-benn e unan renerezh ar gelaouenn :

"Ma ne vefe ket bet breset muioc'h gwirioù hor gouenn, hor yezh, hor bro gant ar C'hallaoued eget ne vez graet re ar C'hallaoued gant ar Vrezhoneg, neuze an div bobl en em glevfe evel m'eo dleet hag hep rendaslat

(1) Ne vefe ket un dra fall studiañ kudenn an darempredoù a geveskemm etre Kembre ha Breizh war dachenn ar relijion. Tra ma teue un nebeut pastored kembreat e Breizh - Williams an hini diwezhañ e Douarnenez - e kase ar Vrezhoneg e deroù ar c'hantved un toullad leaned ha leanezed e Kembre, pergen an Tad Trebaol (kv. Eñvorennoù Vallee war an divoud-se).

abalamour d'an disheñvelidigezhioù a zo etrezo e rofent o dorm
an eil d'eben a galon vat, da vont war a-raok, war wellaat ha war
binvidikaat e pep doare, ar pezh a zo va mennoz, ar pezh a glaskan..."

Ha pelloc'h ez ouzhpenn Yann-Vari Perrot :

"Ar pobloù a varv evel an dud. Pobl Vreizh
n'eo ket marv koulskoude met war-nes mervel
emañ. Ar Vrezhonez, evit c'hoazh, n'o deus
ket nac'het o bro ; ar pezh a zo bet dec'h,
daoust ma n'emañ kethiziv, a c'hell bezañ
ware'hoazh..."

Hag en diwezh e c'houlenne Yann-Vari Perrot e

ve laosket :

"ar Vrezhonez da vistri e Breizh ur wech kaset
o gouel-Mikael da Baris..."

Merzout a c'heller e dibenn ar pennad-mañ e tiwalle
rener nevez "Feiz ha Breiz" da vezañ kemeret evit un "disrannour";
hogen sklaer eo ivez en devoa ur skiant lemm tre eus Istor Breizh
koulz hag eus he broadelezh hag e c'houlenne start eviti un dezvad
a oa par, war-bouez nebeut, da hini an emrenerezh.

Moarvat ez eo arabat kredif o devoa seurt pennadoù
ul levezon bras da sabatuiñ war al lenneion : muoc'h eget ur
pennad bras-lennet war ar prim a zo ezhomm evit ober eus ur Breizhad
gallekaet hag arallekaet ur Breizhad gwirion (sed ar fazi a zo
bet graet a-viskoazh gant an Emsaverion a zo chomet bepred war
dachenn ar bruderezh) hogen un arouez eus emroadur ar speredoù
e Breizh e deroù an agentvet kantved e oa evelato ar stumm komz
nevez-mañ.

Pezh a ranker merkañ ivez eo e felle da Yann-Vari Perrot
plediñ gant ar politikerezh e Breizh ha ne zilezas e vennad - ugent
vloaz war-lerc'h, nemet goude ma voe bet rediet gant pennadurezhioù
e eskopti. Ar youl-se da gas war-raok ur politikerezh broadel
e Breizh en em ziskouez anat er pennad gallek a voe embannet
ebarzh "Feiz ha Breiz", a-raok dezhañ zoken kregif e renerezh
ar gelaouenn hag a voe advoulet e 1926 pa oa anv a ziazezañ ur
strollad katolik brezhon ; ur stumm broadel rik a oa adarre d'ar
pennad-se. Setu a-hend-all un arroudeñ anezhañ :

"La Bretagne contemporaine, au fur et à mesure,
que sa conscience nationale se réveille ne
veut rien renier de ce qui a fait sa gloire
dans le passé /.../ Les niveleurs /.../ ne
pourront pas résister aux volontés nationales
/.../ L'oeuvre libératrice doit se poursuivre
dans chaque Etat /.../ Il n'est pas conforme
à l'intérêt général que dans un Etat où
les races sont diverses une seule étouffe et
gouverne les autres..."

Studiañ a raimp degouezh an danvez strollad katolik
broadel en trede levrenn an oberenn-mañ ha diskleriañ a raimp
perak e troas ar strivadenn-mañ d'ur c'hwitadenn. Merkomp adal
bremañ avat ne gemeras ket Yann-Vari ur perzh oberiant ha pouezus
el labour politikel pleustrek ; hogen bez e chomas bepred - kent
ha goude ar brezel - ur c'helaouenner hag un "aotrouniezh speredel"
kentoc'h eget ur c'henurzhier (1). Metra souezhus eta ma lezas
da Erwan ar Moal (Dir-na-Dor) ar samm a sevel ur Strollad katolik
breizhat a-raok ar brezel kentañ.

Erwan ar Moal eta a oa bet karget da aozañ ar stroll
a voe anvet "Emgleo Feiz ha Breiz" a oa - gouez dezhañ - un
"Essai d'organisation d'un mouvement breton catholique", war-dro
1911-12, d'ur mare ma oa an Emsav o klask nevezif ka kreskiñ.
Adal 1911, war-lerc'h kendalc'h K.E.B. e Lokronan-Leon e oa bet
skignet un trakt e-lec'h e c'helled lemm kement-mañ pergen :

"C'est une chose remarquable que les diverses
associations formées jusqu'ici pour restaurer
la Bretagne l'ont été en marge de la religion..."

Da c'houd e save Erwan ar Moal a-enep d'an neptuegezh
a oa kiriek, d'e soñj, da wanded an Emsav dre ma ne c'helle ket
hemañ, dre berzh e neptuegezh, dres, degemer ur gelaennadurezh start
nag heuliañ ur politikerezh resis ; klozañ a rae o lavarout
e ranked krouiñ un "association de Bretons catholiques". Da nebeutañ
emezañ, e vije unded e seurt strollad, pezh n'oa ket en Emsav.

(1) Gouzout a reer ne reas ket berzh an ti-embann "Emgleo Sant-
Iltud" a glaskas Yann-Vari Perrot sevel goude ar brezel kentañ.
Daoust d'e vennadoù politikel ne oa ket gouest da grouiñ un aozadur
bennak.Y.V. Perrot a zo chomet, eñ ivez, un de e unan, egiz Roparz
Hemon ivez.

Dleet eo anzav avat ne wele ket Erwan ar Moal spis lec'h ur seurt kevazhe e diabarzh an Emsav. A-benn ar fin ne oa an Englev nevez nemet ur gevazhe ouzhpenn e-touez kevazheoù all ha ne c'helle ar savidigezh anezhañ disoc'hañ nemet da rannañ ha da vruzhunañ muioc'h c'hoazh an Emsav a oa dres o paouez tarzhañ d'an ampoent. Empennañ a c'helled ur Strollad nevez mennet da adunaniñ Emsav hag awenet gant pennaennoù ar gristeniezh a c'helle bezañ bet degemeret gant stourmerion a bep seurt hogen armodiñ bodañ ar gristenion hepken en ur stroll bennak, reolet gant an Iliz war ar marc'had (rak henezh oa dezo Erwan ar Moal) ne c'helle dougen da heuliad nemet serriñ ar re-mañ en ur geto hep dor-zigor ebet war un emled bennak. A-hend-all, setu penaos e veize Erwan ar Moal roll ar gevazhe nevez :

"Quelles seront," emezañ, "les relations de cette Association avec les autres groupements? Elles pourraient être des ententes techniques comme l'entente des écrivains bretons où tous les auteurs peuvent avoir part, sans distinction d'opinion..."

Evit bezañ reizh e-keñver Erwan ar Moal e ranker notañ ez arnodas lakaat ar Strollad nevez en e blomm penn-da-benn da Vreizh, er Gorre koulz hag er Goueled. E-touez an izili anezhañ edo ar beleg Joanno, Du Chauchix (Ronan de Kermene) a oa unan eus diazezerion ar Strollad broadel kentañ, Cornou, beleg ha rener an "Nouvelliste" e Roazhon (1). Divizet e oa bet sevel kengoriou rannvroel hag e devoud e voe krouet un nebeut diouto, e Leon, da skouer (e-lec'h en em gave Yann-Vari Perrot, de Mun, Kermenguy); e Ploue, gant Cottin; Yann-Ber Kalloc'h a oa ezel eus ar gevazhe(2).

Klasket e voe ledañ ar gevazhe e rannvro Wreg. Loeiz Herrieu avat ne oa ket tomm tre evit plediñ eno gant ur gevredigezh nevez (2); respont a rae en un doare skiantek kenañ ne oa ket dav bodañ katoliked an Emsav e Gwened o veza ma oa katoliked eus holl emsaverion e rannvro. E gwirionez, evel ma stade Yann-Vari Perrot e unan, en devoa Loeiz Herrieu - koulz ha Taldir - diegi da genlabourat gant emsaverion ar rannvroioù arall: reolemm ar c'hiladalc'helezh emsavel a oa lakaet da dalvezout adarre hogen n'eus forzh penaos

(1) Mumudoù diwar-benn ar gevazhe-mañ a c'heller kavout war "Groz ar Vretoned": 7 Genver 1912, 21 Genver 1912, 4 c'hwevrer 1912.
(2) En abeg d'o rannyezh moarvat e oa diaes klenkañ Gwenediz e framm hollek an Emsav.

ne oa ket Loeiz Herrieu e unan o nac'hañ kenlabourat e Gwened; beleion eskopti Gwened a oa ken enebet all ouzh pep mennad unvaniñ: Duleon, Marichal, ha Job ar Bayon, pergen.

En abeg da youl fall Wenediz ne voe ket tu da genurzhañ aozadur start ebet. Plegañ a rankjod da ober eus an "Engleo" un dastumad hiniennoù, o labourat pep hini diouzh e du, isurzhiat d'o eskoptioù kevateb hag o sentiñ strizh outo. Diferet e voe eveljust ober ur c'hendalc'h bep bloaz hag envel da rener ar gevazhe bep bloaz ivez sturier ar c'hevredad rannvroel ma veze graet ar c'hendalc'h war e dachenn (1) (kuit a gevezerezh da vegañ droukrañ ar re na vijent ket bet dilennet: houmañ oa ur gavadenn bolitikel a zoare, ret eo anzav!) A-hervez e tlee bezañ anvet ur poellgor-kreiz: en em c'houlenn a c'heller avat da betra en devije servijet o vezañ ma vene pep kevrenn rannvroel sujet strizh d'an eskoptioù lec'hel a-hend-all.

E seurt plegennoù ne c'helle hevelep arnod nemet ober tro-wenn. Lavaret hon eus o devoa nac'het Gwenediz dont tre en "Engleo". Hogen ar c'hrouviaded a oa bet klasket dedennañ a oa chomet ken ginet all. Nag Huon de Penanster, nag ar c'hont d'Herbais - a oa deuet tre koulskoude en Unvaniezh Arvor - n'o devoa asantet da reiñ skoazell d'ar gevazhe nevez evit chom hep feukiñ ar Markiz de l'Estourbeillon. Hag an devoud-mañ a zo talvoudus da verkañ rak diskouez a rae e vane ar gristenion e diabarzh an Emsav rannet etre rumm an'araogelourion" diazezet dreist-holl e Gwalarn ar vro - levezon de Mun, ar "Sillon" h.a. a voe kreñv e Leon - hag ar "virelourion" a chome bodet endro d'ar "Markiz" hag a oa staliet dreist-holl e Gevred Breizh ().

War ar marc'had - ha kement-se moarvat a voe penngiriek d'ar c'hwitadenn - n'en doa an "Engleo" tamm frankiz ebet dre ma oa stag - egiz m'hon eus merket - ouzh un Iliz a oa, e devoud, reolet gant ar Stad c'hall - goude mhe dije houmañ he heskinet - ken na c'helle a-benn ar fin, ren politikerezh ebet diforc'h diouzh ar galloud stadel m'edo en e zalc'h.(3). Dre se ivez ne c'helle ket

(1) Kv. KROAZ AR VRETONED. 3 Ebrel 1912. (2) Ar ramadur-se a voe kaoz evit darn da zrouziwezh ar "Bleun-Brug" politikel etre 1926 ha 1930, pemzek vloaz war-lerc'h. (3) N'eo ket dre 'n arbenn ma oa bet distaget an Iliz diouzh ar Stad e oa hounnezh dieupoc'h en he c'heñver; en eneb, muioc'h suj e oa c'hoazh eget a-raok rak hec'h arc'hweladur a zibenne diwar neuze a-grenn diouzh tid ar galloud stadel reolour.

an Englev e unan ren politikerezh dishual ebet. An dra-se eo a anad end-eeun diouzh ar "program" a oa kinniget d'an izili hag a venegomp bremañ da heul :

"réveiller le patriotisme, favorisant toutes les manifestations de la vie bretonne dans l'ordre intellectuel, social et économique et particulièrement l'emploi de la langue bretonne... en tant que catholique agir sous l'inspiration du catholicisme et sous sa direction..."

Geriet evel henn e hañval ar steuñv-mañ bezañ gwall ziresis ha gwall glouar, ha, moarvat, ne glote ket seurt klouarded, da vihanañ, gant mennozioù taer Yann-Vari Perrot. Gant se ne c'helle ket dedennañ an danvez stourmerion a c'houlenn ur pal entanusoc'h eget "dihuniñ ar vrogarouriezh" hep ma vije meneget zoken un amkan fetis bennak (1).

=====

(1) Kenderzhel a raimp da arsellout degouezh ar stourmerion gristen ha marksat en eil hag en trede Emsav.

T A O L E N N A N E I L L E V R E N N

- 7. Rakkerzherion ha stourmerion digenvez.....p.91
- 8. Ar gelaouenn "SPERED AR VRO".....p.95
- 9. An darempredoù etrekeltiek e deroù ar c'hantved.....p.101
- 10. "Kevredigezh Broadel Breizh" ("Union régionaliste Bretonne").....p.107
- 11. Kevredigezhioù arall : "Gorsedd" ar Varzhed.....p.119
- 12. Mennozioù Taldir etre 1898 ha 1911.....p.135
- 13. Mennozioù Erwan Berthou a-raok ar brezel bed kentañ.p.147
- 14. Ar gelaouenn "AR VRO" 1904-1914.....p.155
- 15. "UNVANIEZH ARVOR" a-raok ar brezel-bed kentañ.....p.169
- 16. Arvezioù eus ar stourm evit ar yezh a-raok ar brezel bed kentañ : Breuriezh ar brezhoneg ha strivadoù arall.....p.185
- 17. Emzalc'h ar c'hostezennoù gall e-keñver ar c'hentañ Emsav : degouezh an Iliz.....p.195
- 18. Roll hag obererezh ar Gatoliked en Emsav kentañ.....p.199



